

## **Pennadou A. Keravel**

Notenn : A-bouez ema ar pennadou-mañ evid kompren istor ar stourm evid ma vefe kelennet ar brezoneg er skoliou.

15-3-1990

### **Eur vodadeg nevez euz KUZUL BROADEL ar YEZOU ha SEVENADURIOU-RANNVRO**

Ar Huzul-ze, - e ano galleg : « Conseil National des Langues et Cultures Regionales », - a zo bet savet e 1985 war goulenn Jack Lang, neuze ministr ar Zevenadur (hag a-nevez abaoe warlene).

Bodet eo bet ar Huzul-ze e 1986 ha 1987, ha beb tro digoret e "labouriou" gand kenta Ministr an ampoent, Fabius an taol kenta, Chirac an eil gwech... An eil hag egile, komzou brao ganto diwar-benn talvoudegez yezou ha sevenaduriou ar "Rannvroioù" hag a dleer mired, gwarezi, enori hag all... Hag o tamhoulenñ ouz ar Huzul ha daoust hag-eñ e vefe mad soñjal en eul lezenn evid kement-se...

Ha dres, beb tro 'z eus bet lakeet gand ar Huzul, e penn kenta e ginnigadennou, ma vefe savet eur statut lezennel evid yezou ha sevenaduriou ar Rannvroioù. Eur statut pe lezenn a-ziazez bet disklêriet dija evitañ... eur 36 bennag a skridou danvez-lezenn abaoe tregont vloaz... Skridou bet kinniget gand bagadou kannaded euz kement kostezenn a zo, - ha lod anezo gand oll deputeed Breiz...

Ha padal, n'eus bet lakeet da vad war ar studi unan bennag euz al lezennou kinniget nemed diou wech, e 1962 hag e 1963... Heb ma teufe morse avad skridou ar raporterien (Leduc ha Barniaudy) dirag Kambr an Deputeed... Abaoe 1963, n'eus bet kel ebed euz ar studiadenñ diwar-benn kudenn ar yezou-rannvro (pe minorezel) a-berz Komisionou ar Gambr pe ar Senat... Eur wech hepken eo bet krog an depute karget, sañset, euz an afer, da ober e dro a Vro-Hall evid kaoud aliou ar gelennerien hag an emzavioù kulturel. N'eus deut, avad, skrid-danevell pe studiadenñ ebed da heul e enklaskou, daoust ma oa bet roet gantañ da houd, da skwer dirag tud Skoliou-Meur a Vreiz hag a Vro-Oksitania, e vefe divennet gantañ mennad eun danvez-lezenn... An urz a oa deut a-berz ar gouarnamant da gloza an enklask ha da jom peoh hiviziken war an tamm kudenn kasauz-se...

Hag abaoe tregont vloaz hag ouspenn e ranker derhel da stourm evid klask kaoud neventioù war boent pe boent e plasig ar brezoneg (hag ar yezou all) e-barz ar skoliou, ar mediaou hag ar vuhez foran...

Ha setu ma teu ar helou e vo bodet a-nevez Kuzul ar Yezou ha Sevenaduriou Rannvro... Eur helou o tond dre hantererez Charles Miossec, kannad Penn-ar-Bed, Renner Kuzul departamant ha Mêr Landivizio.

Charles Miossec e-noa kaset da Jacq Lang eur "goulenn dre skrid" da houd petra a fell d'ar gouarnamant ober evid an daou zanvez-lezenn kinniget e Kambr an Deputeed abaoe warlene (abaoe digor al "lezennadur" nevez eta) diwar-benn statut yezou ha sevenaduriou-rannvro Bro-Hall. Goulenn a ree an depute breizad pedavare e vo studiet ar skridou-ze...

Ha setu m'eo deut respont Jacq Lang : bez' e taol evez mad, emezañ, Ministrerez ar Zevenadur ouz kement a zell ouz divenn ha kas war-raog ar yezou ha sevenaduriou-rannvro... Abaoe 1981, 'z eus bet lakeet gantañ da vond war-raog eur politikerez da harpa ha da dalvoudekaad ar zevenaduriou-rannvro. Da heul e ginnigadenn, e-neus ar Gouarnamant krouet, e miz Gwengolo 1985, eur Huzul broadel ar yezou ha sevenaduriou-

rannvro. Kemenn a ra Jacq Lang e vo bodet ar Huzul-ze e penn kenta ar bloavez 1990 hag e vo goulennet ouz an Asamble e ali diwar-benn eul lezenn-diazez ar yezou-rannvro.

Respont J. Lang da Ch. Miossec a zo deizadet an 11 a viz Kerzu ; embannet eo bet war ar J.O. an 22 a viz Genver ha kaset deom ar 14 a viz C'hwevrer... Krog eo ar bloavez 90 abaoe eur pennad ha n'eus ket bet klevet e oa bet bodet Kuzul ar Yezou evid an ampoent...

Emichañs ne zaleo ket kalz ken, peogwir e-nefe ar Henta Ministr, Michel Rocard, roet da houd, hervez ar helaouennou, e vo goulennet ouz ar Huzul (bet nevezet eun darn euz e izili, hervez boaz beb 2 pe 3 bloaz), hag-eñ ez eus ezomm euz eul lezenn ar Yezou ha Sevenaduriou a Vro-Hall...

Muiohig e vo gouezet, marteze, da heul kendalh-meur ar P.S. e Roazon... mar bez roet eur respont da houlennoù strolladoù breizeg a zo ?...

Da horto, gourhemennou a zo dleet da Gannad-Mêr Landi evid ar goulenn bet kaset gantañ da Vinistr ar Zevenadur.

**STRIVADENN E.L.Y.**

**("EVID LEZENN AR YEZOU")**

**Dibenn kuzuliadeg ar Huzulioù Tiez-Kêr o tostaad.**

Ema "kest" Mennadour ar Huzulioù-komun evid Lezenn-dre-vraz ar Yezou-Rannvro o vond war he zalarou. N'eo ket souez e vefe berrohig ar roll amañ dindan evid an hini diweza bet embannet, rag en eun departamant eo koulz lavaret echu an traou : e Penn-ar-Bed, gand 281 Mennad war 283 a gomunioù o-deus ar peuz oll euz ar Huzulioù roet eun ali a-du gand ar statut goulennet. Hag evid an daou zepartamant all, – da lavared eo lodenn Reter Breiz-Izel, ganti dre vraz an hanter euz departamantchoù Aochou-an-Arvor hag ar Morbihan, – e vo gonezet c'hoaz eun toulladig Mennadour da heul liziri nevez pe divizou dre bellgomz.

E gwirionez e heller lavared he-deus greet berz braz strivadenn or Homite "**Evid Lezenn ar Yezou**" (E.L.Y. da vond berroh). A-raog rei chifrou diweza ar Mennadour, – e penn kenta miz Ebrel, – setu amañ roll an Tiez-Kêr o-deus votet hini pe hini euz or skridou, abaoe ar 15-3-90 :

**Gavr - Trogeri - Gidel - Rianteg - Lomikelig - Sant-Pier-Kiberen - Pleheneg - Redeneg - Breh - Irvillag - Logeginer-Plouziri - Landivizio - Lanrivoare - Pondivi (Poñdi) - Koz-Meal - Tregone - an Treou (Kerne) - ar Hloastr (St-Tegoneg) - Klegereg - Baod** (eil mennad)

Gand se, gwelom 'ta peleh emaoñ erru e pep hini euz departamantchoù Breiz-Izel :

– E **Penn-ar-Bed**, hen lavaret on-eus kentohig, **281** Mennad a zo bet kaset pe kemennet deom : 281 Huzul-komun war an 283 a zo en departamant o-deus disklêriet emaint a-du gand or Huzulioù-Meur o houlenn Lezenn-stur ar Yezou. Da lavared eo **99,29%** anezou!

– En **Aochou-an-Arvor**, ez anavezom respontou a-du **111** Kuzul euz an 168 a gomunioù a gontom e lodenn vrezoneg an departamant <sup>(1)</sup>. Da lavared eo **66,07 %** euz ar Huzulioù Tiez-Kêr a gaver eno : an diou drederenn anezou, eta.

– E departamant ar **Morbihan**, ez eus bremañ **73** war an 129 a gomunioù euz lodenn vrezoneg ar vro (1) hag o-deus o Huzulioù moueziet a-du. Ar pezh a ra **56,58%** diouto. Ha n'eo ket echu : ne vim ket pell euz an 60% heb dale!

– Setu 'ta e Breiz-Izel en he fezh (580 komun : 283 + 168 + 129) ez eo anavezet ganeom a-benn bremañ **465 Mennad** a-du gand sevel ha lakaad en implij al lezenn-dre-vraz goulennet. Kement a ra **80,17%** euz ar "**brezonegva**".

Ha pa lakeer er gont an **70** Mennad bet moueziet gand Kuzulioù Tiez-Kêr euz **Breiz-Uhel** oh harpa o henseurte euz Breiz-Izel, e kaver **535 a Vennadour en oll**. Bez' e ranker derhel soñj n'eo bet kaset goulenn E.L.Y. nemed d'eun niver bihan a Vêred euz Bro-Hallo Aochou-an-Arvor hag ar Morbihan (dreist-oll ar Vêred hag a zo war eun dro Kuzulierien-Veur).

\*

Emeur eet a-benn bremañ en tu all d'an ampoent merket da genta evid kloza or hlask Mennadou. M'eo peurechu or strivadenn e Penn-ar-Bed, n'heller ket avad chom heb rei eur mizvez pe zaou muioh a zale d'eun toullad Kuzuliou euz an daou zepartamant all ha n'o-deus ket d'en em voda a-nevez a-raog dibenn miz Ebrel pe tra ken nemed e-doug miz Mae. Ha tro on-nevo evel-se da gonta eun toullad muioh a vennadou!

Kement-se, evelato, ne viro ket ouzom staga da lakaad da dalvezoud azaleg bremañ an eostad bet dastumet beteg-henn. Kaset on-eus kelou dija da oll gannaded Breiz er Parlamant, deputeed ha senatourien. Hag e troiou dibenn ar miz e krogo on emlewadennou gand renerien ar Huzuliou-departamañchou da ginnig dezo peb a zastumadenn euz skridou-divizou Tiez-Kêr hag ouz o fedo kas kelou d'ar Gouarnamant. Hag evid ma pouezint warnañ ken na roio tu d'ar gannaded studia da vad al lezenn goulennet abaoe keid-all... ha ma hello neuze ar Parlamant voti anezi.

\*

\*\*

A-dra-zur, n'emeur ket erru, evid ar mare, e penn an hent!... Gand frouez strivadenn E.L.Y. avad setu diskouezet splann n'eo ket goulenn statut ar Yezou tra ken nemed c'hoantadenn eun dornad tud, eun toulladig stourmerien gwall nebeud a skoazell a-berz ar bobl. **Pevar-ugent dre gant** euz dilennidi Breiz-Izel oh harpa eur goulenn seurt-se, daoust hag-eñ e hello Renerien Bariz chom heb teurel evez ouz ar pez a venner kaoud evid or yez en or bro evel ma vez roet dija e broiou all Europa evid koulz lavared kement "yez-rannvro pe minorezel" implijet enno?

-----

#### **Notennou:**

(1) Komunioù e tu Kornog eul linenn o vond euz Plouha da Gorel (pe komunioù hanter-vrezonég - hanter-hallo pe hallekeet). Da lavared eo : Plouha, Plian, Tresigne, Bringolo, Sant-Yann Kerzeniel, Lanrodeg, Sant-Fiakr, Senon, Sant-Konan, Kanivel, Korle, Plusulian (pe Pluzian), Sant-Jelven ha Korel. Eun dra da verka : ma n'o-deus ket votet (bete-vrema) an oll gomunioù brezonég-mañ, an oll gomunioù hallo en tu all d'al "linenn" o-deus roet o asant da vennoz al Lezenn-stur pe statut...

(2) Merka a ran amañ da heul evid ar Morbihan ar homunioù a gontom evel komunioù euz Breiz-Izel, e tu kornog eul linenn o vond euz Sant-Inan da Senolf ha Trefleyan (e-kichen Kêr-Wened) : Sant-Inan, Kergrist (darn), Neulieg, Poñdi, Noal-Poñdi, Kerfourn (darn), Nein, Mourieg, Begnen, Sant-Yann-Brevele, Plaodren, er Sterwen (Monterblanc), Senolf, Trefleyan. Ne gontom ket e Breiz-Izel: Noyaleu, Sant-Armel, Sarhao, Lokentaz, en Arhon, daoust ma chom dalhmad enno tud koz oh ober gand brezonég bro-Wened da yez pemdez.

**Eveziadenn** : Marteze n'ema ket a-du ganeom lennerien a zo diwar komun pe gomun meneget en daou roll-mañ a-zioh, homañ pe eben o veza da gonta, pe e Breiz-Izel pe e Breiz- Uhel... Pedi a ran ar geneiled-se da rei o ali din da anaoud, gand skriva da E.L.Y., – Comite Breton, 40bis ru ar Republik, 29200 Brest

**Strivadenn E.L.Y.  
(Evid Lezenn ar Yezou)  
war he echu**

Emaom o skriva kement-mañ d'an 10 a viz Mae, a-boan diou zizunvez goude beza roet da **Andreo** ar **Merser** ar skrid ho-peus kavet e niverenn miz Ebrel... Berrig e vo eta an taol-mañ roll ar Mennadou nevez-erru ganeom. Ouspenn-ze, evel ma lavarem er miz all, bez' ema kest Mennadou E.L.Y. war he zalarou. Da lavared ema or strivadenn...

... koulz hag echu e departamant **Penn-ar-Bed**, war-bouez diou pe deir gudennig emaom o lakaad dirouestla e-sell skridou-diviz a jom da gas deom pe deziadou da spisaad...

... damechu pe tost da veza en **Aochou-an-Arvor**, daoust ma'z eus dalhmad eun niver ha n'eo ket dister a Guzuliuou euz bro-Wengamp, euz Bro-Ouelo ha dreist-oll euz Kreiz-Breiz hag a zo chomet direspont ouz or goulennou...

... hag evid ar **Morbihan**, eun tregont bennag a liziri nevez a zo bet kaset, ar miz all, hag a dlefe degas eur rummadig muioh a Vennadou Kuzuliuou.

Setu amañ eta ar homuniou nevez degemeret gand o Huzulierien Mennad R.L.Y., e miz Ebrel (goude bet hini Baod, a oa o kloza or rollad diweza) :

– **Gurunhuel - Plouisi - Sulnieg - Kalanel - Loueg - Noial-Poñdi - Lomaleu - Kawan** (eil mennad degemeret; skrid hir, hini Kuzul Departamañchou ha Kuzul Breiz) - **Sant-Hern** (eil mennad ivez ; skrid berr).

Re abred eo evid rei chifrou da vad ar Mennadou dastumet. Da genta dre ma chom c'hoaz eun niver bennag a skridou-diviz (pe "divizadegou") Kuzuliuou Tiez-Kêr a zo ha n'int ket erru ganeom, daoust m'eo bet kemennet int bet moueziet. Red deom goulenn adarre... Kement-se o komz euz ar Mennadou kinniget gand E.L.Y....

Evid pezh a zell ouz ar Mennadou bet kinniget e 1987 gand U.S.B.I.F. ha bet votet, hervez kelaouenn ar Strollad-mañ, gand eun toullad Kuzuliuou Tiez-Kêr, e chom ivez eur gudenn bennag da zirouestlta.

Dre vraz, roll ar Homuniou a Vreiz bet degemeret ganto eur Mennad evid Lezenn-stur ar Yezou a dlefe beza peurglozet gand e troiou 550 a anoiou-komun warnañ.

**Albert TRIVIDIC**

Marvet eo, ar miz tremenet, or heneil koz Albert Trividig, skolaer war e leve e Gwayen, anavezet dre-oll e bro-Gerne evel mestr-c'hoarier peziou e brezoneg.

Nag a abadennou a beb seurt du-mañ, du-hont, euz Kemper da Zouarnenez, bet klevet enno Albert o tisplega gand e gamaladed euz strollad bro ar Hap hini pe hini euz peziou-

c'hoari Per-Jakez Heliáz... pe o tistaga, e-unan-penn, "Yann ar Paotr mad", pe c'hoaz, gand e geneil Herri Donnard, "War an dachenn fobal"...

Respont a ree dalhmad "ya" d'ar goulennoù a veze greet outañ gand strolladou ar Skoliou pe Gouelioù ar gêr-mañ-gêr pe kevredigeziou stourmerien ar Rezistañs, da skwer. Hag e teue gand e vagadig c'hoarierien da rei da gleved unan bennag euz peziou "Biskoaz kemend-all!"

N'eus ket kalz euz stajou "Ar Falz", ar rummad kenta anezo, ha n'eo ket deut da hoari hini pe hini euz ar fentigelloù ijinet gand e geneil Jakez. Dond a reas daou pe dri bloaz diouz reñk d'ar gouelioù brezoneg aozet ganeom e Rekourañs, o tegas da vrezonegerien Kêr-Vrest eur blijadur dispar gand rei dezo da gleved o yez kenta... Ne vo ket gwelet, siwaz, gand H. Donnard, an Itronezed Favereau ha Le Roy, da rei eun taol-dorn deom, e Kemper, da stajou Al Leur Nevez - Ar Skol Vrezoneg... nag e pardaeziou Kemper-goz, da vare Gouelioù Meur Kemper.

Evidom-ni, ne zizoñjom ket eo gand e skoazell on-oa gellet rei lañs, e Kêr-Wayen, d'ar henta hini euz an ugent bennag euz stajou kenta "Ar Falz". Ha dalhmad eo bet Albert e-touez ar re oh harpa or strivou evid gwiriou ar brezoneg.

Ouspenn-ze, ne zizoñjom ket menegi amañ e oa bet Albert Trividig, e-pad bloaveziou du ar brezel diweza, unan euz ar re a gase war-raog ar Stourm Kuz e Kornog-Kerne.

### **Kelou euz Bro-Gorsika**

Daoust hag eñ e vefed, a-benn ar fin, e Bro-Gorsika, war-nez rei tu da gelennerez ar horseg da vond war-raog ?

Da heul nousped a veajou euz Ministred an Diabarz hag an Deskadurez, euz ar Henta Ministr ivez, setu ma vefed krog da stumma mistri an Derez Kenta war gelenn yez ar vro.

Emaom o paouez degemer al lizer bet kaset gand Rener Akademiezh Ajaciu da oll skolaerien ha skolaerezed an Enezenn... N'emaom ket boaz da embann e "Brud Nevez" skridou e galleg. Padal, kredi a reom e talvez ar boan lakaad amañ da heul evel m'ema al lizer-ze kentoh eged ober eun diveradenn anezañ e brezoneg...

ACADEMIE DE LA CORSE      AJACCIO LE 30 JANVIER 1990  
RECTORAT

LE RECTEUR DE L'ACADEMIE DE LA CORSE

à Mesdames et Messieurs  
Les Instituteurs de l'Academie

S/C de Messieurs les  
Inspecteurs d'Academie

### **URGENCE SIGNALEE**

Le Gouvernement s'est fixé pour objectif la généralisation de l'enseignement du corse dans le premier degré. Une enquête à laquelle vous avez bien voulu répondre nous a permis de mieux saisir l'état actuel de cet enseignement et d'évaluer les besoins de

formation des maîtres. Aussi, dans le cadre du Contrat de Plan (1990-1993) 36 stages de 60 h. regroupant 15 participants chacun seront-ils organisés.

En raison de l'impossibilité d'assurer le remplacement de tant de stagiaires, ces stages se dérouleront hors du temps de travail et dans le cadre de l'Action Culturelle. C'est dans ce cadre que sera délivrée une indemnité de 125F/heure.

La fiche ci-jointe vous propose trois niveaux de formation et quatre formes de répartition dans le temps, entre lesquels il vous appartient de choisir.

Il va de soi que la présence à un stage de langue corse constitue en elle-même un engagement moral des stagiaires à réinvestir ensuite les acquis dans leur classe. Je suis certain que vous honorerez cet engagement.

Le Recteur  
Christian VERLAQUE.

(Eur fichenn enskriva a oa da heul lizer ar Rektor, o rei d'ar skolaerien da zibab etre stajou a ziou zizunvez e-pad an ehan-skol, 2 staj eur zizunvez, stajou teir eurvez beb merher e-pad 20 sizun pe stajou 1 eurvez hanter diou wech ar zizun e-pad 20 sizun).

Greom ar gont : 36 staj a 15 den = 540 a stajidi. N'eo ket 4 pe 5 devez gand eun ugent bennag a gelennerien evel ma'z eus bet greet, amañ e Breiz-Izel evid ar helenn brezoneg, e-pad eun nebeud bloaveziou, da heul kelhliziri Savary, e 1982-83 ha da houde...

Pehini eo ali sindikajou Bro-Gorsika diwar-benn ar seurt stummidigez gand ar Gouarnamant evid lakaad kelenn ar horseg? — En em houlenn a ra ar SNI-PEGC ha dibabet eo bet an efedusa formulenn gand sevel e diavêz an amzer-skol stajou pêet... Ahend-all, an S.C.J., sindikad distag ar skolaerien broadelourien, a zo a-du gand stajou eiz sizun (evid ar vistri oh anaoud ar yez), ha gand krouidigez eur Greizenn-stummidigez aratoz-kaer evid kelenn ar Horseg.

Forz penaoz, pell braz emaom euz kement a vez greet (ha daoust hag e vez greet dalhmad?), amañ, e Breiz, evid stumma ar vistri war gelenn ar brezoneg.

Goulenn a raim ouz ar heneil a Vro-Gorsika emaom e darempred gantañ peseurt implij a reer euz an divizou nevez evid kelenn ar Horseg.

**E.L.Y.**  
**o vond da gloza e strivadenn**

Hen lavaret em-eus ar miz all : emañ erru gand dibenn on tamm "kest" Mennadou Kuzulioù Komun o rei da houd e fell dezo harpa or Huzulioù-Meur o houlenn ma vefe savet eul Lezenn-stur pe "statut" evid ar brezoneg ha yezou-rannvro Bro-Hall.

N'eus nemed eun toulladig anioù komunioù da lakaad da heul ar roll diweza bet embannet war "Brud Nevez" - niverenn miz Mae :

- **Billiers - Douarnenez** (eil mennad; kenta hini, e 87) - **Montauban** (Breiz-Uhel; kenta mennad e 1987, USB) - **En Intel - Treglonou - Teis - Arvor-Baden - Treduder Pañvrid-ar-Beskont** (eil mennad; kenta hini e 1987, U.S.B.) - **Plunia - Er Gemene - - Logigner-St Tegoneg Plougoñver - Mourieg. Logonna .**

Gand-se, setu ma'z eus bremañ en oll, - o konta ar Mennadou dastumet gand an USBIF e 87<sup>1</sup>, - 547 gomun a Vreiz oh harpa goulenn Kuzulioù-Meur Breiz... Marteze e tegouezo c'hoaz kelou digand eun toulladig bihan a gomunioù bet daleet evid kas deom o skridou-divizadenn, hag e vo tizet marteze eun disterra en tu all da 550...

Ar 547 Mennad ez eus anezo 476 o tond euz komunioù a Vreiz-Izel ha 71 o tond euz komunioù a Vreiz-Uhel. Derhel soñj eo bet kaset liziri-goulenn E.L.Y. da oll Vêred ar 580 a gomunioù a gontom e Breiz-Izel <sup>(2)</sup>, - pa n'eus bet kinniget or Mennadou nemed hantad a Vêred euz Breiz-Uhel...

Setu niver ar Mennadou departamant dre zepartamant a Vreiz-Izel :

. **Penn-ar-Bed** : 281 Mennad a-berz an 283 a gomunioù a zo en departamant (eur fazi bihan a oa en eur gont roet kentoh : kontet on-oa eur Huzul Ti-Kêr ha ne oa ket bet gwelet gantañ skrid E.L.Y. Ar peza ra 99,29 dre gand euz Kuzulioù-Kêr Penn-ar-Bed....

. **Aochou-an-Arvor** : 116 Mennad anavezet beteg-henn evid 168 a Gomunioù e-barz lodenn vrezoneg an departamant, - da lavared eo ez eus bet mennadou a-berz 69,04 % anezo.

. **Morbihan** : 79 Mêr o-deus kemennet deom eo bet moueziet unan euz ar skridou kinniget. Kement-se war ar 129 a gomunioù a anavezom e brezonegva an departamant. Ar peza ra **51,24 dre gant** diouto.

Ez eus eta :  $281 + 116 + 79 = 476$  a **Vennadou** bet divizet gand Kuzulioù-Kêr a Vreiz-Izel, - da lavared eo gand **82,06 %** euz komunioù ar brezonegva.

Kement ha beza oh ober gand chifrou, eun dra zo da veza lavaret ouspenn-ze eo n'on-eus kavet meneg, war an oll skridou-diviz kaset deom, nemed euz **daou-ugent** (40) kuzulier pe guzulierez hag o-deus kavet gwelloc'h chom heb kemer perz e mouezidaeg ar mennad dirag o Huzul. Ha tra ken nemed **trizeg** kuzulier pe guzulierez hag o-deus votet

---

<sup>1</sup> an USBIF e 87 : Ne gontom nemed eur wech, evel just, ar humunioù o-deus votet tro-ha-tro mennad USBIF (e 87) hag unan euz ar re bet kinniget gand E.L.Y. (89-90).



a-eneb ar Mennad degemeret gand ar guzulieren all... Kement-se war eun **nao mil daou hant** (9.200) bennag a izili euz ar huzuliu Tiez-Kêr hag o-deus kemeret perz e moueziadegou ar re-mañ.

Ha ma reer gand chifrou niveradeg 1982 (n'heller ket evid c'hoaz kaoud chifrou niveradeg ar bloaz-mañ), an 9.200 a guzulieren o-deus kemeret perz er moueziadagou-ze a zo bet dilennet e komuniou a oa enno, eiz vloaz a zo eta, eur bobl a **1.346.216 a** dud. Eur bobl hag a hellfer konta e oa enni war-dro 900 pe 950.000 a elektourien <sup>2</sup> ... ar re o-deus dibabet kuzulieren ar 476 komun a Vreiz-Izel moueziet ganto a-du gand al lezenn-stur evid yez ar vro...

Da bep hini ober e varnadenn war ar guchennad chifrou-mañ !... Ha da beseurt e vo implijet, bremañ, dizohou strivadenn E.L.Y., - a houlennoh ? Komzet e hello beza euz an dra-ze ar miz a zeu.

---

<sup>2</sup> 950.000 a elektourien : Gand konta ez eus war-dro ar pemp seizvedenn euz niver eur boblañs hag ez eus anezo elektourien. Marteze n'eo ket reiz ar hement-se avad.

**KUZULIOU-KER  
BREIZ-IZEL  
O HOULENN EUL LEZENN-STUR  
EVID AR BREZONEG HAG AR YEZOU ALL E BRO-HALL**

Ema or strollad "Evid Lezenn ar Yezou" (E.L.Y.) o paouez lakaad eun termen d'ar strivadenn pe kampagn roet lañs dezi daou vloaz a zo. Kinniget 'oa bet neuze da Guzuliou-departamant Breiz-Izel ha da Guzul-Breiz voti eur skrid o houlenn ma vefe, a-benn ar fin, savet eul Lezenn-stur, eul lezenn-dre-vraz pe "statut" oh embann gwiriou ar brezoneg ha yezou all Bro-Hall da veza implijet er Gelennadurez, war ar media hag er zervichou publik.

Eur skrid a-zoare a oe degemeret, e penn diweza 87 hag e penn kenta 88, gand Kuzuliou-departamant Penn-ar-Bed, Aochou-an-Arvor hag ar Morbihan, ha dioustu goude gand ar C.E.S. ha Kuzul-Breiz. Kaset e oa bet neuze ar skrid-se gand E.L.Y. da oll Vêred Breiz-Izel gand pedi anezo da ginnig d'o Huzulierien voti eur pennad berrohig o rei da houd emaint a-du gand ar goulennou displeget e skrid pe "Mennad" ar Huzuliou-Meur.

Ha setu ar helou mad on-eus da rei d'anaoud da zivennerien ar brezoneg : e penn kenta miz Eost, e konter **481** komun a Vreiz-Izel hag o-deus o Huzuliou-Kêr roet o asant hag o skoazell da houlenn an Departamañchou hag ar "Rannvro". - Pevar-hant-unan-ha-pevar-ugent a guzuliou war ar pemp-kant pevar-ugent (**580**) a Gomuniou a gontom e Breiz-Izel !... Kement-se oh ober **82,93%** anezo, da lavared eo en tu all da beder gomun war bemp...

Ha da gredi zo ez erruo c'hoaz da E.L.Y. kaoud kel euz meur a skrid all, moueziet gand Kuzuliou bet daleet ganto o has d'or zekretourien kerkent ha degemeret...

Euz departamant Penn-ar-Bed, avad, ne hello ket erruoud kalzig ken a skridou digand an Tiez-Kêr : war **283** a gomuniou, n'eus nemed DIOU (ya, **2**, a lavarom) hag a zo chomet heb voti unan pe egile euz ar skridou kinniget gand E.L.Y.... An **281** all, da lavared eo **99,29%** euz komuniou Penn-ar-Bed, o-deus disklêriet sklêr ha frêz ez int a-du gand goulenn Kuzuliou-Meur or Bro...

Bez' e tleer rei da houd, ouspenn-ze, o-deus eun toullad brao a Guzuliou-Kêr a Vreiz-Uhel moueziet peb a Vennad a-du gand Kuzuliou Breiz-Izel. War eur hant Kuzul euz ar Vro-Hallo m'eo bet kinniget dezo, unneg-ha-tri-ugent (**71**) o-deus greet degemer-vad d'ar skrid kaset gand E.L.Y. pe gand U.S.B.I.F.. Diskouezet o-deus evel-se e fell ganto harpa stourm Breiz-Izeliz evid ar brezoneg hag evid sevenadur ar vro, - eur sevenadur m'eo kultur-pobl ha yez Breiz-Uhel lod anezañ. Ha gand-se, setu m'eo **552** Mennad hag a zo bet dastumet e Breiz, beteg-henn, evid al Lezenn-stur. (Selled ouz an daolenn, pelloh).

Ha bremañ, peseurt implij a vo greet gand E.L.Y. euz ar berniad Mennadou dastumet ?... Feiz ! da genta tra, diskouezet e vo or pakadou skridou da Benn-Renerien on Asambleou-departamant ha Breiz, ha roet kelou da Gannaded ar vro. Gand karga anezo oll da rei da gompren d'ar Gouarnamant e ranko derhel kont euz youl ar Vretoned dre lezel ar Parlamant da studia ha da zegemer da vad al lezenn goulennet gand kemend-all euz on dilennidi.

Disklêriet eo bet stard ha didro gand or Huzuliou-Meur, ha kement-se aprouet gand kantadou a Guzuliou-Kêr, penaoz n'hello ket Bro-Hall chom pell ken, daou vloaz a-raog 1993, war-lerh broiou all Europa evid pezh a zell an implij da ober gand yezou ha sevenaduriou heb oll rannvroioù.

Eun dra a-bouez, da echui ar gemennadenn-mañ : eun emweladenn a zo bet e Kemper, d'an 2 a viz Gouere, e Ti-Penn-ar-Bed, etre eun toullad dileuridi euz E.L.Y. hag an Ao. J.-Y. COZAN, kenta Eil-Prezidant Kuzul an departamant, hag eñ oh ober en ano an Ao.

MIOSSEC, Prezidant an Asamble. Displeget eo bet d'an Ao. Cozan pal ha dizohou strivadenn E.L.Y. ha roet dezañ evid beza diskouezet da Guzul Penn-ar-Bed roll ha dastumadenn skridou ar Huzuliou-Kêr a-du gand mennad an departamant e-keñver yez or bro. Goulennet 'z eus bet ma pouezfe an Asamble war ar Gouarnamant evid ma vefe studiet gand ar Parlamant an danveziou-lezenn diweza disklêriet diwar-benn ar Yezou-Rannvro. Ha raktal, an deiz-se, 'z eus bet kaset, en ano Kuzul Penn-ar-Bed, eun telex d'ar Henta Ministr war ar poent-se.

Er sizuniou o tond, ez aio ivez stourmerien E.L.Y. da weled Renerien ar Huzuliou-Meur all a Vreiz evid ma pouezint diouz o zu war ar Gouarnamant e-sell lakaad kudenn ar brezoneg, an oksitaneg, an euskareg hag all, war roll-labour ar Parlamant. Kelou vo roet ivez, eveljust, da gannaded Breiz, dezo ober kemend-all evid ma vo sevenet goulennoù dilennidi or bro.

### **Bodad breizeg "EVID LEZENN AR YEZOU"**

G.-S.- Dilun 23 a viz Gouere, eo bet degemeret dilennidi E.L.Y., e SANT-BRIEG, e Ti an Departamant, gand Prezidant KUZUL AOCHOU-AN-ARVOR, an Ao. Charles JOSSELIN. A-hed eun eurvez-pad e oe komzet euz strivadenn ar Mennadou Tiez-Kêr o tegas eun harp a-zoare da houlenn ar Huzuliou-departamant evid Lezenn-stur ar Yezou : ouspenn an diou drederenn euz ar Huzuliou-Kêr o-deus votet unan pe egile euz ar skridou kinniget dezo. Hag e heller fizioud dalhmad e savo ivez a-du meur a hini euz ar re all. Eun taol-skoaz euz ar henta a zo bet roet gand an daou-ugent a Guzuliou euz Breiz-Uhel hag o-deus moueziet, e departamant Aochou-An-Arvor, evel ar 116 komun euz Breiz-Izel.... O kloza an emwel, e roas Ch. Josselin da houd e kaso kelou d'ar Henta Ministr ez eo youl ar peb muia euz Kuzuliou-Kêr ar vro ma vezo lakeet kudenn ar Brezoneg hag ar Yezou-Rannvro all war roll-labour ar Parlamant.

Red e vo bremañ gortoz moarvad beteg miz Gwengolo a-benn gelloud mond da ginnig or pez dastumadenn a Vennadou da Brezidanted Kuzul ar Morbihan, ar C.E.S. ha Kuzul-Breiz, ha goulenn diganto poueza diouz o zu war ar Gouarnamant evid ma teufe da vad goulenn-meur ar "Statut".

### **Ped a vennadou KUZULIOU-KER a zo bet dastumet?**

#### **BREIZ-IZEL**

Penn-ar-Bed.....281 = 99,29% euz 283 gomun an departamant.

Aochou-an-Arvor.....116 = 69,04% euz ar 168 komun

Morbihan.....84 = 65,11% euz ar 29 gomun

En oll evid Breiz-Izel.....481 da lavared eo 82,93% euz komuniou Breiz-Izel.

BREIZ-UHEL.....71 Mennad (war 100 komun bet kinniget dezo)

Dastumet en oll.....552 (a-benn ar 1<sup>a</sup> a viz Eost 90)

#### **Notennoù :**

1)Ar homuniou bet moueziet ar Mennadou evid al Lezenn-stur gand o Huzuliou a oa enno o chom (da-geñver niveradeg 1982) : 1.354.490 a dud, - hervez ar chifrou kavet e rollou an departamañchou, - nemed eur fazi bennag a vefe bet greet ganeom en eur gonta.

2) N'eus meneg, war skridou-divizadennoù ar Huzuliou-Kêr kaset deom, nemed euz : 47 kuzulier pe guzulierez hag o-deus dibabet chom heb mond a-du pe mond a-eneb ar mennad kinniget (kuzulierien "di-du"),

- ha 13 (trizeg) kuzulier pe guzulierez hag o-deus moueziet a-eneb ar Mennad, - da lavared eo ez int a-eneb al Lezenn-stur goulennet evid implij ar brezoneg er Gelennadurez, war ar Media hag er vuhez foran,
- ha kement-se war 9.100 pe 9.300 a Guzulierien o veza kemeret perz e moueziadeg o Huzuliou evid pez a zell ar Mennad kinniget d'o Asambleou.

- 3) Bez' ema ar Homuniou kontet ganeom evid beza e tachad Breiz-Izel a-vremañ e tu kornog eul linenn o tiskenn euz PLOUHA betek TEIS hag o tremen dre d/TRESIGNE, LANRODEG, KORLE, KOREL, SANT-INAN, SANT-YEHANN-BREVELE, SENOLF. Bez' e hellfed, marteze, konta pe lemel kuit eur gomun bennag all. Gand-se, kontet on-eus 283 gomun evid Penn-ar-Bed, 168 evid Aochou-an-Arvor ha 129 evid ar Morbihan; en oll 580 komun e Breiz-Izel...

\*\*\*

- Gourhemennou a zo erru deom a-berz keneiled 'zo evid ar berz vad tizet gand or strivadenn ar Mennadou Kuzuliou-Kêr. Eet eo or heneil B.M. betek skriva deom ez eo « an dra bouezusañ a zo bet graet evit ar brezhoneg a-viskoazh. Sur e chomay 'barzh istor ar vro... Neuze, perak pas pouezañ un tamm war ar re a zo chomet a-enep?... Lies a-walc'h n'o-deus abeg mad ebet...»

Hag e komz deom euz ar respontchou greet da houlennou E.L.Y. en e Vro-Bourled, chalet m'eo gand niver ar homuniou "ha n'o-deus ket divizet evid c'hoaz diwar-benn ar goulenn-mennad"... E gwirionez, pa zellom ouz ol listennou hag or hartennou, e welom ne jomfe dre eno nemed 5 komun ha n'o-deus ket votet skrid E.L.Y., - pe n'o-deus ket roet kelou e oa bet degemeret gand o Huzul... Rag an dra-mañ eo a hoarvez aliezig a-walh, - ar Mennad votet o chom heb beza kaset deom... ken na ve a-wechou pemp pe hweh miz...

\*\*\*

A-hend-all, a-douez eveziadennou all bet skrivet deom, menegi a ran pezh a skriv deom F.O. :

« Souezhet on o welet parrezioù Teiz, Sine, an Ambon ha re ledenez Ruiz lakaet ganeoc'h er-maez a Vreizh-Izel pa 'z eus eno c'hoazh brezhonegerien a-vihanik, bet ganet ha desavet eno...

« E Teiz e anavezan un tammig (va familh a-berzh va zad o chom eno abaoe tremen 400 vloaz), eo gouest, d'am soñj, al lodenn vrasañ eus an dud bet ganet ha desavet eno, a-raok 1925, lakaomp, da gomz brezhoneg an tolead. Ne vefen ket dislavaret gand an Ao. Le Dû, a oa bet eno, ur 6 vloaz bennag, oc'h enrollañ brezhonegerien evit e "Atlas Linguistique"»

E gwirionez, testeniu heñvel ha reou all disheñvel, on-eus diwar-benn implij ar brezoneg evel yez ar pemdez, yez war al labour, e Gourenez Ruiz, da skwer e Sarhao, en Hezo, Sant-Armel, Teis. Seblantoud a ra n'eo mui implijet dre eno "brehoneg Bro-Gwened" nemed gand an dud koz-koz ha tra ken nemed kenetrezo. E hell beza divizet gand keneiled all e tle beza dalhet ar homuniou meneget amañ kentoh war roll ar homuniou da gonta e Breiz-Izel. Ar memez tra a hellfe beza greet evid komuniou all a zo a-hed al "linenn Sebillot", euz Plouha betek Korel. Da veza êsoh, dalhom d'ar gont on-eus dibabet evid strivadenn E.L.Y....

Berr-ha-berr c'hoaz, evid respont da F.O. : Sine a zo bet kontet ganeom e Breiz-Izel, n'eo ket bet greet avad evid an Elven, nag an Ambon a zo bremañ e diavêz da Vreizh-Izel ; - ar pezh n'eus ket miret ouz o Huzuliou da vouezia a-du gand ar "statut". Evel m'o-deus greet a-hend-all kuzuliou Sarhao, Surhur, Teiz...

– Eveziadennou all a hello beza greet diwezatoh diwar-benn emzalh Kuzuliou-Kêr komuniou all en daou du euz linenn Sebillot.



## **EVID LEZENN AR YEZOU EUR GOULENN DIAZET-STARD E-TOUEZ AR VRETONED**

Emañ **E.L.Y.** (Emgleo evid Lezenn ar yezou) o paouez sevel ar gont reiz,- hag evid an deiz-hirio,- euz ar Mennadou Tiez-Kêr bet kelou anezo a-du gand eul Lezenn evid ar Yezou ha sevenaduriou-rannvro. Strivadenn E.L.Y., kaset war-raog da heul al liez a zivizou bet moueziet gand or Huzuliu Departamañchou ha Rannvro a Vreiz, a zo paeroniet gand eur 550 bennag a dud a-bouez euz ar Skoliou-Meur hag an oberiantizou a beb seurt,- Kelennadurez, strolladou sosiael, ekonomikel hag all.

Beteg-henn, setu m'eo bet degemeret gand E. L. Y. **519** a **Vennadou** moueziet gand Kuzuliu Tiez-Kêr **euz Breiz-Izel**,- da lavared eo gand tost-tre da 90% euz ar 580 a Asambleou a-ziazez bet dilennet gand Bretoned al lodenn-ze a Vreiz. Ha, war ar poent-se, e ranker merka chifrenn-skwer dizoh-dreist departamant Penn-ar-Bed hag a gonter ennañ 281 diwar 283 a Guzuliu, kement ha lavared ar peuz-oll anezo hag o-deus embannet e houlenont eur statut lezennel evid yez o bro.

Fiziañs a zo bremañ gand ELY ne jomo ket heb respont an tri-ugent bennag a Guzuliu all a Vreiz-Izel pa vo bet skrivet d'o Mêred evid ma teufent da gloza talvoudegezh-skwer ar voueziadeg roet lañs dezi da heul goulenn or Huzuliu-Meur. Hag e kred stourmerien ar brezoneg e hellont fizioud a-hend-all war ar Huzuliu Tiez-Kêr a Vreiz-Uhel evid ma teufent da heul Kuzul-departamañchou an Ill-ha-Gwilen hag al Liger-Atlantel (ha Kêriou braz evel Roazon, Sant-Malo, Reze, koulz ha Sant-Brieg, Ploermel, Lamballe hag all da rei da gleved goulennou ar Vro-Hallo evid gwiriu yez ha sevenadur o lodenn euz Bro-Arvor.

**E L.Y.,**  
**Bodad Breizeg evid Lezenn ar Yezou**  
**ha Sevenaduriou-Rannvro,**  
40bis st. ar Republik, Brest.

### **Kuzul-Breiz o poueza a-nevez evid eul Lezenn ar Yezou**

D'ar 6 a viz Du ez eus bet moueziet adarre hag a-unvouez gand Kuzul-Breiz eur Mennad o houlen ouz ar Gouarnamant lakaad war roll labouriu ar Parlamant studia ha breutaad an danvez-lezennou bet disklêriet e-sell sevel ha lakaad da dalvoud eur statut evid ar brezoneg, sevenadur Breiz, yezou ha sevenaduriou all Bro-Hall.

Gand ar Vodad "**Evid Lezenn ar yezou**" e oa bet kinniget eur skrid nevez d'eun toullad Kuzulierien euz peb kostezenn. Kement-se goude beza bet kaset kelou, e miz Here, da oll izili Kuzul-Breiz diwar-benn berz brao ar strivadenn kaset war-raog e-touez oll Guzuliu-Kêr Breiz-Izel hag eur hant bennag all euz Breiz-Uhel<sup>3</sup>. Ha goude beza bet roet da Benn-Rener ar Huzul, gand renta-kont ar strivadenn, eilennou euz an oll Mennadou bet moueziet, - eur pez dastumadenn a 600 pajenn gand ar rollou.

Disklêriet e oa bet ar skrid kinniget gand Kuzulierien euz meur a gostezenn, war a zo bet lavaret deom,- ha diskouezet d'ar Huzul e-noa Per Le Treut, Eil-Prezidant an Asamble,

---

<sup>3</sup> Selled ouz taolenn niver ar Mennadou, war B.N. 137. Abaoe m'eo bet embannet an niverenn-ze, ez eus erru ganeom eur Mennad all bennag, hag e kontem evel-se e dibenn miz Here : 465 Mennad evid komuniou Breiz-Izel, da lavared eo 83,62% euz ar 580 komun a gontom e tachenn ar brezoneg,- ha 74 mennad o tond euz ar Vro-Hallo, da lavared eo 559 a Vennadou Kuzuliu-Komun en oll. Bez' e hello erruod deom unan bennag all c'hoaz... Hag e soñj emao da houlen o skoazell digand ar homuniou a Vreiz-Uhel ha n'on-eus ket skrivet dezo. Gand goulenn ma vefe lakeet da dalvoud gwiriu ar "gallo" ha sevenadur-pobl Breiz-Uhel, sellet evel unan euz stummou kultur or bro.

ar mell pakad a Vennadou Tiez-Kêr fiziet ennañ ganeom, an deiz kentoh, evid ar Prezidant.

Setu amañ da heul eun droidigez e brezoneg euz Mennad nevez Kuzul-Breiz :

« Kelou a zo nevez bet roet da Kuzul-Breiz ema harpet gand ouspenn ar beder bemvedenn euz Kuzuliu-Kêr Breiz-Izel ar Mennadou bet disklêriet gantañ ha gand tri a Kuzuliu-departamant diwar-benn eul Lezenn-stur evid ar brezoneg, sevenadur Breiz koulz hag evid ar yezou ha sevenadurioù all a Vro-Hall.

« Degas a ra da zoñj Kuzul-Breiz e houlenn ma vo embannet da vad ar gwir o-deus ar yezou ha sevenadurioù-ze da veza kelennet e peb leh en o broioù, ha da gaoud digor evito bemdez ha pell a-walh e-barz abadennoù radio ha tele ar servioù-Stad ha da veza implijet war gement tachenn a zo euz ar vuhez publik.

« Kuzul-Breiz a zo laouen o weled eo skoazellet stard evel-se e Vennad euz 1988,- eur skrid o tisplega frêz eur youl ken aliez gwech disklêriet kentoh gand Asambleoù dilennet or bro ha gand Kuzuliu Rannvroioù all o-devez euz o zu o yez hag o zevenadurioù o-unan.

« Hag eñ o terhel da gas war-raog eur goulenn hag a zo hini ar peb muia euz ar Vretoned, Kuzul-Breiz a bouez a-nevez war ar Gouarnamant evid ma vo aotreet gantañ ar Parlamant da zivizoud heb dale pell ken diwar-benn ar skridoù danvez-lezenn bet disklêriet evid pez a zell yez Vreiz hag ar yezou-rannvro all.

### **Ar skolioù diou-yez : Pevarved Kendiviz, e Douarnenez**

D'ar 24 ha d'an 28 a viz Here eo bet bodet e Treboul-Douarnenez Kendiviz bloavezieg ar strolladoù o labourad evid kelennadurez ar Yezou-Rannvro er skolioù publik.

Aozet gand an F.L.A.R.E.P. "*Fédération pour les Langues Régionales dans l'Enseignement Public*", dond a ree Kendiviz Douarnenez da heul Kolokou all bet ar bloavezioù tremenet e Bayonne, Strasbourg hag Albi. Urziet e oa an traou gand an A.P.E.E.B. (*Keoredad ar Gerent evid ar Helenn brezoneg*), renet e Breiz gand J.Y. Broudig (Roazon) hag evid Bro-Hall gand Th. Delobel, euz Bro-Euskadi an Hanternoz.

Klevet 'z eus bet eun toullad dileuridi a-ziavêz Breiz o tisplega stad yezou minorelezet o bro hag ar pez a vez greet evid o helenn. Displeget eo bet an traou war gement-se gand or heneil J. Fusini, Penn-Rener "*Kuzul ar Zevenadurez, ar Gelennadurez hag an Endro*" e Bro-Gorsika, ha dileuridi euz Rannvroioù all a Vro-Hall dezo o yez o-unan. Diwar-benn yezou a-ziavêz da Vro-Hall eo bet taolennet an traou dre vraz gand kelennerien euz Bro-Gembre, euz bro Slovened an Itali (Triest), euz Bro-Friz, euz Iwerzon, hag euz bro ar Zorabed (Alamagn ar Reter, bremañ e R.F.A.).

Divizou resiz a zo bet diwar-benn stummadur ar Vistri (peurglozet ar gaoz war ar poent-se gand or heneilez Klaoda an Du, Kuzulierez war gelenn ar brezoneg en Aochou-Arvor). Kemend-all diwar-benn kenstaga ar yezou-rannvro gand kerz ar vuhez a-vremañ. Ha sellet ez eus bet ouz an divizou displeget en eun niver brao a skridoù etrebroadel e-keñver gwirioù ar yezou.

Deut e oa da Dreboul tri a gannaded, J.Y. Cozan (Penn-ar-Bed), Erwan Dollo ha Per-Ivon Tremel (Aochou-Arvor), hag an Ao. Maisl, Rener Akademiezh Roazon. Hemañ a oe goulennateet, na petra 'ta, diwar-benn ezommou ha diêzamañchou ar helenn brezoneg evel ma vez sevenet c'hoaz en devezioù-mañ, - da lavared eo gand kalz a strisadurioù hag a skoillou.

Da heul divizou ar zadorn d'abardaez, e hellas eun toulladig euz ar gendalhidi ober goulennou ouz ar Gannaded hag ouz ar Rektor. N'on ket bet-me aotreet avad da verr-

zisplega dizohou strivadenn or bodad "**Evid Lezenn ar Yezou**" diouz tu Kuzuliu-Kêr or bro. Eun dra a-bouez a vije bet koulskoude rei da houd dirag an oll, ha dirag an dud e-karg deut eno, penaoz ema an darn-vrasa (hag a-bell) euz Kuzuliu komuniou Breiz-Izel a-du gand lakaad da dalvoud en or bro eur gwir statut evid or Yez...

**N.B.:** Ar skoliou diou-yez brezoneg-ha-galleg ez eus anezo deg, evid ar mare : e Roazon, e Lannuon (daou glas), e Kawan, e Tregastell, e Sant-Riwall, e Landerne (daou glas), e Douarnenez, e Breh, e Poñdi, Lanester, Rostren.

- Chomleh an A.P.E.E.B. a zo : B.P. 2507, 35025 Roazon Cedex.

### **Kelenn ar Brezoneg er Skoliou Katolik**

Daou Gendiviz o tond heul-da-heul diwar-benn kelennadurez ar brezoneg hag ar yezou-rannvro.

- D'al lun 29 a viz Here 'z eus bet emvodet e Kastellin eun niver brao a gelennerien euz skoliou katolik an daou zerez da studia penaoz kas an traou war-raog evid ar Helenn brezoneg.

E-barz Kelennadurez prevez Penn-ar-Bed eo kresket brao ar bloaz-mañ niver ar hlasou ma vez kelennet ar brezoneg enno : euz war-dro 120 ez eo savet da 207 diwar ar bloavez-skol nevez-mañ (e 53 a skoliou). Evel-se ez eus bremañ eur 4.000 a skolidi hag a vez oh heulia kenteliou e yez ar vro, - kenteliou etre eun eurvez ha teir eurvez ar zizun.

Eun dra a-bouez : digoret eo bet e Gwiseni ar henta klas diouyezeg er skoliou prevez hag eo bet disklêriet e heller fizioud e vo eun deg bennag euz ar seurt-se dindan daou vloaz.

E-barz ar hlasou diou-yez e tle beza implijet ar brezoneg evid pep tra e kelenn ar skolidi yaouanka (derez ar vugaligou), tra ma vez roet 12 eurvez bep sizun d'or yez er hlasou all.

Da helloud kas an traou war-raog, da lavared eo derhel da greski niver ar hlasou ma kelenner enno ar brezoneg, e vo roet lañs e departamant Penn-ar-Bed d'eur striv a-zoare evid stumma ar vistri war gelenn or yez. Harpet eo ar Gelennadurez katolik evid al labour a-bouez-se gand an departamant, roet ma vez gantañ eur yalhad evid êsaad labour eun toullad a guzulieren war ar helenn brezoneg.

Evid goud hirroh war gement a zo embreget war dachenn kelennadurez or yez e-barz skoliou katolik Penn-ar-Bed, e heller goulenn skridou ar hevredigeziou "**Dihun**" ha "**Skolig al Louarn**", digand **A.-V. Arzur, pl. Kaerell, 29860 Plouvien**.

### **Gwirioù ar Yezou**

Kelou a zo bet kaset deom gand or heneiled euz **Kelh Rene-Schickele-Kreis** (Bro-Alzas) a-zivoud Kollok pe Kendivizadeg Gwirioù ar Yezou - Gwirioù an Den, bet emvodet tri devez e Strasbourg, e Palez Europa (12-15 a viz Du). Tri deveziad ha m'eo bet studiet a-dost ar gwirioù embannet en eun toullad brao a Emglevadegou, Skridou-feur ha Disklêriadurioù bet embannet gand an O.N.U., gand an U.N.E.S.C.O., gand Parlamant



Europa, gand Asamblez Kannaded Kuzul Europa, gand ar Huzul diwar-benn ar Zurenteze hag ar Henlabour en Europ (koñferañsou Helsinki, Madrid ha Wien).

An oll skridou-ze a zo bet sinet gand an darn-vrasa euz Stadou ar bed (lod all gand Stadou an Europ hag Amerik-an-Hanternoz). Evid darn anezo, evelato, pe chomet int heb beza sinet da vad gand eun nebeud gouarnamañchou, pe nahet 'z eus bet gand unan bennag euz ar broiou asanti ouz hini pe hini euz ar reolennou merket enno... Evel-se, da skwer, ez eus bet nahet gand gouarnamant Bro-Hall asanti e plegfe d'eun diviz o tenna d'ar "minoreleziou broadel"... war zigarez ez eo "unvan" da vad ar Republik... Heñvel eo evid Emgleo Gwirioù ar Vugale, pa'z eus meneg eno euz gwir ar vugale da ober gand yez o bro...

Gand Kendiviz Etrebroadel Strasbourg eo bet studiet dreist-oll ar gwirioù da veza anavezet evid an oll yezou a vez greet anezo "yezou-rannvro" pe "yezou minorezel"... Ar ger reiz a vefe kentoh "yezou minorelezet", - pa vez sellet outo gand gouarnamañchou a zo evel yezou a eil-reñk... ha c'hoaz pa vez greet evel pa ne vefe ket anezo !...

E meur a Stad, siwaz, ne vez ket taolet evez ouz gwirioù ar yezou hag ar sevenadurioù-ze. Aliez, daoust d'ar skridou sinet, e vez nahet peb tra evito... Pe c'hoaz, evel e Bro-Hall, eo distret ar plas a lezer ganto en Deskadurez pe er Helaoui, ha tamm ebed er vuhez publik. Da skwer e vez lakeet "eveziadennoù" war boent pe boent euz ar skridou sinet : evel-se ez eus eun artikl euz Emglevadeg ar Gwirioù politikel (1966) hag a zo bet nahet degemer gand gouarnamant Pariz pa'z eo bet roet d'anaoud d'ar Parlamant. Ha nevez zo (1989) 'z eus bet nahet ivez unan euz artikloù Chart ar Vugale, evel ma lavarem uheloh...

Pa ne vo hini ebed euz Keneiled Emgleo Breiz evid mond da heuilh Kendiviz Strasbourg, e fiziom war or mignoned euz Kelh Rene-Schickele evid renta kont deom euz an Emvod-studi-ze bet urziet ganto. Bez' on-nevo heb dale, evel-se, arguzennoù a-bouez da gemenn da lennerien Brud Nevez hag a dalvezo deom en or stourm evid or yez.

\*\*\*

### **Kelou all diwar-benn an dilennidi**

Eiz Kuzulier-Meur euz Penn-ar-Bed a zo o paouez tremen daou zevez e Bro-Alzas evid gweled ar pezh a vez greet eno evid kelenn yez ar vro. Izili int euz "**Strollad-studi ar yezou ha sevenadurioù-rannvro**" krouet e diabarzh Kuzul an departamant.

### **Breujou Breiz**

pe

### **Kendalh-Meur Yez ha Sevenadur Breiz**

War atiz ar Genurzierez Sevenadurel a Vreiz (Kevredad Breiz Bureo Europad ar Yezou Minorelezet) ha Skol Uhel ar Vro, emeur o prienti eun Emvod Meur etre strolladoù an Emzao.

Dileuridi eun toullad euz ar hevredigeziou sevenadurel a zo bet en em vodet diou wech betek-henn evid spisaad an tachennou ma vo da bleidi warno. An tachennou-ze ez eus meur a hini anezo :

- an darempredoù etre sevenadur hag ekonomiezh e Breiz;
- ar mediaoù (Kelaouennoù ha radio-T.V.);
- ar stummadur;
- ar zevenadur breizeg hag ar Gwir;
- ar Gelennadurez;
- ar Vuhez foran;

- an Embann;
- Touristelez ha Sevenadur.

Rentet e vo kont, e Brud Nevez, endra ma yelo an traou war-raog, euz ar pezh a vo divizet e-sell kas mennad ar Breujou-mañ da vad.

### Kañv

Alan Bourhiz, skolaer, ha stourmer evid ar brezoneg, a zo en em veuzet dre wallzarvoud e-kichen porz Merien. Harpet e oam bet gantañ gand alia m'e-noa greet Mèred ha Kuzuliou-Kêr e gornad-bro da vond a-du gand Mennad "Evid Lezenn ar Yezou". Or gourhemennou a gengañv a ginnigom d'e dud.

### Ar brezoneg hag ar yezou-rannvro all en Eil Derezh

Daoust ha reizet e vo ar reolennoù nevez kemennet gand Ministr an Deskadurezh e-keñver adframmadur al Liseou, - dreist-oll evid pezh a zell niver an "danveziou-dre-zibab" ? Embannet e oa bet da genta, - degas a reen da zoñj, - ne vefe ken nemed unan anezo adaleg an Eilved-klas, ha meneg ebed euz ar "yez-rannvro" war roll an danveziou-studi a helled dibab<sup>(4)</sup> Da houde eo bet kemennet e hellfe beza eun eil "danvez-dre-zibab" e "rummad-studi" al Liziri nemetken, - nemed ger ebed dalhmad diwar-benn ar yezou-rannvro... Ar pezh a oa lemel kuit ar re-mañ a-douez an danveziou-studi a hell al liseidi emouestla evid o studioù, - ha war-wel d'ar vachelouriezh. Hag evel-se setu kaset da netra ar plas bihan roet gand Savary, e 82-83, da gelenn ar brezoneg hag ar yezou-rannvro all.

Klemmoù stard a zo savet ouz ar seurt kammed war-dreñv, - hag an dra-ze dreist-oll a-berz an Oksitaned. Kement-se adal miz Gwengolo, en o Skol-Veur an Hañv da genta, - da houde gand skridou C.R.E.O.-Toloza, Unvaniezh ar h-CREO-iou<sup>5</sup>, ar FELCO, ar FLAREP, hag all... Klasket o-deus bet, adal miz Here, kaoud darempred gand Lionel Jospin (dilennad departamant ar Garonne-Uhella eo-eñ), o tegas dezañ da zoñj e bromesaou a 1990 (Sellit pelloh va fennad war ar poent-se)... En gortoz emaint kaoud eur respont heb re a zale....

Nag amañ e Breiz petra zo bet greet evid ma teufed en-dro d'an eil danvez-dre-zibab, an doare nemetañ, er stad m'ema an traou, da vired e-nefe kelenn ar yezou-rannvro ar plas a zere outo e-barz al liseou ?... Nemed fazia a rafen, diouz ar pezh a ouzon, n'eus ket bet beteg nevez 'zo, nemed Emgleo Breiz o rei kelou, - e-pad miz Du, - e oa lakeet kelenn ar brezoneg e riskl braz da veza mouget gand ar stumm nevez ijinet evid al liseou. Dister-tre oa bet an nebeud linennou embannet war ar helaouennou pemdez da heul or hemennadenn an 10/13 a viz Du. Ha seblantet e oa din ne oa ket bet komprenet ar pezh em-oa lavaret dirag emvod "Kanevedenn", d'ar 16, e Brest... Kenta meneg on-eus gwelet euz an afer, war **Bremañ** ha war **Ar Falz** miz Kerzu ez eo, - en **Ar Falz** gand embann ar pennad kaset ganeom da strolladou ha kelaouennou an Emzao....

Kaset on-oa or skrid d'ar Gannaded gand goulenn diganto kas klemm da Jospin ha poueza warnañ d'e lakaad dond war e giz evid an eil "danvez-dre-zibab". Hervez kemennet ganto, eun toullad mad a gannaded o-deus skrivet da Vinistr an Deskadurezh pe kaset dezañ "goulennou-dre-skrid". Evid an ampoent, avad, - e penn kenta miz Genver, - n'eus deut kel ebed euz eur respont digand Jospin... Erwan Dollo, hag a dlee komz euz an afer da geñver votadeg budjed 92, n'e-neus ket gellet hen ober... pa n'eus bet breudadenn

<sup>4</sup> Gwelit B.N. 149 (miz Du), p.p. 54-56, ha B.N. 150 (miz Kerzu), p.p.76-79.

<sup>5</sup> C.R.E.O. : Kreizenn Rannvro ar Studioù Oksitaneg (Sell an notenn e traon ar pennad da heul).

ebed a-zivoud an Deskadurez...

Diouz tu or heneiled a Vro-Oksitania avad ez eus eun tamm nevezinti : e dibenn miz Du eo bet dileuridi ar FELCO e Ministrerezh an Deskadurez. Dond a reent en ano Kreizennou Studiou Oksitaneg Tolosa, Montpelhier, Bourdel, Clarmont d'Auvergno, Limoges, Grenoble ha Strollad ar Gelennerien Provañseg, da zewel klemm eta ouz ar reolenn embannet evid al liseou da vare an hañv. Eur reolenn hag a vefe da lakaad da dalvoud, or-bezet soñj, adal ar bloavezh-skol 1992-93, hag a vo kaset ganti koulz lavaret da netra kement a zo bet gonezet beteg-henn !

An Aotrounez Geffroy ha Carrieras, kuzulierien ar Ministr, a zegemeras dileuridi ar Gelennerien oksitaneg ha provañseg. Anzavet ez eus bet ganto e lakee ar reolenn nevez eun harz da vad ouz kelenn ar yez-rannvro. Lavaret eo bet ganto e-neus ar Ministr roet urz da "lakaad war ar studi", - evel ma vez lavaret, - eur reizadenn bennag d'an dizenteziou embannet evid al liseou... Petra vo ar reizadenn-ze, n'eo ket bet spisaet an dra d'an dileuridi, ha m'o-deus pouezet ar re-mañ evid ma vefe kemmet an traou e-keñver an danveziou-dre-skrid, n'o-deus ket gouezet war pe du e klaskfe tud Strêd Grenelle eun diskoulm d'ar gudenn rouestlet ganto...

D'an 3 a viz Genver 1991

**A. Keravel**

N.B. : Ken fall e vefe ar reolennoù a vezer o prienti evid ar Skolachou, gand aotrei studi eur "Yez Veo" nemetken.

\*\*\*

9 a viz Genver. -

Da gloza o gweladenn e Ministrerezh an Deskadurez e oa bet prometet gand an Ao. Geoffroy da zileuridi ar FELCO, d'an 20 a viz Du, e teufe dezo eur respont digand ar Ministr, a-benn ar 15 a viz Kerzu, evid pezh a zell ar "reizadenn" da reolennoù nevez al liseou. Eur reizadenn diwar-benn degemeridigezh an oksitaneg hag ar yezou-rannvro all evel "danvez-studi-dre-zibab"... Padal, setu tremenet miz Kerzu ha boulhet mad miz Genver... ha n'eus erru d'ar FELCO respont ebed digand Jospin. - Respont resiz ebed kennebeud da Gannaded ha Kuzulierien Vreiz... nemed lavared da zarn anezo... e vo kaset kelou dezo !

### **Ministr an Deskadurez hag ar Helenn Oksitaneg**

Kredi a ran eo mad rei da houd e oa bet degemeret an Ao. Lionel Jospin, Ministr an Deskadurez, bremañ 'zo bloaz hanter, d'an 29 a viz Mezeven 1990, e bureviou C.R.E.O. Tolosa<sup>6</sup>). Kelaouennerien a oa eno hag o-deus bet rentet kont euz komzou ar Ministr.

Eun deg devez kentoh e oa bet kaset gand C.R.E.O. Tolosa eur seurt memorandum o tiplegha kement a garfed e vefe greet da helloud lakaad kelenn yez ha sevenadur Oksitania e skoliou an Akademiezh. Ha degas a ree Jospin e respont d'ar h-C.R.E.O.

Anaoudegez on-eus bet dre ar munud euz ar promesaou greet gand ar Ministr d'an heuliad kaer a houlennoù kaset dezañ dre skrid. Hag e heller lavared e respontas d'or

---

<sup>6</sup> C.R.E.O. : Kreizenn Rannvro ar Studiou Oksitaneg. Eur greizenn seurt-se a gaver en oll Akademiezhioù Bro-Oksitania (seiz anezho). Strollet int en eur Gengevredigezh, ar FELCO ("Federation de l'Enseignement de la Langue et de la Culture d'Oc").

heneiled e oa ali ganto koulz lavared penn-da-benn war beb poent, taolennet evel-se gantañ eur raktres klok evid kas war-raog kelenn an oksitaneg ha studi sevenadur ar vro.

Dre vraz :

- termenet e vo eur seurt "plañ" evid an Akademiezh ;
- roet e vo kelou d'ar skolidi;
- krouet e vezo ar postou-kelenn nevez red o haoud;
- savet e vo eun organadur-studi ha prienti evid ar Rannvro (Kreisteiz-Pireneou);
- krouet e vo eur h-CAPES ha lisañsou evid an Oksitaneg (hag eun danvez all war eun dro);
- greet e vo e Bro-Dolosa ar pezh a zo bet greet e Montpelhier evid ar h-*Calandretas*.

Kement-mañ n'eo nemed eun diverra euz adskrid lavarou Jospin. Bez' ez eus da heul an divizou bet etre ar Ministr hag ar gelaouennerien. - Goude an emwel e oa bet eur rentakont e kelaouennou ar vro : *Depêche du Midi*, hag all....

Red eo spisaad 'z eus bet krouet, e miz Here 1991, eur h-CAPES evid an Oksitaneg, - hag unan all evid ar H/Catalaneg, dezo o-daou ar memez stumm hag ar h/CAPES brezoneg. Eun toullad postou-kelenn a zo bet krouet a-hend-all evid ar helenn Oksitaneg.

Kroget mad eo bet greet eta gand Lionel Jospin da zeveni e bromesaou warlene da g-CREO Tolosa e-keñver kelenn yez ha sevenadur Oksitania... Setu n'heller ket meiza penaoz e-neus gellet sevel e reolennou nevez evid al Liseou heb gweled e taole d'an traoñ eun darn vraz euz ar pezh e-noa lavaret bloaz hanter 'zo e rafe hag a zo bet kroget-mad da zeveni...

G.S. : Degas a ran da zoñj e oa bet anvet L. Jospin da zepute evid Bro-Dolosa e 1988. A-hend-all, bez' ez eo-eñ Kuzulier-kanton Cintigabelle (departamant ar Garonne-Uhella).

## Anoioù brezoneg war ar savadurioù-kêr

D'an 20 a viz Here ez eus bet en em vodet en Ti-Kêr eun toullad tud euz Brest ha war-dro da weled or pezh a heller ober evid ar brezoneg e buhez ar homuniou.

Penn kenta an traou da veza greet, e tleer lakaad ar panellou pe skridou war gement ti pe staliadur perhennet gand ar gomun, warno o anoioù war eun dro e brezoneg hag en o stumm «ofisiel». E Kuzul Kêr-Vrest e oam kroget d'ober an dra-ze er bloaveziou 80/82 Kuzulier e oan d'ar mare-ze hag e oa bet kinniget ganin (o respont ouz goulenn eun toullad mad a Vrestiz) lakaad or yez en enor gand impilj anezi war ar panellou e oad neuze o vond da lakaad war staliadurioù an Ti-Kêr.

A-du e oa bet ar Huzul gand ar mennoz-se. Divizet e oa bet ober evel-se war Tiez-Kêr ar harterioù, war al Levraouegou, war skol ha Mirdi an Arzou Kaer hag all. (War an Ti-Kêr braz e vefe staget an daou ano e lizerennou braz). Eun tregont bennag a skridou brao a oa bet lakeet evel-se.

Reou all a oa da veza staget da houde beb bloaz gand an Ti-Kêr, hag a-hend-all, panellou heñcha ivez (ar re-mañ gand ar H/C.U.B.). Abaoe avad, chomet eo heb ma vefe bet kresket niver ar skritelloù en diou yez tra ma oa krog Kêrioù all da heuilla ar skwer-vad roet gand Brest eiz vloaz a zo

Setu aze al labour a dalvoudegez evid renta enor d'ar brezoneg hag a dlefed staga adarre gantañ, kenta ma vo gellet (ha ne goust ket ker ouspenn-ze). Lavaret eo bet e vezo studiet a-nevez an afer-ze... Da hortoz, ne zaleo ket kalz emichañs e vo gwelet skrivet «Ti ar Mor» e-kichenn «Oceanopolis», an ano gresianeg roet da zavadur braz (ha ken talvouduz) ar Vilin Wenn hag a zo bet bizitet an hañv-mañ gand ouspenn 200 000 den.

Kement ha komz euz savadurioù braz Ker-Vrest, sed amañ eur mennoz a dalvoudegez, a gav din : evid rei eun ano berr e brezoneg d'ar «Quartz», kinniget eo bet «Sked». Ar pezh na virfe ket e vefe skrivet « Ti ar Sevenadur », evel m'eo bet prometet, e-kichenn « Centre Culturel », e lizerennou bihannohig evid «Quartz » ha « Sked ».

### A. Keravel

(Pennad-skrid bet embannet war "SILLAGES", kelaouenn **Kêr** ha **Kumunded Brest**, niverenn miz Kerzu, e lodenn ar Gumunded, eul lodenn a vez skignet e 70 000 tiegez euz an eiz komun bodet.- E peb niverenn euz ar gelaouenn e kaver eur pennad e brezoneg).

**Bernard Tanguy**  
**Dictionnaire des noms de Communes, Trèves et paroisses du Finistère.**

Eul leor ment braz a 264 bajenn, keinet : raskrid gand Youenn ar Gallo ; skeudennou livet gand Ronan Olier; - embannet gand **Chasse-Marée-Ar Men**, Douarnenez.

Al levr-mañ, prisiuz-braz, a ro ar stummou koz hag ar stumm brezoneg a-vremañ ; ouspenn 300 a anoiou-komuniou, trevou ha parrezioù euz Penn-ar-Bed.

Aliez-tre, evel ma ouzer, e teu ano ar gomun diwar hini eur "zant", eur manah enoret 'barz ar vro, peulies a an hini e-nefe, hervez an hengoun, roet he diazez d'ar "ploue", d'al "lok" pe d'al "lan". (Ouspenn teir bajennad anoiou "sent" keltieg a gaver en "Index" savet aratoz-kaer war ar poent-se, - hag a-hend-all, 22 bajennad evid eur rollad all o kendastum an anoiou-lehiou a Vreiz hag a-ziavêz Breiz meneget e-barz ar prennadou diwar-benn peb ano komun pe barrez).

Evid pep komun, trev pe barrez distag ema roet stumm heh ano e brezoneg ar vro e-keñver ar stumm war ar rollou "ofisiel". Evid eun deg pe zaouzeg bennag euz an anoiou e brezoneg ar vro e hellfed koulskoude dibab eur stumm pe eur skritur all. Eveziadenn : eun dra vad e vije bet implij al lizerenneg fonetikel e-kichenn an ano roet e lizerennou stouet (e penn diweza ar stummou istorel) ; eur gudenn a voullerez an hini eo, moarvad.

En eil moulladenn da zond, - rag eet eo buan-tre ar voulladenn genta er-mêz, - e vo red reiza an nebeudig a faziouigou-moulla chomet en homañ.

Eun oberenn eo ar Geriadur-ze hag a zeu d'an ampoent mad, p'ema Kuzul-Meur Penn-ar-Bed o vond da lakaad panellou gand ano brezoneg ar gomun war ribl an heñchou, o tegouezoud e peb kêriadenn, - ha p'e-neus an departamant harpet a-zoare embannidigez al leor a-bouez-braz-mañ.

## Ar brezoneg hag ar yezou-rannvro all en Eil Derezh

Daoust ha reizet e vo ar reolennoù nevez kemennet gant Ministr an Deskadurezh e-keñver adframmadur al Liseou, - dreist-oll evid pezh a zell niver an "danveziou-dre-zibab" ? Embannet e oa bet da genta, - degas a reen da zoñj, - ne vefe ken nemed unan anezo adaleg an Eilved-klas, ha meneg ebed euz ar "yez-rannvro" war roll an danveziou-studi a helled dibab<sup>(7)</sup> Da houde eo bet kemennet e hellfe beza eun eil "danvez-dre-zibab" e "rummad-studi" al Liziri nemetken, - nemed ger ebed dalhmad diwar-benn ar yezou-rannvro... Ar pezh a oa lemel kuit ar re-mañ a-douez an danveziou-studi a hell al liseidi emouestla evid o studiou, - ha war-wel d'ar vachelouriezh. Hag evel-se setu kaset da netra ar plas bihan roet gant Savary, e 82-83, da gelenn ar brezoneg hag ar yezou-rannvro all.

Klemmoù stard a zo savet ouz ar seurt kammed war-dreñv, - hag an dra-ze dreist-oll a-berz an Oksitaned. Kement-se adal miz Gwengolo, en o Skol-Veur an Hañv da genta, - da houde gant skridou C.R.E.O.-Toloza, Unvaniezh ar h-CREO-iou<sup>8</sup>, ar FELCO, ar FLAREP, hag all... Klasket o-deus bet, adal miz Here, kaoud darempred gant Lionel Jospin (dilennad departamant ar Garonne-Uhella eo-eñ), o tegas dezañ da zoñj e bromesaou a 1990 (Sellit pelloh va fennad war ar poent-se)... En gortoz emaint kaoud eur respont heb re a zale....

Nag amañ e Breiz petra zo bet greet evid ma teufed en-dro d'an eil danvez-dre-zibab, an doare nemetañ, er stad m'ema an traou, da vired e-nefe kelenn ar yezou-rannvro ar plas a zere outo e-barz al liseou ?... Nemed fazia a rafen, diouz ar pezh a ouzon, n'eus ket bet beteg nevez 'zo, nemed Emgleo Breiz o rei kelou, - e-pad miz Du, - e oa lakeet kelenn ar brezoneg e riskl braz da veza mouget gant ar stumm nevez ijinet evid al liseou. Dister-tre oa bet an nebeud linennou embannet war ar helaouennoù pemdez da heul or hemennadenn an 10/13 a viz Du. Ha seblantet e oa din ne oa ket bet komprenet ar pezh em-oa lavaret dirag emvod "Kanevedenn", d'ar 16, e Brest... Kenta meneg on-eus gwelet euz an afer, war **Bremañ** ha war **Ar Falz** miz Kerzu ez eo, - en **Ar Falz** gant embann ar pennad kaset ganeom da strolladoù ha kelaouennoù an Emzao....

Kaset on-oa or skrid d'ar Gannaded gant goulenn diganto kas klemm da Jospin ha poueza warnañ d'e lakaad dond war e giz evid an eil "danvez-dre-zibab". Hervez kemennet ganto, eun toullad mad a gannaded o-deus skrivet da Vinistr an Deskadurezh pe kaset dezañ "goulennou-dre-skrid". Evid an ampoent, avad, - e penn kenta miz Genver, - n'eus deut kel ebed euz eur respont digand Jospin... Erwan Dollo, hag a dlee komz euz an afer da geñver votadeg budjed 92, n'e-neus ket gellet hen ober... pa n'eus bet breutadenn ebed a-zivoud an Deskadurezh...

Diouz tu or heneiled a Vro-Oksitania avad ez eus eun tamm nevezinti : e dibenn miz Du eo bet dileuridi ar FELCO e Ministrerezh an Deskadurezh. Dond a reent en ano Kreizennou Studiou Oksitaneg Tolosa, Montpelhier, Bourdel, Clarmont d'Auvergno, Limoges, Grenoble ha Strollad ar Gelennerien Provañseg, da zewel klemm eta ouz ar reolenn embannet evid al liseou da vare an hañv. Eur reolenn hag a vefe da lakaad da dalvoud, or-bezet soñj, adal ar bloavezh-skol 1992-93, hag a vo kaset ganti koulz lavaret da netra kement a zo bet gonezet beteg-henn !

An Aotrounez Geffroy ha Carrieras, kuzulierien ar Ministr, a zegemeras dileuridi ar

<sup>7</sup> Gwelit B.N. 149 (miz Du), p.p. 54-56, ha B.N. 150 (miz Kerzu), p.p.76-79.

<sup>8</sup> C.R.E.O. : Kreizenn Rannvro ar Studiou Oksitaneg (Selled ouz an notenn e traoñ ar pennad da heul).

Gelennerien oksitaneg ha provañseg. Anzavet ez eus bet ganto e lakee ar reolenn nevez eun harz da vad ouz kelenn ar yez-rannvro. Lavaret eo bet ganto e-neus ar Ministr roet urz da "lakaad war ar studi", - evel ma vez lavaret, - eur reizadenn bennag d'an dizenteziou embannet evid al liseou... Petra 'vo ar reizadenn-ze, n'eo ket bet spisaet an dra d'an dileuridi, ha m'o-deus pouezet ar re-mañ evid ma vefe kemmet an traou e-keñver an danveziou-dre-skrid, n'o-deus ket gouezet war pe du e klaskfe tud Strêd Grenelle eun diskoulm d'ar gudenn rouestlet ganto...

15-1-1991

D'an 3 a viz Genver 1991

**A. Keravel**

N.B. : Ken fall e vefe ar reolennou a vezer o prienti evid ar Skolachou, gand aotrei studi eur "Yez Veo" nemetken.

\*\*\*

\*\*\*

**Skolaj Diwan** : d'an 10 a viz Genver eo bet lidet ez-ofisiel Skolaj Diwan, er Releg-Kerhuon. 64 skoliad ha skoliadez a vez er bloaz-mañ oh heuill ar henteliou a ya ar bloaz-mañ betek klas an Trived

\*\*\*

**Emziviz Morgad  
diwar-benn  
Yezou ha Sevenaduriou Minoreleziou Bro-Hall.**

Disadorn 11 a viz Genver 'z eus bet emvodet eun daou hant den bennag e Morgad, kouviet gand Park an Arvorig da gemer perz en eun devez-studi diwar-benn pezh a vez greet (pe ne vez ket greet) e-keñver ar yezou minorezel e Bro-Hall.

Ar mintinvez a zo bet gouestlet d'ar pezh a vez greet ... pe a jom d'ober war an dachenn-ze e Broiou Euskadi-Hanternoz, Oksitania hag Alzas, an traou o veza displeget gand tud e karg hag ar senatour Goetschy. Diouz an endervez ez eus bet komzet dreist-oll euz kudennoù ar helenn brezoneg. En em glevet eo bet dileuridi Emgleo Breiz, Ar Falz, Skol an Emsav, Skolig al Louarn, an U.G.B. da houlenn digand Dilenndi Breiz poueza war Vinistr an Deskadurez evid ma vefe reizet gantañ ar reolennou nevez e-keñver urziadur ar studioù e-barz al liseou hag ar skolachou e-sell renta o flas d'ar brezoneg ha da yezou all ar Rannvroioù evel "danveziou-dre-zibab".

Hirroh kaoz a vo ar miz a zeu diwar-benn Emziviz Morgad.



## PAOUEZ-DEBRI EVID AR BREZONEG

Setu eur gwall bell-zo m'ema or strolladou breizeg o houlen ma vefe eul lezenn oh embann gwiriou ar brezoneg ha kultur or bro gand rei dezo digor da vad en Deskadurez, war ar Media hag er vuhez publik. Eul lezenn-a-ziabez, eur "statut" hag a lako Bro-Hall da heulia ar reolennoù kemennet gand Parlamant an Europ e-keñver ar yezou ha sevenaduriou minorezel. Reolennoù hag a vez heuliet, hag aliez abaoe pell amzer, gand an darnvuia euz broiou all ar Hornog.

Eun testeni anad-tre ez eus ema an darn vrasa hag a-bell euz ar Vretoned a-du da vad gand ar seurt lezenn a houlenner. Gand tost 85 dre gand euz Kuzulioù komunioù Breiz-Izel eo bet moueziet ar Mennad bet kinniget dezo gand ar Bodad "Evid Lezenn ar Yezou", eur Mennad oh harpa an hini bet embannet kentoh gand Kuzulioù an Departamant ha Kuzul-Breiz.

Padal, e chom koulz lavared mud Renerien Bariz ouz goulennou ar Vretoned. N'eus nemed da heul forz klemm ha manifestadeg ma vez greet van ganto da blega eun disterra gand rei eun draig bennag evid ar Helenn brezoneg... Evel-se an hañv tremenet, ez eo goude an touzmah savet, e Kraon, en-dro da Jospin, ha war-lerh difreou on dilennidi e Pariz, ma oe bet divizet kemer war gont ar Stad goprou eun toullad mistri euz klasou "Diwan"...

Evid ar peurrest avad, evid ar peb pouezusa euz or goulennou, da lavared eo evid kas da vad war-raog kelennadurez or yez, emaeer dalhmad o hortoz ma vefe embannet ha lakeet da dalvoud ar reolennoù nevez bet prometet bremañ zo ouspenn deg vloaz...

Siwaz, goude m'e-noa kroget Savary, e 82-83, da zeveni promesaou ar Prezidant en Oriant e-keñver ar brezoneg hag ar yezou all, setu ma teuas, e 85-86, kemennadureziou nevez a-berz Chevènement da derri al lañs e oad o paouez rei war an tu-ze. Hag e diavêz d'ar h-CAPES brezoneg krouet war urz Mitterand deut d'ober eun droiad e Roazon,- setu bremañ c'hweh vloaz ma chom pep tra heb fiñval koulz lavared evid pez a zell kelenn or yez...

Ne weler ket e vefe troet ar gouarnamant da zével ar statut goulennet gand kantadou a Kuzulioù-komun en or bro, na da lakaad studia gand ar Parlamant ar skridou danvez-lezenn bet kinniget a-nevez, abaoe 1988, gand kannaded euz meur a gostezenn. Kelou oa bet warlene e oa bet karget eun depute a Vreiz, - hag eñ euz an tu-kleiz, - da zével eur skrid nevez. Savet eo bet, nemed tonket eo dezañ, war a zeblant, chom en armel penn-rener strollad ar kannaded m'eo bet savet evito...

Gand-se, penaoz ne deufe ket on emzaviou breizeg da goll o fasianted ha d'hen diskouez e doare pe zoare? Penaoz ne vefe ket mennet hiniennou zo e-touez divennourien ar brezoneg da zibab stummou dezo o-unan da stourm? Ha, dres, setu pez e-neus greet ar Breizad kaloneg m'eo Yannig BARON, gand implij eur hiz-stourm ken grevuz hag ar "paouez-debri", - grev an naon, - m'ema or henvroad o houzañv abaoe bremañ zo tost da beder zizunvez, e Kêr-Wened.

Hag eñ Penn-rener Strollad Kerent skolidi klasou diouyezeg ar Morbihan, e-neus greet e zoñj Yannig BARON implij ar stumm-ze da rei brud d'ar Plañ goulennet evid stumma mistri war ar helenn brezoneg. Eun doare-stourm a-dra zur dañjeruz kenañ evid e yehed

hag evid e vuhez zoken, nemed implijet gantañ da rei brud da unan euz pouezusa goulennou or strolladou sevenadurel.

Daoust ha Ministr an Deskadurez, daoust hag ar Henta Ministr e-unan, a vo taolet evez ganto, n'eo ket hepken ouz ar Plañ m'ema Yannig BARON o riskla e vuhez evitañ, hogen ivez ouz ar goulennou all evid or yez ?... Goulennou ha n'int ket dianav dezo, tamm ebed, p'o-deus bet lavaret ha skrivet, an eil koulz hag egile, o-doa komprenet ha prometet harpa o has da benn...

17-2 : Eur pemp-kant den bennag a zo en em vodet e Gwened da harpa Yannig Baron en e stourm hag o houlenn eveltañ ma vefe degemeret gand Akademiezh Roazon sevel ha lakaad en implij eun daolennad divizou evid stumma mistri war ar helenn brezoneg.

## Arsav debrein aveid er Brehoneg

A-houde pell amzer dija, m'ema or strolladeu breiheg o houlen ma vehe ur lezenn oh embann gwirieu ar Brehoneg ha kultur or bro ged rein dehe ar gwir da vad en deskadureh, àr ar media hag er vuhe publik. Ur lezenn a ziaze, ur "statut" hag a lakey Bro-Hall da heuliad ar reolenneu kemennet ged Parlamant an Europ e-keñver ar yeheu ha sevenadurieu minorezel. Reolenneu hag a vez heuliet a-houde pell amzer, ged ar muiañ a vroie arall ar Hornog.

Un testeni anad-tre eh eus ema ar lodenn vrasañ hag a bell ag ar Vretoned a-du da vad ged ur seurt lezenn ha goulennu, ged tost 85 dre gand a guzulieu komunieu Breih-Izel a zo bet mouehet ar mennad bet kinniget dehe ged ar bodad "Evid lezenn ar yezou", ur mennad oh harpein an hani bet embannet kentoh ged kuzulieu an Departamanteu ha Kuzul Breih.

Ged-se, penaoz ne dehe ket on emzavieu breiheg da goll o fasianted na d'hen diskoue e mod pe vod ? penaoz ne vehe ket soñjet ged ar re bennag 'zo e-mesk divennourion ar brehoneg de zibab ataù dehe o-unan da stourm ? Ha end-eeun, chetu peh e-neus groeit ar Breihad kaloneg m'eo Yannig Baron ged implij ur hiz stourm ken grevuz hag an arsav debrein, "grev an naon", m'ema or henvroad o houzañv a-houde bremañ 'zo tost da beder sihuniad, e Kêr-Gwened.

Hag eañ Pennrener Strollad tud kar skolidi klaseu diyehag ar Morbihan, e-neus groeit e soñj Yannig Baron implij ar stumm-se da rein brud d'ar plañ goulennet aveid deskein mestreu àr ar helenn brehoneg. Un doere-stourm a dra sur dañjeruz meurbed aveid e yehed hag aveid e vuhe memez, nameid implijet getañ de rein brud da unan ag ar pouezusañ goulennu or strolladeu sevenadurel.

Deust ha Ministr an deskadureh, deust hag ar hentañ ministr e-unan, a vo taolet eve getañ, n'eo ket hepken doh ar Plañ m'ema Yannig Braon o risklein e vuhe aveitañ, med ivez doh ar goulennu arall aveid ar yeh?... Goulennu ha n'int ket dianav dehe, tamm erbed p'o-deus bet laret ha skrivet unan hag an arall o-doa komprenet ha prometet o has da benn...

### Emgleo Breiz.

28-2-91

Kemenn a ra "Ouest-France" e vefe troet Rektouriez Roazon da lakaad en hent eur rummad stajou a dtri miz evid stummidigez ar vistri war ar helenn brezoneg.

Gwell a ze ma tro ar Rektor da veza a-du gand ar goulenn divennet gand Y. Baron hag e gamaladed<sup>9</sup>.

Eun dizentez deuet mad, a-dra-zur, dreist-oll ma vez roet gand Ministr an Deskadurez peadra - aotre, arhant... ha peb galloud red - da Akademiz Roazon (ha da hini Naoned ?)...

Koulskoude ne hell beza eur rummad stajou (tra ken evid departamant ar Morbihan) nemed eur poent hepken euz ar pezh a zo dleet ober evid lakaad kreski niver ar skoliou ma vez kelennet or yez enno... Eun heuliad stajou evid oll departamañchou or bro, hag o padoud hir amzer a-walh eo a zo dleet urzia. Hag ober kement a zo dleet evid lakaad ar gelennerien a beb live da gaoud fiziañs an dro-mañ ne vo ket torret al lañs d'ar Helenn brezoneg (evel m'eo bet greet e 1985-86, da vare Chevènement).

Stajou da vad, ya, hag ivez rei o flas en I.F.U.M. d'or yez ha da gutur Breiz !

Hag embann ar Statut, al Lezenn-dre-vraz goulennet gand or Huzuliu dilennet...

---

<sup>9</sup> Ouspenn ar seiz den kroget da yuna, e Gwened, gand Baron, ez eus kelou e ree kemend-all Kristian Guyonvarc'h, skoazeller ar hannad europead Simonei, e Bruxelles.

31-3-91

Embannet eo bet eo bet gouestlet gand Rektor Roazon - gand aotre Pariz, anad eo - urzia eur staj a dri miz, e departamant ar Morbihan - evid eun daouzeg skolaer a-youl-vad evid ober war-dro kelenn ar brezoneg.

Prometet eo bet ivez, ma komprener mad, e vo gwelet kement a vefe posubl ober e-barz an I.F.U.M.-ou (Skol-Veur Stummidigez ar Vistri) e-sell studia ar brezoneg...

Greet e-neus berz eta, war ar poent-se, an daou-ugent devez a baouez-debri gouzañvet gand Yannig Baron evid ar pezh a houlenne...

Diouz e du, Kuzul-Meur ar Morbihan e-neus embannet, eur zizunvez kentoh, e vo roet harp gantañ da grouidigez skoliou diouyezeg nevez, - gand ma vo greet gand Ministr an Deskadurez kement a zo en e garg o tenna d'ar skoliou-Stad.

## Ar Mennadou Kuzuliou-Kêr evid Lezenn-a-ziazez ar Yezou-Rannvro

Emaom tost da weled peurechu or strivadenn evid ma vefe moueziet gand Kuzuliou-Kêr or bro eur Mennad oh harpa Kuzuliou-Meur or bro, bet goulennet ganto ma vefe embannet eur "statut" pe lezenn-a-ziazez evid o flas war gement tachenn a zo d'ar brezoneg ha d'ar yezou all e Vro-Hall.

Setu amañ da heul ar gont resiz euz ar skridou a-du gand ar statut bet kaset deom gand Mèred komuniou *a Vreiz-Izel* :

- Dastumet ez eus bet, beteg ar 15 a viz Mae 1991, **486** Mennad, war ar **580 komun** a gontom re Breiz-Izel, da lavared eo e tu kornog eul linenn o vond euz Plouha beteg Gwened-Teiz.

Ar 486 Mennad-se ez eus anezo :

- 281 o tond euz komuniou **Penn-ar-Bed**, ha kement-se oh ober 99,29 % euz an 283 a zo en departamant ; daou guzul-kêr a zo eta, tra ken, en departamant, ha n'o-deus ket roet eun ali a-du...

- **120** a zo, o tond euz darn vrezoneg **Aochou-Arvor** diwar ar 168 komun a gontom eno, - ar peza ra **71,42 %** anezo. Chom a ra eta en departamant **48 Mêr** ha n'o-deus ket kemennet deom, a-benn hanter miz Mae, e oa bet degemeret or Mennad gand o Huzul.

- **85** deut deom euz ar **Morbihan**, diwar ar 129 a gomuniou bet kontet ganeom e lodenn vrezoneg an departamant, ha kement-se oh ober 68,89 % anezo. Evel-se e chom c'hoaz 44 gomun ha n'o-deus ket respontet d'or goulennou.

Er hiz-se, setu e chom c'hoaz :  $2 + 48 + 44 = 94$  komun, a-ziwar 580, ha n'o-deus ket moueziet, a-benn bremañ, a-du gand ar skrid kinniget d'o Mêr... pe n'eo ket bet kaset evid c'hoaz ganto ar Mennad bet degemeret nevezig 'zo, marteze... Skrivet zo bet, o kemenn dezo ar berz greet gand or Mennad hag o houlenn diganto studia da vad or goulenn... Ha moarvad e kresko c'hoaz niver ar skridou Kuzuliou-Kêr a-du gand kas or yez war-raog !

**Breiz-Izel**: Ar Homuniou m'eo bet moueziet ganto unan euz ar Mennadou bet kinniget dezo gand ar Bodad breizeg E.L.Y pe gand an U.S.B.I.F.

Bez' ez eo peb Lizerenn an hini genta euz ano ofisiel peb komun m'eo bet moueziet gand he Huzul eur Mennad a-du gand al Lezenn a-ziazez goulennet evid ar brezoneg, sevenadur Breiz hag ar Yezou ha Sevenaduriou all a Vro-Hall.

## Gouel an Erminig

Da ziskouez dezo anaoudegez vad o henvroiz evid al labour bet sevenet ganto « *evid Breiz, he fersonelez hag he sevenadur* », **Skol Uhel ar Vro** a ro, beb bloaz, da geñver gouel Mikêl, kolier an Erminig da bevar den bet dibabet war roll an dud bet kinniget gand izili heh oll gevrennou.

An enor, ar bloaz-mañ, a zo bet evid **Per-Jakez Helias, Per Laurent, Robert Legrand** ha **Jorj Lombard**, hag e maner Laniron e-kichenig Kemper ez eo bet lidet ar gouel, d'ar zadorn 28 a viz Gwengolo dirag eun tri-hant bennag a dud. Deut e oa ivez da rei ton d'ar gouel kanerien Sant Meurin (Ploveil) ha laz-kana ar Porze. En eur brezegenn troñset a-zoare e-neus an Ao. **Le Treut**, Prezidant Skol Uhel ar Vro, displeget istor kolier an Erminig, an Urz bet krouet gand an duk Yann IV hag an dalvoudegez arouzel eo e hini. Da houde eo bet displeget tro-ha-tro gand Bernard de Parades, Maryvonne Kemere, Ivonig Gicquel ha Joseph Martray al labour bet sevenet gand pep hini euz al loreidi. Pep tra oa talvouduz da gleved ha gand evez braz ivez ez eo bet selaouet ar prezegennoù trugarekaad bet distaget gand ar pevar loread nevez.

\*\*\*

Goude beza roet da gleved eur pennadig euz "**An den divemor**", enrollet gand "Mouez Breiz" (niverenn 3304), diwar c'hoariva brezoneg Radio-Kimerh, setu amañ - lakeet e brezoneg gand A. Keravel - ar homzou a zisplegas Bernard de Parades a-raog ma roas an Ao. Le Treut kolier an Erminig da b-Per-Jakez Helias.

\*\*\*

Ya ! Evid eur halz a dud, Per-Jakez Helias a oe, da genta tra, unan euz an daou ibil a baotred hag a zigase laouenidigez bep sizun, war gwagennoù Radio-Gimerh, gand o divizou hag o hanaouennoù dre greiz sulveziou Breiz-Izel. Al lesano a Jakez Krohenn a oa bet lakeet dezañ gand eun eontr a Gaodan hag e-noa roet dezañ da herez, a-unan gand e dad-koz Lan ar Go, an doare hag ar blijadur da gonta marvaillou.

Dereziou buhez Per Helias o-deus gwelet tro-ha-tro ar paotrig e skol Pouldreuzig, al lisean e skolaj Kemper, ar helenner war al Liziri en eun toullad kêriou a Vreiz-Uhel. E Roazon, e oa eun em dosteet ouz Kelh ar Helaouennoù, ar C'hoariva hag ar varzed. Lakeet e oe, ouspenn-ze, da dad-rener Herberhti Yaouankiz "Isaugouet", e koad-meur Paimpont, bet tro dezañ evel-se kerzed en Draonienn-Dizistro achanterez ar gerioù-komz.

Da heul e gargou an amzer-vrezel, setu-eñ o tistrei d'ar Gelennadurez heb dale e-barz ar Rezistañs ha, da geñver an Dieubidigez, lakeet da ren ar gelaouenn zizunieg "**Avel Gornog**" (**Vent d'Ouest**).

Neuze eo e oe goulennet outañ gand Henri Freville kemer etre e zaouarn an abadennoù e brezoneg a oa da gregi war Radio-Breiz. kement-se e kompagnunez Per Trepos, eur Bigouter all, tamm pe damm kenderv dezañ, euz Plozeved.

Hag evel just, al labour-ze a oe kaset en-dro gand forz ijin ha deskamant, daoust d'an dister a skoazell roet dezañ da zeveni e garg. Hag e padas an traou er hiz-se e-pad bloaveziou, - e-pad daouzeg vloaz.

Ar blanedenn fall a drohas hent Per Trepos. Hag evel ma ouzoh, Per Helias a fiziao e abadennoù da Charlez ar Gall, hemañ skoazellet gand e bried.

- Diaraog ar brezel, e 1937, e oa bet kejet Per Helias gand an hengoun brezoneg anavezet gand paotred ar Gouarnamant... E Plozeved an hini oa, da geñver stalidigez ar

zavadenn en enor d'ar Zonerien, da heul mennoz an depute ha mêt Jorj ar Bail, dirag ar Vinistred Jean Zay ha Leo Lagrange...

D'ar mare-ze, he-doa Kêr-Gemper he Gouel ar Rouanezed hag a veze gwelet enni o tañsal ar Helhiou Keltieg kenta, nemed, e gwirionez, ar Vigouterien ne yeent ket c'hoaz eno da zispaka breizadelez o arz-beva.

Pa oe kroget en-dro gand ar seurt goueliou, e 1948, Per Helias, deut neuze da gelenner e Kemper, a ouias rei eun dro nevez gand skoulma enno an nevezinti vreizeg-se a veze gwelet a beb tu o tispaka gwiskamañchou, dañsou ha sonereziou.

Hag abaoe, beb bloaz, evid an digoradur, e vez kinniget eur hrogad prederia diwar-benn talvoudegez don ar gouel-ze hag a deu dezañ milierou a re yaouank en o dillad ar sulveziou braz, o leunia Kemper, Penn-kêr ene Vreiz.

Da geñver ar Renevezi breizeg, e kenoberie ar Strolladou breizeg hervez o gwiridigez hag o faliou-labour. Per Helias a stagas ouz "Ar Falz" hag heb dale goude-ze ouz "Kendalc'h", o tegas dezo e skridou e brezoneg, frouez en enklaskou tudoniezh, e beziou-c'hoari hag all.

Da genta penn, titrou braz e Hoariva : **Tan ha Ludu, Barzoniezh ha gwirionded Kemper-Gorantin, C'hoari-Meur Gralon, Yann ar Marvailloù, ar Roue Kado, Isild-a-heul**, ha goude, war eun ton dezañ geriou boutinnoh, **Mevel ar Gosker, Ar vaouez-plouz, An traktor, C'hoariva ar paotr Jakez, Diskianted Sodien ar Mor.**

Gand klask sevel roll oberou Per Helias e ranker ivez ober meneg, na petra 'ta, euz an oberennou o-deus roet tro d'eur halz ahanom da veva pennadou buhez rouez hag entanuz : **Maner kuz, Ar Mên du, An Tremen-buhez.** Eun toullad euz ar barzonegou a gaver enno a lakay diwan oberou sonerezh Jef ar Penven ha Paolig Montjarret. Bez' ez int kanaouennou o taolenni an Enezeier. Hag ivez **Kanadenn-Veur Penn-ar-Bed**, - eun oberenn liammet ken stard enni ar Gomz hag ar Zeni hag a oe klevet, goude he Zro-Breiz, beteg e "Kanadegou" Vaison-la-Romaine.

E 1960, diwar abegou yehed, ema Per Helias e Bro-Bariz. bep sizun e vez savet gantañ eur pennad diouyezeg evid **La Bretagne à Paris**, eur pennad embannet war eun dro war **Ouest-France** en e voulladennou a Vreiz. Distrei a ra Per Helias da Vreiz hag e talh gand e labour penneg war an tu-ze. A-benn pemzeg vloaz setu eno danvez eul leor ouspenn pemp kant pajennad hag a vo kemeret gand Plon en e zastumadenn **Douar an Dud**. Gouzoud a reer pebez braz a verz a zavas da v-**Marh al Lorch**... Eun oberenn vrudet en eur bobl a dud, eun oberenn-veur ha ne gaver ket enni tra ken nemed dezreveladenn dre ar munud eur hornadig a Vreiz, hogen kerkoulz all taolenn-vuhez eun niver braz a gouerien euz Europa, displeget e yez ledan amzeriou an hir a houzañv, ar boaziou hengounel, an eñvorennou...

E 1966, en e steudad-skinwel "ar Gonterien", Andre Voisin e-noa roet tro d'e zelaouerien dizolei ar mestr-marvailher Pierre Jakez Helias, - eun dispaker koñchennou euz gouenn Vincenot, Gougoud ha Chabrol.

Da heul embannidigez **Marh al Lorch** e krogas evid oberour ar mestr-leor-ze eur varhekadenn wirion a-dreuz Bro-Hall, Europa, Afrika-an-Norz, an U.S.A. ha Bro-Ganada. Eur berz dreist kredi dre-oll o selaou eun den ken maill da hoari sigota gand e heriou-skeudenni, - eur blijadur dibaouez gand ar re o-doa a-wechou krefridi da ambroug anezañ.

O tistrei euz e droiadou dre ar bed, ema adarre ar hoñchenner o konta d'e follenn wenn penaoz e teuas gantañ beza **"Ar Hester Eñvorennou"** hag e vezo embannet gand **"Douar an Dud"** eul leor ouspenn euz an hini a oar trei ar gontadenn-bobl da vraoig aour.

Hag e talh bepred Per-Jakez Helias gand e hent, o tezrevella dibaouez kontadennou, nemed dindan stumm romañchou : **An Aour yeotenn** ("L'herbe d'Or"), **Kerhenn an Digenvez** ("La Colline des Solitudes"), **Avel-heol** ("Vent de Soleil"), **An nozvez dibar** ("La

Nuit singulière")<sup>10</sup>. hag ar roll n'ema ket peurechu, moarvad, ken stard m'eo krog en den-mañ ar youl konta ha skriva...

Per-Jakez! lavared a reom dit trugarez hag anaoudegez evidout beza bet ken stard oberiet da renta d'ar Vretoned ken braz c'hoantadenn a varzoniez hag a wirionded, a valhder hag a lorh, dres!

\*\*\*

E c'hoariva Breiz, gwechall, penn diweza ar c'hoari a veze ar "Boked", - eur boked a heriou, evel reiz...

Er gouel-mañ euz Urz an Erminig, eun Urz ganet e Breiz koz on Duked, e vez enoret ganeom, aliez-gwech, ar re n'o-deus bet da gestell nemed o huñvreou, o maneriu kuz...

Digorom 'ta ar droidigez-mañ gand **Maner Kuz**, gand eur pennad e "brezoneg Bro-Arvor", hervez geriou Per-Jakez Helias.

(Da heul prezegenn Bernard de Parades e oe displeget **Marh an Noz** gand mouez Chanig ar Gall).

---

<sup>10</sup>Bet embannet skridou brezoneg meur a hini anezo e brezoneg gand or helaouenn (Notenn gand Brud Nevez).



**Danvez-lezenn  
Erwan DOLLO**

Goude beza bet war ar stern e-pad eun daou vloaz bennag, beza bet roet dezi ouspenn eur stumm hag, hervez ma komprenner, beza bet ranket gortoz pellig amzer a-raog ma vefe degemeret da vad gand strollad an deputeed P.S., setu m'eo bet disklêriet ez-ofisiel, d'an 2 a viz Gouere diweza, an danvez-lezenn kenaozet gand Erwan Dollo hag e vignoned diwar-benn "kas war-raog ar yezou-rannvro"<sup>(1)</sup>

Enrollet da vad gand an Asamblez Broadel, ar miz-mañ, miz Here eta, setu ma teu skrid Erwan Dollo hag e geneiled deputeed socialist da geja, e dosierou Komision Sevenadurel ar Breujou, gand an daou all a skridou danvez-lezenn diwar-benn ar memez kudenn ha bet disklêriet abaoe 1988. Da lavared eo :

- an danvez-lezenn kinniget e 1988 gand Guy Hermier (Bouches-du-Rhône), evid strollad deputeed ar P.C.F.,

- hag an hini bet disklêriet e 1988 ivez gand Jean Briane (Aveyron) hag eun toullad deputeed U.D.C., U.D.F. hag R.P.R..

An daou skrid-se a zo bet kinniget dija diou wech, e-doug ar bloaveziou kentoh, etre 1984 ha 1986. <sup>(2)</sup>

Red eo goud, a-hend-all, ez eus bet disklêriet ivez mennadou-lezennou er Senad war ar memez danvez : hini ar Gomunisted (Bidard, 1984), hini ar Greizourien Francou-Arzel (1987) ha Le Jeune (1989).

Eun dra all da houd ivez : ne dalvez ar skridou danvez lezenn nemed e-doug marevez al "lezennadur" m'int bet disklêriet, - da lavared eo etre diou votadeg evid ar Gannaded... Setu perag peb kostezenn, c'hoant ganti diskouez d'an elektourien ema a-du gand eul lezenn evid ar Yezou-Rannvro, a vez gwelet o lakaad embann he skrid nevez pe damnevezet beb pemp bloaz (aliesoh, pa vez "divodet" an Asamblez Broadel, evel e 1988).

- Perag, avad, - a houlenn lod stourmerien a zo, - perag, pa ne deuer ket a-benn da lakaad ar gouarnamant da blega gand rei d'ar Parlamant aotre da studia an danvez lezennou, perag, emezoh, perag goulenn digand ar Strolladou politikel renevezi, da geñver peb votadeg, ar skridou bet chomet dija nousped gwech didalvez ?...

- E feiz, a respont lod all, ha ni en o zouez, dre ma kred deom ne hoarvezo ket memez tra, an taol-mañ hag a-benn ar fin !

... Hag ouspenn-ze, - eur goulenn eo ouz lod stourmerien a zo, - daoust ha kavet zo bet eun doare efedusoh da lakaad renerien Bariz da blega gand embann da vad gwiriou or

---

<sup>11</sup>Enrollet da vad eo bet an danvez-lezenn dindan an niverenn 2201 meneget eo war "Bulletin de l'Assemblée Nationale", niverenn an 8-X-91; p. 55: "Proposition de loi de M. Yves Dollo relative au statut et à la promotion des langues regionales"; kaset eo bet da Gomision an Aferiou Sevenadurel. A heller kaoud gand kas 3 lur + 4 lur evid ar mizou kas (!) d'an "Assemblée Nationale, Kiosque de l'Assemblée, 4, rue A. Briand, 75007 Paris... Pe gand goulenn war eeun digand Y. Dollo, député des Côtes d'Armor, Assemblée Nationale, 75355 Paris... hag evid mann ebed, na petra 'ta!

<sup>12</sup>Ar gostezenn gomunist he-deus disklêriet he zri skrid e 1984, e 1986, e 1988. Mennad Briane (Kreizennourien, UDFed hag RPRed) a zo bet enrollet e 1985, e 1986 hag e 1988. Ar PSed o-deus war o hont, abaoe 1981, eur Mennad e 1984 (sinet gand Jospin) ha bremañ eta, e 1991, hini Dollo.

yez ha yezou all ar Vro-Hwehkorn ha d'o lakaad seveni ar gwiriou-ze ? Klasket zo bet poueza war tud ar gouarnamañchou, hag int a beb kostezenn. Na manifestadegou Poñdi pe Wengamp pe Garaez, pe Vrest, na kerzadennoù an Oriant hag all, na sinadegou dastumet ganto 50 pe 150 000 a anoioù, na paouezadeg labour pe debri, n'int deut a-benn da honid eur reolenn-dre-vraz a rofe d'or yez ar plas dleet dezi... Tapet eo bet al lisañs, eun toulladig postou-keleñn du-mañ du-hont, hag eun DEUG, eur h-CAPES zoken... Lezenn ebed, avad, o rei d'ar brezoneg ha d'or gwiriou sevenadurel an diazez a ranker kaoud evid digeri da vad eun hent nevez.

N'eo ket disprizoud an doareoù all da stourm, - sevel skolioù distag, embann ha strewi pennadoù taer, mond da youhal or gwiriou dirag tiez ar brefeded pe ar vinistred, - n'eo ket ober fae war pezh a heller ober evel-se pa weler e ranker da geñver peb votadeg, poueza eur wech muioh war ar bolitikerien evid ma vo renevezet ganto o danvez-lezennou !

Ha dres, arabad e ve paouez da ober evel-se, d'an ampoent-mañ, gand kelou an Europ a dle dond da wir adaleg daou vloaz amañ, hervez ar skridou-feur bet embannet. Daoust ha penaoz e hello Bro-Hall derhel da jom heb douja d'an divizou, reolennoù hag erbedadennoù a gaver e nousped emgleo europad pe etrebroadel ? Divizou ha reolennoù lakeet da dalvoud er peb brasa euz ar broioù all... Gand ar vez, red e vo da Renerien Bariz lakaad o lezennou ha pratikou, - war dachenn an Deskadurez evel war an tachennou all, - a-live gand re ar Stadoù all kevredet ganto e diabarz ar Gumunded. Eun abeg muioh evidom-ni hag evid ar peb muia e-touez ar re a stourm evid gwiriou Breiz, - eun abeg muioh, a lavaranoù, evid lakaad dirag ar strolladoù politikel hag o zud war ar reñk, beb taol ma vez votadeg, afer al lezenn evid ar yezou rannvro !

Arabad dilezel ar stumm-oberia-ze, dreist-oll bremañ, pa weler, gand berz strivadenn or Bodad breizeg "**Evid Lezenn ar Yezou**" (ELY) ema ar peb muia euz dilennidi or homonioù oh embann e vennont e vefe lakeet da dalvoud eur "Statut" da vad evid ar brezoneg ha war eun dro evid yezou all Bro-Hall.

\* \* \*

E lodenn genta e zanvez-lezenn, en "Disklêriadur an Abegou" e-neus E. Dollo displeget a-nevez an arguzennoù implijet dija gand J.-P. Destrades ha kentoh c'hoaz gand L. ar Peñseg en o skridou, - ha kerkoulz all ivez gand J. Briane en e dri skrid. Poueza a ra, evel m'eo dleet, war an toullad brao a Emglevadegou, Disklêriadennou hag Erbedadennoù etrebroadel bet sinet gand an oll Stadoù demokratel, Bro-Hall en o zouez, hag enno divizou a-zivoud ar minoreleziou, dezo yezou disheñvel euz yez ha kultur ofisiel ar Stad. Gwiriou hag a gaver, displeget a-nevez ha resiz-tre e-barz ar skridou o kloza divizou diweza ar C.E.S. euz Vienne (1989) ha Pariz (1990). Ar hendalh diweza-mañ o veza bet klozet gand F. Mitterrand... goude beza bet meulet braz gantañ ar gwiriou embannet e-barz ar skridou-feur-ze hag o tenna da wirioù ar minoreleziou !... Eun digarez mad da E. Dollo, evid kloza lodenn genta e "Abegou" gand degas da zoñj komzou ar Prezidant, en Oriant, e 1981, pa lavaranoù e tle Bro-Hall paouez beza "*ar vro diweza en Europ o nah d'he rannvroioù ar gwiriou sevenadurel a-ziazez embannet en emglevadegou bet sinet ganti heh-unan*"... Eur rummad komzou bet degaset da zoñj dija e danvez-lezenn J.-P. Destrades (1984).

Gwir eo e heller lavared ez eo an artikloù kinniget gand Erwan Dollo e lodenn diweza e Vennad skañvohig eun tamm bennag war boentou a zo eged re mennadoù Hermier ha Briane. Da skwer e-keñver urziadur ar Helenn diouyezeg, evel m'eo displeget e skrid Briane hag e hini L. ar Peñseg dreist-oll. Nemed en hemañ, e dibenn Displegadur an Abegou, poentou spisaet munud, poentou hag a zeller outo peurlvuia evel resisadennoù

da veza meneget e dekrejou, divizadennoù ha kelh-liziri. Diwar-benn ar Skoliou-Meur, e kred deom e ra ar Mennad nevez re vraz fiziañs d'eul lezenn a 1984. Nemed eur hammed brao war-raog a vezo greet ma teu da vad ar pezh a zo en artikel 12, e-keñver ar skoliou diouyezeg, - ar re da groui e peb leh ma vo posubl koulz hag evid kenstaga d'ar gelennadurez-Stad ar re digoret gand strolladoù prevez. Heveleb tra a gaver, gwir eo, e skrid Briane ha kemend-all en hini Hermier...

Eveziadennoù damheñvel a hellfed ober evid pezh a zell ouz ar Helaoui, ar Media, eun tamm mad kourmouleg m'eo ar pezh euz lezenn 1982 diwar-benn servij foran ar radio hag an tele... gand lakaad ne vefe ket bet kemmet an traou abaoe neuze e reoliadur FR3...

War ouspenn eur poent all e vefe, kenkoulz, eveziadennoù da ober e skridoù Briane hag Hermier. Ar pezh a gont, a-benn ar fin, eo ez eus bremañ e dosieroù an Asamble-Veur tri skrid a-zoare kinniget gand izili brasa strolladoù politikel ar Parlamant... Tri skrid o hortoz ma vefent studiet da vad gand Komision Sevenadurel an Asamble Vroadel, e sell sevel eur "hendeuzi" anezo... Ya! m'ema ali an dilennidi e tleer lakaad da dalvoud e Bro-Hall ar reolennoù implijet gand ar peb muia euz ar Stadoù demokratel ha bet erbedet stard ha liez gwech gand Kumunded Europa o lakaad en implij...

*(Peurrest ar pennad ar miz a zeu)*

**N.B.:** Ken-sinet eo an danvez-lezenn 2201 gand 120 kannad en oll, 79 anezo o veza kannaded Rannvroioù dezo o yez o-unan (Breiz, Oksitania, Alzas ha Mozel, Flandrez ha tro-dro). Sinet eo an danvez-lezenn gand 10 euz ar 14 kannad socialist bet dilennet e Breiz (5 departamant) ha 4 hannad 'zo n'ouzom ket a beseurt departamant int (kannaded bet lakeet e plas reoù all eet da Vinistred, moarvad).

## **Eun taol nevez a-dreuz a-berz an Deskadurez Vroadel ?**

Ya, petra ema Ministr an Deskadurez hag an dud en-dro dezañ o klask ober e-keñver kelenn ar brezoneg hag ar yezou rannvro all ? Eun dro-gamm e vezer o prienti, hervez ma heller kredi !...

Abaoe mizveziou e vez eur Greizenn Vroadel ar Rollou labour<sup>13</sup> o prienti eun adstumma nevez euz ar rannou pe heñchennou ("filières") a gaver e Deskadurez an Eil Derez. Eun "adstumma" hag a denn da zigreski niver an heñchennou-ze, - eun toullad mad anezo, e gwirionez, - en Eil Derez "klasel", "skiantel", "teknikel" ha "micherelel"...

Kement-se a zo afer ar Ministrerezh, ar Sindikajou kelennerien, ar Strolladou kerent, dezo da studia an "adteuzi" euz heñchennou pe kevrennou an Eil-Derez... Nemed daoust hag an dra-ze nemetken ema o klask ober pennou-braz ar C.N.P., - heñchet gand Servijou Ru Grenelle?... Krog int ivez da weled penaoz gelloud "eeuna" amproennou ar Vachelouriezh, - pe gentoh ar Bachelouriezh, - gand re stard... ha sañset re ger ma vefe deut da veza urziadur an amproennou !...

Ha, diouz an tu-ze, e vefed e soñj da zilezel an darnvuia, ma n'eo ket ar peuzoll euz an arnodennou "dre zibab" (pe "options")... Hag e-touez ar re genta da veza kaset da netra e vije, na petra 'ta, an amproennou a yez-rannvro (brezoneg, katalaneg, oksitaneg hag all)...

Arabad eo e vefem tapet re ziwehad da zizarbenn an arsaill ema Renerien an deskadurez - re ar Zervijou kerkoulz ha kuzulierien ar Ministr... hag hemañ e-unan evel just - o prienti, hervez ar helou, a-eneb kelennadurez or yez ha yezou minorezel all ar Vro-Hwehkorn.

Kas a reom kelou d'ar Gannaded, peogwir e hellont kaoud tro da zevel o mouez, emichañs, da geñver an divizou dirag ar Parlamant diwar-benn an Deskadurez, e penn kenta miz Du.

G.S.: D'an ampoent ma vezer, war a zeblant, o soñjal lemel kuit amproennou-dre-zibab ar "yezou-rannvro", setu ma teu kelou e vo krouet eur h-CAPES oksitaneg ha katalaneg...

---

<sup>13</sup>Conseil National des Programmes.

### An abadennou brezoneg war FR3

Da heul an urziou kemennet e dibenn an hañv gand FR3 Pariz hag e Rener evid Breiz ha Broiou al Liger, - war zigarez "espern"... pe gentoh lemel kuit postou-labour, - n'eo ket sklêr-brao an traou penn-da-benn er heleier roet brud dezo evid pezh a zell an Abadennou brezoneg war an TV...

Tro-ha-tro ez eus bet roet kelou e vefe lamet kuit pe verreet an abadennou-ze, hag eur pennad da houde, da heul klemmou o koueza e Pariz koulz hag e Roazon, ez eo bet kemennet ne vefe kemmet netra e padelez ar skingasadennou... Lavaret e oa koulskoude e oa lamet digand an Ao. Alan Bienvenu e garg a Rener an abadennou brezoneg war ar Skinwel. D'ar memez koulz, setu ma roe kelou Bienvenu e tileze-eñ e garg-se ha ma kase liziri e galleg hag e brezoneg oh en em glemm ouz doare-ober FR3 en e geñver hag e-keñver an abadennou brezoneg...

Petra zo en em gavet abaoe?... Dalhet e-neus Kreizenn Roazon FR3 gand skina brezoneg d'ar memez eurvezioù, da lavared eo keleier berr a 5 munutenn pemp devez ar zizun (da vare kreisteiz) hag eun eurvezriad "Chadenn ar Vro" beb sadorn etre 13 ha 14 eur.

A-unan gand ar heleier diwar-benn an Ao. Bienvenu, e oe roet da houzaud gand Pennrener TV- Roazon e oa fiziet en or heneil Fañch Broudig ar garg a "Rener-dileuriet" evid an Abadennou brezoneg.

Gand an oll geleier-ze, traou a beb seurt a zo bet lennet war ar helaouennou hag e skridou ar strolladoù brezoneg, mesket enno rebechou, klemmou, goulennou ha treuz-kelachou.....

Ken luziet e seblant an traou evid darn ma kavont gwell gortoz ar miz kenta da zond a-raog gweled sklêr, e-keit ha ma talh reou all a zo gand embann keleier bet dislavaret ha tamallou damholoet... Ken mesket e kelaouennou a zo m'e-neus Fañch Broudig kaset eul lizer da v-**Bremañ**, - embannet gand ar gelaouenn en he niverenn miz Here, - o rei da houd n'eo bet "na draillet, na diskaret, na dispennet" an abadennou e brezoneg war FR3-Roazon.

« Arhant, evel just, - a skriv F.B., - ne vez jamez tra-walh, med nebeutoh evid a-raog n'eus ket. Ar gwella implij a glaskin ober deuz kement a zo evid sevel "**Chadenn ar Vro**". Gand sikour ar re (dreist-oll ar "broduktourien") hag a oa boaz da genlabourad beteg-henn - hag e talhont d'hen ober oll kazimant...

« ... Klask a reer kerkent adstumma "**Chadenn ar Vro**" en eun doare buhezekoh. Med n'eo nemed a-benn eun toullad miziou, lakom a-benn fin ar bloaz, e vo gwelet da vad al liou deuz ar cheñchamañchou a zo da ren.

« Da hortoz, - a skriv c'hoaz F.B., - e vin laouen o tegemer an oll evezriadennou hag a hellfe beza greet gand neb piou bennag hag a garfe rei e zoñj war ar pezh a dlefe beza gwelet war "**Chadenn ar Vro**"... (Skriva neuze da "Chadenn ar Vro", FR3, 9 bali Janvier, 35031, Roazon cedex).

\*\*\*

Kemenn a ra A. Bienvenu e "**Bremañ**"- miz Here 91, e vo eur hendiviz etrebroadel e dibenn miz Du e Kewenn, evid ma vo prederiet war eun "ofis radio-tele" e Breiz. A-hend-all ema A. Bienvenu o paouez kas deom eur mell doser e galleg hag e brezoneg o tisplega raktres e vennad Chadenn Skingomz ha Skinwel e Breiz-Izel da veza savet e korn bro an Oriant, a rofe labour da 200 den hag a goustfe 510 milion ar bloaz (m'on-eus lennet mad).

Abel Omnes

Kelou on-eus bet e oa marvet, eur pennad a zo, or heneil Abrel Omnes. Hag eñ skolaer dindan-Stad, bet eo unan euz ar genta, a-raog an eil brezel braz, o kelenn ar brezoneg d'ar vugale e-noa en e glasou. Daoust d'an heskinerez a gouezas warnañ goude ar brezel, - en em dennet e oa en e barrez-orin, Plougouskan (e-leh ma oa bet e dad pastor an iliz protestant), - e talhas dibaouez da stourm evid ar brezoneg. Savet gantañ Strollad Selaouerien vreizeg ar Skingomz, e kase pennadou-klemm ha goulennou d'ar helaouennou, d'an Emzaviou sevenadurel ha sosial, d'an dilennidi, o poueza evid ma vefe sevenat gwiriou yez ar Vretoned war ar radio.

Stourmer eo bet ivez Abel Omnes a-eneb ar gwalennou-ze m'eo ar butun hag an alkol, gand moulla ha strewi a beb tu e-touez e vignoned ha kenskriverien paperennou e brezoneg diwar-benn an daou zroug meur-ze.

Pedi a reom e vugale da zegemer or gourhemennou a gengañv ha da gredi e vo dalhet soñj en or mesk eñvor ar stourmer dalhuz, ar mignon habask hag oberiant m'eo bet.

**Emgleo Breiz**

15-10-1991

## Kuzul-Meur Liger-Atlantel

### A-berz "E.L.Y.", Bodad Breizeg "Evid Lezenn ar Yezou" :

Emaom o paouez degemer eur hel euz ar gwella : degemeret eo bet a-unvouez gand Kuzul-Meur al Liger-Atlantel eur Mennad oh embann ema a-du gand kas war-raog war bep tachenn ar brezoneg ha sevenadur Breiz en e zaou stumm, keltieg ha gallo.

N'eo ket ar wech kenta ma teu Kuzulierien-Veur or pemped departamant a Vreiz da vond a-du gand divenn gwirioù or yezou a Vreiz. Bloavezioù 'zo e oa bet embannet seurt mennadoù ha nevezet e oant bet da vare aozidigez ar Chart sevenadurel, e 77-78. An dromañ o-deus fellet Kuzulierien Bro-Naoned adnevezi o goulenn "*gand mond a-du gand Kuzulierien Breiz-Izel*"... o komz evel-se euz berz strivadenn E.L.Y. e-touez ar Huzulioù-Komunioù.

Setu 'ta bremañ pevar euz Kuzulioù-departamant or Bro hag o-deus moueziet a-du gand Statut yez ha kultur Breiz. Emichañs e vo klevet heb dale Kuzul-Meur Il-ha-Gwilen o sevel e vouez d'e dro gand mond a-du gand ar pevar all a Guzulioù-departamant.

15-10-1991

### Ti "Skolig al Louarn" damzismantret!

Eun darvoud spontuz an hini kouezet, e-doug nozvez ar 7 a viz Here, war di "Skolig al Louarn", e Plouvien! Diouz ar mintin, ez eo bet kavet dizac'het a-grenn unan euz talbennou kostez ar presbital koz fiziet gand an Ti-kêr d'or heneilez Anna-Vari Arzur ha d'ar Strollad ken oberiant renet ganti. Gand an dour-bil a oa bet a-hed an noz, ne oa ket bet klevet o koueza d'an traoñ, difoultrout a-grenn, mogerioù an ti bet nevezet gand ar gomun harpet gand an departamant hag e oad bet, an devez a-raog, o labourad tostig-tre d'an diazezoù anezañ.

Eun distruj mantruz ! Eet d'an traoñ kement tra bet staliet en tu-ze d'an ti da reñka eno saliou-degemer evid ar hentelioù brezoneg ha bodadennoù-labour ar Gevredigez koulz e sell kaoud eno eur Mirdi evid binvioù mein ha koadachou, milieroù euz al leorioù bet embannet gand ar Strollad.

Red e vo bremañ adsevel an tu hanter-zistrujet rag mennet eo Anna-Vari Arzur hag he henlabourerien derhel da gas war-raog labour ken efeduz o "Skolig al Louarn" war tachennou ar helenn hag an embann.

Skoazell stourmerien ar yez ne ray ket diouer d'ar Vreuriezh kaloneg m'eo S.L., unan euz elfennoù pouezusa emzao ar brezoneg. Ne gomzom ket tra ken a-berz on Unvaniezh m'eo S.L. unan euz heh izili. Bez' e heller lavared da A.V. Arzur ha d'ar re a boagn ganti e vo degaset dezo ar skoazell dleet dezo, d'o harpa derhel kas war-raog al labour embreget ganto<sup>14</sup>.

---

<sup>14</sup>Chomleh A.V. Arzur : Leurenn Gaerell, 29860, Plouvien.

## Goude danvez-lezenn Dollo

### Ha bremañ ?...

Ya, bremañ p'eo bet disklêriet dirag Asamble-Veur Pariz trede skrid al lezennadur e-kerz diwar-benn "yezou Bro-Hall", ar pep pouezusa a zo e vefent studiet o-zri, burutellet da vad ar pezh a ginnigont, da genta, evel m'eo reiz, gand Kevrenn Sevenadurel ar Gambr. E-sell ober eur hendeuzi anezo hag eur wech degemeret gand ar peb muia euz izili ar Gomision, - pa deu an tri mennad euz kostezennou kreñva an Asamble, - goulenn ouz ar gouarnamant hen lakaad war roll labouriou ar Parlamant...

Evel-se eo e tlefe mond an traou en-dro en eur vro demokratel, lakom !... Red e vefe, da genta tra, ma vefe karget unan euz ar 110 bennag a gannaded oh ober ar Gomision-ze da veza "daneveller" an tri skrid. Ha diouz ma ouzon, n'eus bet anvet daneveller ebed, beteg-henn, evid danvez-lezennou Hermier ha Briane. Daoust ha tu a vo da eñvel unan, bremañ, evid skrid Dollo pe evito o-zri ?...

Peadra zo, avad, da gaoud difiziañs pa ouezer ar pezh a zo emgavet gand an ... 40, - ya ! daou-ugent all a skridou danvez-lezennou a-zivoud ar yezou-rannvro bet disklêriet a-hed an tregont vloaz diweza-mañ... Deiz pe zeiz e vo mad embann ar roll anezo, - abaoe hini Jean Crouan hag oll gannaded Breiz e 1959 (ar memez hini bet disklêriet gand Tanguy Prigent bloaz kentoh, o kloza amzer ar IV<sup>ved</sup> Republik)...

Ha taolit evez : ma'z eus bet anvet eun daneveller evid meur a hini anezo, n'eus bet c'hoarvezet nemed *diou wech* m'eo bet savet eur studiaden evid ar re-mañ-re euz ar skridou ma oa karget Komision Sevenadurel an Asamble Vroadel da ober war o zro... Ar wech kenta zo bet pa oa bet karget Jean Le Duc, kannad Penn-ar-Bed (ha m'êr Montroulez), e 1960-61 da studia skrid J. Crouan ha Deputeed Breiz, hini R. Bayou hag an deputeed S.F.I.O. hag hini Hostache ha deputeed golisted pe zistag. D'an eil gwech e oe e 1963, gand ar Provañsad Barniaudy (tu-kreiz, Alpou-Uhella), fiziet ennañ labourad war eil mennad Bayou (sosialist, Hérault) ha war skrid Bayle (U.N.R., Var).

An diou wech-se e oa eet ar Gomision a-du, a-unvouez gand he daneveller ha, beb tro, e oa bet disklêriet eur skrid danvez-lezenn nevez en ano ar Gevrenn-Studi, - da lavared eo en ano ar hant bennag a izili a oa enni, kannaded euz oll gostezennou politik ar Gambr... Hag en diou wech-se e oa bet nahet en ano ar Gouarnamant lakaad danvez-lezenn ar Gomision war roll-labour ar Parlamant ! E 1961, an nahadenn a oe hini ar Henta Ministr e-unan, Michel Debre<sup>15</sup>. E 1963, ez eo gand V. Giscard d'Estaing, Ministr an Arhant d'an ampoent, e oe trohet e hent da Vennad Barniaudy.

E diavêz an diou wechad-se, n'eus bet savet - diouz ma ouzon, - *dezrevelladenn ebed* diwar-benn ar 35 all a zanvez-lezennou bet disklêriet dirag Kevrenn Sevenadurel an Asamble-Veur hag ar Senat !

Bez'e tleer koulskoude ober meneg euz ar pezh a oe klasket ober, - moarvad e oa e troiou ar bloavezh 1967 a-zivoud an danvez-lezenn disklêriet gand Gabriel de Poulpiquet hag 28 all a zeputeed a Vreiz (euz an oll gostezennou), en ano Strollad kannaded ar CELIB. Anvet e oa bet Jacques Cressard, kannad an Il-ha-Gwilen, da ober war-dro ar mennad-se, - hag a

<sup>15</sup>Respont a reas ar paotr Mikêlig da P. Ihuel, deut d'e weled, e miz Genver 1961, en ano deputeed Vreiz hag ar C.E.L.I.B. : « A! ma vije bet evid ar Provañsaled, ya, marteze!... »



oa bet aozet en ano Kevrenn Sevenadurel ar CELIB<sup>16</sup>. Ha setu kannad Rozaon oh en em lakaad da zeveni ar garg fiziet ennañ gand aket ha poell stard ar helenner ma oa a-hend-all. Hag eñ oh ober tro ar Rannvroioù dezo o yez o-unan. Kregi gand Breiz a reas, o hervel ar gelennerien vrezonég ha divennerien or yez dond da gomz gantañ, e peder pe bemp kêr bennag, euz Roazon da Vrest hag euz Kemper d'an Naoned. Mond a reas ivez e Montpellier hag e kêrioù all ar broioù oksitaneg, katalaneg, euskareg, korseg, alzasianeg ha beteg en Enezenn Vartinik, - o tastum, abegou ha testenioù evid e labour, degemeret an den er Skolioù-Meur ha gand strolladoù studierien pe dilennidi. A-du da vad J. Cressard evid harpa kelenn yezou-rannvro Bro-Hall hag ar broioù tramor en he dalh... Siwaz, daoust d'ar bernioù notennoù ha testenioù dastumet gantañ, ne deuas morse er-mêz an dezrevelladenn ma oa emgarget da zevel. N'ouzon ket pe ez eo dre ma erruas al lezennadur d'e zermen kent evid ma oe echu e labour gantañ. Pe marteze, - lavaret eo bet d'an ampoent, - dre ma oa bet roet dezañ da houd, a-berz uhel emichañs, ne dalvezfe biken d'e labour tizoud e bal dirag ar Gomision pe diouz tu ar Gouarnamant...

Diwezatoù, daoust da niver ar skridoù danvez-lezenn diwar-benn kudenn ar yezou beza bet puill a-walh, - eun ugent bennag disklêriet dirag an Asamble Vroadel (ne gontan ket ar re disklêriet dirag ar Senat), - n'eus bet savet dezrevelladenn ebed war ar skridoù-ze en ano Kevrenn Sevenadurel ar Gambr genta !

Ha koulskoude, arabad deom dilezel an hent-se da dizoud ar pal a labourom evitañ... Abegou a zo da gredi n'hell ket gouarnamant-bremañ pe gouarnamañchoù all da zond Bro-Hall derhel da hoari evel m'eo bet greet bete-vrema gand Renerien Bariz evid pez a zell ouz gwirioù sevenadurel poblou ar C'hwehkorn. Ar mare zo o tond ma vo red lakaad dre amañ da dalvoud ar gwirioù-ze er hornad-mañ euz Europa evel m'int bet lakeet en implij er peb muia euz broioù demokratel ar hornad-bed-mañ.

**Kuzulioù-Meur  
al Liger-Atlantel  
hag an Il-ha-Gwilen  
o sevel a-du gand eul Lezenn-Stur ar Yezou**

D'an 11 a viz Here, Kuzul Departamant al Liger-Atlantel e-neus degemeret a-unvouez eur skrid o kemenn e-neus bet anaoudegez euz ar Mennadoù o houlen eul Lezenn-Stur evid yez ha sevenadur Breiz hag ar yezou ha sevenadurioù all a Vro-Hall, bet moueziet gand Kuzulioù-Meur all, gand C.E.S. ha Kuzul Rannvro Breiz ha gand ouspenn 550 a Kuzulioù-komun euz ar vro.

Hag-eñ stag ouz herez sevenadurel Breiz, kerkoulz en e stumm keltieg hag en hini galloeg, Kuzul-Meur al Liger-Atlantel a ro da houzañ e fell dezañ degas e skoazell d'eun uhel-mennad ha m'eo a-du gantañ en oll gostezennoù dre ar vro.

Rag-se, heti stard a ra en em glevo ar Gouarnamant hag ar Parlamant evid studia ha degemer al Lezenn-stur-ze, enni ar spered-se a hiz a-vremañ, oh heulia erbedadennoù an Europ hag a vo diazezet warni an doare da gas war-raog yezou ha sevenadurioù Bro-Hall.

N'eo ket ar wech kenta, a-dra-zur, m'eo diskouezet gand Kuzulierien al Liger-Atlantel e fell ganto e vefe gouezet emaint stag ouz herez breizeg o departamant. A-raog ha goude an eil brezel braz o-deus bet dija disklêriet e Mennadoù bet embannet gand o Asamble e

---

<sup>16</sup>Evel ma oa bet greet e 1958 evid danvez-lezenn Tanguy-Prigent, - ar memez skrid o veza bet disklêriet a-nevez e 1959 gand Jean Crouan.

houlennont, evel ar pevar departamant all, ma vefe urziet en eur hiz reiz ar helenn brezoneg. Skridou seurt-se euz ar bloaveziou 1950-60 on-eus dalhet hag e 1978 e oa bet sinet gand an departamant a-unan gand ar pevar all skrid-diazez ar Chart Sevenadurel. Ha kentoh, perz e-noa kemeret al Liger Atlantel en aozidigez ar Mennad evid al Lezenn-Stur (ekonomikel ha sevenadurel) evid Breiz.

Eun dra da verka : ar skrid kinniget da Guzul-Meur or pemped departamant a Vreiz a oa ken-sinet gand Kuzulierien euz meur a gostezenn : an Ao. Ao. E. Landrain, eil-Rener kenta ar Huzul, depute ha m<sup>er</sup> Ancenis, R. Lebosse, m<sup>er</sup> Erbray, M. Landreau, eil-m<sup>er</sup> kenta Saint-Jean-de-Boisseau, Guy Goureaux, kelenner Skol-Veur ha kuzulier Ti-K<sup>er</sup> Naoned, ha reou all c'hoaz ha n'on-eus ket o anoioù.

\*\*\*

**10-XI. - Kelou nevez degemeret :** kemenn a reer deom ema Kuzul-Meur an Il-ha-Gwilen o paouez degemer d'e dro, hag a-unvouez ivez, eur Mennad damheñvel ouz an hini bet moueziet gand Kuzul al Liger-Atlantel.

Evid departamant an Il-ha-Gwilen, n'eo ket kennebeud ar wech kenta ma ro da houzoud ema a-du gand gwirioù sevenadurel Breiz hag e fell dezañ ken-harpa striv oll asambleou dilennet or bro evid ma teuo da vad ar statut goulennet gand eun toullad braz a zanveziou-lezenn.

Rag-se e ro da houzoud ema, eñ ivez, a-du gand lakaad da dalvoud e Bro-Hall ar gwirioù erbedet gand an Europ e-keñver yezou ha sevenadurioù-rannvro.

Ken-sinet e oa ar Mennad kinniget da Guzul an Il-ha-Gwilen, evel hini al Liger-Atlantel, gand kuzulierien euz kostezennou disheñvel : an Aotrounez C. Champaud, Roazon-1; J. Normand, Rozaon 7-2; Le Treut, Châteaugiron; J.-L. Tourenne, Hede; J.-B. Lelièvre, Redon, h.a.

Setu 'ta, evel-se eo bet moueziet mennadoù E.L.Y. gand oll Guzulioù-departamant ar Vro, kerkoulz hag an diou Asamble-Rannvro, - ar Huzul Ekonomikel ha Sosial ha Kuzul-Breiz (hag hemañ degemeret eun eil mennad warlene<sup>17</sup>.. Ha tost-tre da 600 a Guzulioù Tiez-K<sup>er</sup> ouz o harpa, bremañ.

E.L.Y.

### « Adframmadur pedagogel al Lise »

An ano rust-se a zo bet roet d'ar seurt urzia pe stumma nevez ema an « Deskadurez Vroadel » o vond da gregi lakaad en implij adaleg ar bloavez-skol kenta da zond. Evid an « Eilved klas » e 1992, evid ar Henta klas e 1993, evid ar Hlas-Peurechui e 1994 ha neuze, da gloza, gand arnodenn ar vachelouriez e 1995.

N'on-eus ket da zisplega amañ pere e vo ar rummadou-studi emeur o vond da lakaad en hent, eiz anezo, reñket e tri seurt : kelennadurez dre vraz, kelennadurez teknikel ha kelennadurez vicherel. Ar pez a gont evidom, ar brezoneg hag ar « yezou-rannvro » all... Hag e heller respont dioustu : evid an ampoent, n'eus leh ebed, kornig ebed hag a ve bet

---

<sup>17</sup>Goude ma oa bet diskouezet d'ar Kuzulierien pakadennou ar 500 kenta a zivizadennou Kuzulioù-Komunioù erru da E.L.Y. a-benn neuze.

meneget e-barz ar skridou ha war an taolennou bet embannet bete-vremañ gand Ministrerez an Deskadurez. Meneg ebed hag e seblant beza anad, pa lenner ar reolennou nevez-divizet, ema echu evid ar helenn brezoneg, an oksitaneg hag ar yezou all a Vro-Hall. Da nebeuta ma vez dalhet heb kemm pe resiadenn ebed d'ar reolennou dre vraz bet kemennet gand ar Ministr e-unan er skridou bet kaset d'ar Renerien Liseaou...

Red eo derhel soñj e oa beteg-henn aotreet dibab ar yezou-rannvro, en tri hlas a zo e-barz al liseou, evel « danvez-dre-zibab » hag e helled tremen en arnodenn ar vachelouriez, eun amprouenn euz an danvez studi-ze,

pe evel « yez veo » - 2 pe 3, ar « yez veo » o helloud beza eur « yez-rannvro », an dra-ze abaoe « kelhlizer Savary 1928; an amprouenn o helloud beza dre skrid ha dre gomz, pe dre gomz hepken hervez m'eo evel ar yez veo 1 pe evel...

pe evel « yez dired », evel divizet e-barz Lezenn Deixonne (1951), dre gomz nemetken, ar poentou ouspenn 10 o konta evid an arnodenn.

En Eilved klas, beteg-henn, daoust ha ne oa ket spiseet an dra-ze e roll an « danveziou-dre-zibab » a helled lenn e-barz al leorig « Les Lycées demain » (1986, p.p. 84-85) e oa aotreet al liseidi da zibab ar « yez-rannvro » pe evel « danvez dibabet-dre-red (option obligatoire) pe « danvez dibabet ouspenn » (option complémentaire). Nemed merket e oa e kelhlizer Savary an 21-6-1982 e helled, - er rummadou o kas da « vachelouriez ar Gelennadurez dre vraz » (baccaluaréat de l'enseignement général), - heulia kenteliou « yez ha sevenadur rannvro », heb ober eun diforh etre an Eilved klas hag an daou glas all da heul.

Hag, abaoe 1981-82-83, a-wechou diwezatoh, e oa bet greet evel-se e liseou Breiz, ar brezoneg o veza sellet outañ evel evel « yez-rannvro » hag a helle beza kemeret evel « yez dibabet-dre-red » pe evel « yez dibabet ouspenn » rag *daou zanvez-dre-zibab a helled kaoud en Eilved klas.*

Dalhet vo, e-barz ar reolennou nevez emeur o vond da lakaad talvezoud ar bloavez-skol a zeu, - dalhet vo da ginnig 2 zanvez-dre-zibab da liseidi an Eilved klas. N'eo merket nebleh avad e hello ar yez-rannvro beza kemeret evid unan euz an danveziou-studi dre zibab.

Lakom ne vefe netra hag a virfe ouz al liseidi dibab o « yez-rannvro », eur wech erru er Hlas kenta ("Première"). Eno eo, avad, e vo eur skoill euz ar re vrasa : ne hello ken al liseidi kaoud nemed eun « danvez-dre-zibab ». Ha re anad eo n'eus chañs ebed e vo dibabet ar « yez-rannvro » lakeet keñver-ha-keñver gand ar yezou beo estren pe gand al latin hag ar gresianeg.

Eno eo ema ar skoill braz, ma vez lakeet da dalvoud ar reolennou nevez kemennet evid ar brezoneg, an oksitaneg hag ar « yezou-rannvro » all... Red eo dond a-benn da lakaad mistri an Deskadurez da rei plas adarre d'or yez evel « danvez dre zibab ».

Roet e-neus lañs Emgleo Breiz d'ar hlemmou ha d'an difreou a rank beza kaset war-raog da stourm ouz ar riskl braz nevez-savet ouz kelennadurez ar brezoneg. Ma vez dalhet heb o hemma, ar reolennou nevez-kemennet anad ha diarvar eo ez aio war-hiz ar helenn brezoneg, - kalz re zister dija ar plas roet dezi ! Ha n'eo ket tra ken nemed e live al liseou eo e vo o vond war-dreñv, hogen e-barz ar skolachou ivez, evel just, pa vo stanket e hent uhelloh. Ha da gredi zo, e raio kement a zroug e-barz ar skoliou kenta derez.

N'eo ket an abegou mad nag ar skoazell a deui da zivennourien ar brezoneg hag ar yezou all a ray diouer deom er stourm nevez a zo da gas war-raog !

## Reolennoù nevez al liseou ha kelenn ar yezou-rannvro

Ema kelennadurez ar brezoneg ha "yezou-rannvro" all Bro-Hall war-var beza mouget gand ar reolennoù nevez embannet gand Ministrerezh an Deskadurez. Abaoe tri miz dija emeur kroget e Rannvroioù ar Hreisteiz (Oksitania, Katalonia, dreist-oll) da zevel klemm ouz ar gwall-daol lakeet en hent. Diouz tu Emgleo Breiz, e roen da houd en eur pennad kenta, e Brud Nevez miz Here, e oa prientet eun taol a-dreuz gand an Deskadurez Vroadel ouz ar yezou-rannvro, kuzet e-barz ar reolennoù e-sell adstumma studioù al liseou...

Ar reolennoù-ze ne oa ket êz o anaoud en o stumm kenta, e dibenn an hañv : ne oant bet kaset, war a zeblant, nemed da renerien al liseou. Bet on-oa kelou anezo digand or heneiled a Vro-Oksitania hag o-doa savet eur studiadenn o tiskouez ne jome mui leh ebed evid ar helenn yez-rannvro e-barz ar Hlas-Kenta hag ar Hlas-Peurechui<sup>18</sup>.

Gand an dale da gaoud kelou resiz ha reiz, e oa eet e-biou devezioù kenta miz Du pa oa bet kavet eur gemennadenn gand E. B. d'ar helaouennoù pemdez ha sizuniegezh ha da strolladoù an Emzao. Heb tamm berz ebed, avad... Ar helaouennoù pemdez ne oe embannet ganto nemed eun nebeud linennou, o venegi tra ken nemed e oa "nehet" Emgleo Breiz... Ha diouz tu ar strolladoù o stourm evid or yez, e oe anad a-walh e oad souezet gand ar helou kemennet ganeom.

D'ar 16 a viz Du, e oa e Brest eun emvod da geñver pempved deiz-ha-bloaz "Kanevedenn" hag a-zivoud "Pe amzer-da-zond evid ar brezoneg ?" Eno e-pad 10 munut bennag em-eus bet tro da zisklêria dirag ar 150 pe 200 den bodet eno pegen dañjeruz eo evid kelennadurez ar brezoneg ar gemennadurez ema an Deskadurez o vond da lakaad en implij a-benn ar bloavezh-skol kenta da zond. Seblantet e-neus din ha d'am heneiled e oa en aner am-oa komzet. War va lerh ez eus bet kaoz euz kelenn "dre red" ar brezoneg, euz kroui eun T.V. brezoneg emren, euz kresk ar skolioù diouyezeg, euz kudennou Diwan, euz an danvez-lezenn nevez bet disklêriet gand Erwan Dollo hag ouspenn eur hant a gannaded all....

A-berz dileuridi an emzavioù a oa war al leurenn, ger ebed avad diwar-benn ar helenn brezoneg e-barz al liseou, ar goulennoù o chom da gas war-raog, - ha dreist-oll diwar-benn reolennoù nevez a oa dianav d'an oll kent beza bet buan displeget ganin... diêz ma oa kredi an traou kemennet gand eun den euz Emgleo Breiz !

Red eo bet gortoz teir zizunvez goude emvod "Kanevedenn" a-benn gelloud lenn, war "Bremañ" ema lakeet ar brezoneg en arvar er skolioù-stad, dreist-oll pa vo kemmet aozadur ar helenn el liseou, hag en-doa Kevredad Katalaned ar Studierien goulennet digand dileuridi Katalonia-an-Hanternoz poueza war ministr an Deskadurez evid ma tilezfe e raktres drastuz...

Seblantoud a ra n'eo nemed da heul ar Hendiviz bet d'an 21 ha d'an 22 a viz Du e Montpelhier gand dileuridi Kuzulioù Sevenadurel eun toullad Rannvroioù (Kuzul Sevenadurel Breiz en o zouez) m'eo bet lakeet ar Hevredigezioù brezoneg (e diavez da re

---

<sup>18</sup> Ar reolenn nevez a zo kaoud tra ken nemed eun danvez-dre-zibab evid ar skoliad : yez veo 2 pe 3 pe yez koz, pe jedi, pe liziri, pe "arz", hag all (hervez ar "rummadou-studi"), - danvezioù ha n'hell ket ar yezou-rannvro keveza ganto... Ha meneg ebed nebleh euz ar yez-rannvro, - tra ma oa spiseet kentoh e traoñ taolenn an danvezioù-studi ("Les Lycées demain", 1986) evel danvez dibabet "dre red" pe "ouspenn" : "Yez veo estren pe a rannvro". - (Selled pelloh : Geriadur).

E.B.) da deurel evez ouz ar reolennoù nevez emeur o rei urz lakaad en implij adal 92 e-barz al liseou. Reolennoù hag a raio da gelenn or yez koll an nebeud a blas bet gelllet lakaad rei dezi goude bloaveziou a stourm... Bloaveziou a stourm m'eo bet an oll strolladoù o kemer perz enno koulskoude !

Evidom-ni, kelou on-doa bet digand or heneiled euz Bro-Oksitania diwar-benn ar reolennoù nevez ha klemm o-doa kaset, adaleg miz Gwengolo, da Vinistr an Deskadurez, o houlenn outañ adweled e gemennadenn, dreist-oll e-keñver an danveziou-dre-zibab. Ha kement-se da lakaad ar reolennoù nevez da glota gand an testennoù lezennel o venegi kelenn ar yezou ha sevenaduriou rannvro<sup>19</sup>... Hag ivez, - na petra 'ta !, - o terhel kont euz promesaou Jospin e-unan diwar-benn kelennadurez yez ha sevenadur Bro-Okstiania<sup>20</sup>...

E tleer merka, a-hend-all, ar pez a zo bet greet, dalhmad e Bro-Oksitania, gand ar F.E.L.C.O. (Kengevredigez evid Kelenn Yez ha Sevenadur Oc), kaset klemmou ganti d'ar Ministr ha bet goulennet skoazell ar Sindikajou kelennerien, ar Gannaded hag ar Rannvroioù, hervez a ouzom. Heñvel evid ar FLAREP (Kevredigez evid Kelenn ar Yezou-Rannvro er Skolioù-Stad), bet dalhet he hendalh e Prada (Bro-Gatalonia).

Emaon o paouez goud eo bet degemeret dileuridi ar Hreizennou Studioù Oksitaneg (C.R.E.O., Centres Régionaux d'Etudes Occitanes) e Ministrerezh an Deskadurez. Roet ez eus da houd d'or heneiled e oa bet roet urz gand ar Ministr d'e zervichou kemma tra pe dra e-barz ar reolenn nevez da helloud derhel ar helenn "yez rannvro" war daolenn studioù al liseou... Daoust ha gwelet e vo an Deskadurez oh asanti degemer adarre or yezou evid eun eil danvez-dre-zibab ?

Diouz on tu, goude beza kaset kelou da oll gannaded Breiz, e hortozom ar respontou a vo roet dezo diwar-benn an eil "danvez-dre-zibab", goulennet evid an oll gevrennoù-studi.

G.S.: Eur ger bennag c'hoaz : Ken gwaz e vo evid ar brezoneg hag ar "yezou-rannvro" all ma vez degemeret kinnigoù "Kuzul an Taolennou-studi" e-keñver ar yezou e-barz ar skoloù.

A-berz "Unvaniezh ar Gelennerien Brezhoneg" e teu kelou deom e vo eur zizunvez stourm e miz Genver da harpa an oll draoù goulennet evid ar helenn brezoneg : stummidigez ar gelennerien, krouidigez eur Strollad-alia akademiel evid ar brezoneg, - hag a-eneb ar reolennoù nevez diwar-benn "daskemmadur" al liseou hag ar skoloù.

### **Ar yezou-rannvro er Vachelouriezh**

Hervez eun enklask kaset da benn diouz tu ar Rektouriezoù-Akademiezh, ez eus bet, ar bloaz-mañ (1991), o houlenn tremen amprovennoù ar Yezou-Rannvro en arnodenn ar Vachelouriezh :

1702 arnodennad evid an oksitaneg hag ar rannyezou all a Vro-Oksitania  
(provañsaleg, limouzineg, aoverneg, niseg)  
1.108 evid ar brezoneg (1)

---

<sup>19</sup>Lezenn Emdroerezh an Deskadurez an 10-7-89, kinniget gand Jospin ha lakeet enni eun "astenn" a-berz Dollo diwar-benn gelloud lakaad, e-barz ar "stummidigez", eur helenn, e peb derez, euz ar yezou ha sevenaduriou-rannvro.

<sup>20</sup> Gouestlet 'z eus bet, warlene (1990), gand Jospin e-unan, e Tolosa, dirag or heneiled ar C.R.E.O. (ha dirag ar gelaouennerien), eur rollad traou e-sell kreski kelenn an oksitaneg e-barz ar skolioù... Da heul unan euz ar promesaou-ze eo bet krouet, e miz Here, ar h-CAPES oksitaneg.

539	evit ar gallo (1)
1.582	evit an alzasianeg (2)
574	evit ar horseg (3)
269	evit ar hatalaneg (4)
<u>149</u>	evit an euskareg (5)
5.923	en oll eta evit yezou-rannvro Bro-Hall. (6) (7)

### Resisaduriou war ar chifrou-ze

(1) **Brezoneg**: 794 arnodennad en Akademiezh Roazon, 8 en hini an Naoned, 306 e Bro-Bariz. - **Gallo**: an oll anezo en Akademiezh Roazon (hag en arnodenn dre gomz nemetken).

2) E Bro-Alzas ne vez nemed amproenn-dre-gomz, heb implij ebed euz ar yez skrivet hag a zo dalhmad an alamaneg lennegel, an hohdeutsch.- Ne veneger ket e vefe bet kandidated evit ar "franskiég" ("francique"), yez-rannvro en eun darn euz Akademiezh Nancy.

### Resisaduriou

(3) En Enezenn hag en Akademiezh Aix, Nisa ha Pariz.

4) En Akademiezhou Montpelhier ha Bro-Bariz.

(5) En Akademiezh Bourdel nemetken.

(6) 11. 322 a gantidated en oll bet goulennet ganto tremen an arnodenn en o yez-rannvro... war 331.029 a gantidated en oll, - da lavared eo 3,43% euz ar re-mañ.

(7) Eur yez all, ar flamaneg, - komzet gand eun 200.000 bennag a dud e Norz Bro-Hall, - ne vez ket aotreet evit eun arnodenn "yez-rannvro". daoust ma vez eun toullad liseidi ouz he studia.

### Eul lezenn evit ar "yezou-rannvro" ... e Bro-Italia

E miz Du 'z eus bet moueziet gand "Camera" Bro-Italia (ar Gambr kenta, Breujou an Deputeed) eul lezenn diwar-benn yezou minorezel (pe a rannvro). Chom a ra c'hoaz d'al lezenn nevez beza degemeret ivez gand eil Kambr ar Parlamant, ar "Senato". Ha kredi a reer e vo moueziet al lezenn nevez heb diêzamant gantañ, - disheñvel ar stumm anezañ ouz Senat Bro-Hall.

Liestueg-kenañ e Bro-Italia eo kudenn ar yezou-rannvro. Kavoud a reer e-barz ar Gourenez yezou komzet gand ouspenn eur milion a dud, - evel ar Sardaneg, ar "Sardo" (1.200.000 a dud war 1.600.000 en oll en Enezenn-Sardegna),- ha yezou all ne vezont implijet nemed gand 3.000 den evel ar Hroateg pe rannyezou germaneg e traoniennou euz an Alpou. E heller menegi ivez ar Hatalaneg (20.000 a dud e Kêr Alghero, Bro-Sardegna), ar Gresianeg (20.000) en Italia ar Su, al Ladineg (30.000), an Oksitaneg-Provañsaleg (50.0000). Yezou all, niverusoh an dud ouz o implij, a gaver a-hend-all, evel an Albaneg (100.000), an Aostaneg (rannyez franko-provañsaleg), Alamaneg Tirol ar Su (360.000). Heb konta rannyez ar Piemont, disheñvel mad euz an Italianeg lennegel (ha chomet roudou ennañ euz an hengeltieg, hervez va heneil Gustavo Buratti)...

Reolennoù hervez-lezenn a zo o lakaad yezou zo da veza kelennet e-barz ar skolioù hag implijet gand mererez ar Stad hag ar Rannvroioù. Da skwer, an *alamaneg*, e Rannvroioù an Adige-Uhella ha Bolzano, - kement-se merket en eur skrid-feur etre Broioù Italia hag Aostria, - ar *sloveneg* e Rannvroioù Trieste hag Udine-Goritza (da heul emglevadegoù goude an eil brezel braz). A-hend-all, e Traonienn pe Bro-Aosta hag a vez implijet enni ar "franko-provañsaleg" (heñvel ouz yez ar "Valais", e Bro-Suis, ha, gwechall, ar Savoie), ar galleg eo a dalvez da yez ofisiel, a-unan gand an italianeg... Kement-se da heul eun emgleo gand gouarnamant de Gaulle, ma ne fazian ket, goude an eil brezel braz...

Lezenn-Veur ar vro (1946) e oa gouestlet enni e vefe gwarezet ar minoreleziou e-keñver ar yezou, hogen chomet eur bete-vremañ heb kaoud eur reolenn-dre-vraz war an dachenn-ze.

Bez' ez eus koulskoude Rannvroioù euz Republik Italia hag ez eus bet lakeet da dalvoud enno reolennoù ispisial diwar-benn implij yezou o fobl e-barz ar skolioù hag ar servichou-Stad ha Rannvro.

Kement-se, peurvuia, da heul emgleoioù etrebroadel, rediet m'eo bet ar Stad italiad da blega ouz goulennou-groñs gouarnamañchou all evel Breiz-Veur, Bro-Aostria hag ivez... Bro-Hall. Evel-se e Rannvroioù an Adij-Uhella hag an Trent (evid an *alamaneg*), evid Rannvroioù Trieste hag Udine-Goritza (evid ar *sloveneg*), evid Bro-Aosta... evid ar galleg<sup>21</sup>.

Da heul goulennou stard ha niveruz a-berz tud Rannvroioù all (harpet gand strolladoù politik a-bouez) ez eo bet anavezet ivez al *ladineg*, unan euz ar yezou komzet e Rannvro Bolzano. Hag a-hend-all c'hoaz ez eus bet divizet implij ar *sardeg* en enezenn Sardegn... nemed chomet eo ar reolenn heb beza implijet da vad e-barz ar skolioù ha gand ar vererez-Stad.<sup>22</sup>

Abaoe pellig zo dija, e oa bet kinniget skridoù danveziou-lezenn diwar-benn ar plas da rei d'ar yezou ha rannyezou eur pemzeg pe ugent bennag a "Regione", e Norz ar Republik hag ivez en Inizi pe strewet e Su ar vro. Danveziou-lezenn disklêriet dirag ar Parlamant gand kannaded euz ar P.S.I., euz an D.C. hag euz ar P.C.I.. Chomet pellig mad "war ar studi", - evel e Asamblez Vroadel Bro-Hall, - e oa bet degemeret gand Komision an Deskadurez ar Gambr kenta, eun nebeud bloaveziou a zo, skrid eul lezenn da veza divizet war he divoud gand akord ar gouarnamant. Ar skrid-se em-eus bet digand mignoned euz Trieste, stourmerien sloveneg, ha kredi a ran ez eo hennez, burutellet a-nevez, hag a zo bet moueziet e miz Du gand ar h-"Camera". Hag hervez ar helaouennoù e-nefe eun tamm chañs da veza votet ivez gand ar "Senato" a-benn eun nebeud mizveziou...

Gand ma vo lakeet da dalvoud da houde heb dale bloaveziou all, o-devo divennerien ar yezou minorezel a Vro-Italia eun tamm mad muih a jañs eged re ar Vro-Hwehkorn !

Ha pa vo roet lañs d'an Europ nevez, - e 1993... ma vez sevenet ar promesaou, - ne vo ket lakeet diêz gouarnamant Italia gand reolennoù koz-Noe evid pez a zell minoreleziou ar vro... evel ma c'hoarvezo, sur-mad, gand Renerien Bariz !

\*\*\*

Adal m'on-nevo kelou resiz war an 18 artikl a vefe e-barz ar skrid degemeret gand Kannaded ar Hamera e hellim rei da anaoud da lennerien Brud Nevez kement a zo

---

<sup>21</sup> En Italia, 15 "Regione" a zo dezo eur "statut ordinal", ha 5 all eur "statut ispisial" : Enezenn Sardegn, ha Sicilla, Bro-Aosta, ar Frioul-Alto Adige hag ar Frioul-Venezia Tridantina, hag o-deus eun tamm frankiz war an dachenn sevenadurel.

<sup>22</sup> N'eo ket klok-mad, a-dra-zur, kement a venegan amañ diwar-benn yezou ha rannyezou Italia. Neb a garfe anaoud hirroh war an dra-ze, - ha stad an traou e minoreleziou broioù Kumunded Europa, e hellan kas dezo niverenn Diskar-Amzer 1991 ar gelaouenn "Contact", embannet gand Bureo Europad ar yezou bihan. Skriva din gand lakaad 3,20 lur timbjou. - A. K., Brud Nevez, 40bis, ru ar Republik, Brest.



taolennet eno diwar-benn implij yezou minorezel ar Gourenez war tachennou an Deskadurez, ar Media, hag e servichou liesseurt Mererez ar Stad hag ar Rannvroioù.

## GERMAINE CRESTON

D'an 18 a viz Kerzu eo marvet or heneilez Germaine Creston, bet Mirourez Mirdi Sant-Brieg goude maro Reun-Youenn Creston. Kenlabourad he-deus greet Germaine Creston gand he fried en enklaskou oberour an daolenn vrudet diwar-benn ar gwiskamañchou breizeg, **Le Costume breton**<sup>23</sup>. Kemeret he-doa he ferz e-barz al labour-skeudenni a gaver eno, o taolenni an deg ha deg seurt disheñvel a goefou a veze douget, eun hanter-kant vloaz a zo, gand ar peb muia euz or henvroadezed a-ziwar ar mêz.

Diskouezadegou a-bouez a zo bet urziet gand Germaine Creston e Sant-Brieg, e Brest hag e kêriou all diwar-benn ar binviou-labour hag an arrebeuri a Vreiz.

En ano Emgleo Breiz ha "Brud Nevez" e kinnigom or gourhemennou a gengañv da Badraig Creston, anezañ arzour evel e dad hag e vamm.

**An danveziou-lezenn  
diwar-benn yezou Bro-Hall**

Kaset eo bet da Emgleo Breiz skrid an danvez-lezenn disklêriet ar miziou tremenet (n'eus deziad ebed war ar skwerenn erru ganeom) diwar-benn "Kas war-raog ar yez rannvro e Broiou Alzas-ha-Moselle".

Siner kenta ha saver an danvez-lezenn nevez-mañ a zo Henri Goetschy, senatour (U.C. Unvaniez ar Hreiz) departamant ar Roen-Uhella.

Kensinet eo gand 18 all a zenatourien, - 12 anezo o veza izili U.C., 5 all stag ouz an R.P.R. hag 1 U.R.E.I. (Republikan distag). En oll e kaver 7 Alzasiad, 3 Breizad, 8 senatour euz Rannvroiou disheñvel hag unan all a dramor (enezenn Mayotte, departamant "O.M.").

An tri senatour a Vreiz o veza roet o skoazell da harpa an Alzasiz ha Mozelliz a zo Alphonse Arzel (Gwitalmeze, Bro-Leon), Edouard Le Jeune (Dineol, Bro-Gerne) ha Josselin de Rohan (Josilin, Breiz-Uhel).

Anavezet eo H. Goetschy evid beza bet e-touez an dilennidi a Vro-Alzas (Kannaded ha Kuzulierien departamant ha rannvro) e penn ar goulennou hag an difreou da lakaad implij an alzasianeg en oll skoliou-stad ha kelenn enno an alamaneg, evel ma oa bet aliet hen ober gand ar Rektor Deyon e 1982. Ha diwar-benn aliou dilennidi ar vro ez eo bet savet "Disklêriadur an Abegou" an danvez-lezenn nevez.

Gand se, setu ma'z eus bremañ, er Senat, daou skrid a-zivoud ar yezou-rannvro : unan savet a-ratoz-kaer evid Bro-Alzas ha lodenn reter departamant ar Mosell, - hag unan all savet evid oll yezou-rannvro ar Vro-Hwehkorn. Hag er gambr kenta, en "Asamble Vroadel", ez eo tri skrid disheñvel eo a zo bet disklêriet abaoe 1988 (penn kenta al "lezennadur" e kerz), - o-zri danvez puill enno, a-dra-zur, ken e-keñver an abegou displeget, ken e-keñver an artiklou kinniget evid ar reolennou da veza lakeet en implij war oll dachennou ar vuhez kevredigezel.

Evid an ampoent, ha diouz ma ouzom, n'eus ket kelou e vefe bet dibabet "dezrevellerien" da studia ar pemp mennad-lezenn-ze a-berz Komisionou Kudennou Sevenadurel an diou Gambr. Mil boent e vefe ma'z eus eun tamm chañs bennag e hellfe beza lakeet kudenn ar yezou-rannvro war roll-labour ar Parlamant da vare kenta emvod ordinal ar Parlamant, e miz Ebrel.

<sup>23</sup>**Le Costume breton** : embannet da genta etre 1953 ha 1959, evel Labouriou ar C.N.R.S., dindan renerz P.-R. Giot; adembannet e 1974 en eur pezh leor gand Tchou.

N.B. : Ken fall e vefe ar reolennou a vezer o prienti evid ar Skolachou, gand aotrei studi eur "Yez Veo" nemetken.

\*\*\*

**9 a viz Genver.** - Da gloza o gweladenn e Ministrerez an Deskadurez e oa bet prometet gand an Ao. Geoffroy da zileuridi ar FELCO, d'an 20 a viz Du, e teufe dezo eur respont digand ar Ministr, a-benn ar 15 a viz Kerzu, evid pezh a zell ar "reizadenn" da reolennou nevez al liseou. Eur reizadenn diwar-benn degemeridigez an oksitaneg hag ar yezourannvro all evel "danvez-studi-dre-zibab"... Padal, setu tremenet miz Kerzu ha boullhet mad miz Genver... ha n'eus erru d'ar FELCO respont ebed digand Jospin. - Respont resiz ebed kennebeud da Gannaded ha Kuzulierien Vreiz... nemed lavared da zarn anezo... e vo kaset kelou dezo !

### **Ministr an Deskadurez hag ar Helenn Oksitaneg**

Kredi a ran eo mad rei da houd e oa bet degemeret an Ao. Lionel Jospin, Ministr an Deskadurez, bremañ 'zo bloaz hanter, d'an 29 a viz Mezeven 1990, e bureviou C.R.E.O. Tolosa<sup>(24)</sup>. Kelaouennerien a oa eno hag o-deus bet rentet kont euz komzou ar Ministr.

Eun deg devez kentoh e oa bet kaset gand C.R.E.O. Tolosa eur seurt memorandum o tisplega kement a garfed e vefe greet da helloud lakaad kelenn yez ha sevenadur Oksitania e skoliou an Akademiez. Ha degas a ree Jospin e respont d'ar h-C.R.E.O.

Anaoudegez on-eus bet dre ar munud euz ar promesaou greet gand ar Ministr d'an heuliad kaer a houlenno kaset dezañ dre skrid. Hag e heller lavared e respontas d'or heneiled e oa ali ganto koulz lavared penn-da-benn war beb poent, taolennet evel-se gantañ eur raktres klok evid kas war-raog kelenn an oksitaneg ha studi sevenadur ar vro.

Dre vraz :

- termenet e vo eur seurt "plañ" evid an Akademiez ;
- roet e vo kelou d'ar skolidi;
- krouet e vezo ar postou-kelenn nevez red o haoud;
- savet e vo eun organadur-studi ha prienti evid ar Rannvro (Kreisteiz-Pireneou);
- krouet e vo eur h-CAPES ha lisañsou evid an Oksitaneg (hag eun danvez all war eun dro);
- greet e vo e Bro-Dolosa ar pezh a zo bet greet e Montpelhier evid ar h-*Calandretas*.

Kement-mañ n'eo nemed eun diverra euz adskrid lavarou Jospin. Bez' ez eus da heul an divizou bet etre ar Ministr hag ar gelaouennerien. - Goude an emwel e oa bet eur rentakont e kelaouenno ar vro : *Depêche du Midi*, hag all....

Red eo spisaad 'z eus bet krouet, e miz Here 1991, eur h-CAPES evid an Oksitaneg, - hag unan all evid ar h-Catalaneg, dezo o-daou ar memez stumm hag ar h-CAPES brezoneg. Eun toullad postou-kelenn a zo bet krouet a-hend-all evid ar helenn Oksitaneg.

Kroget mad eo bet greet eta gand Lionel Jospin da zeveni e bromesaou warlene da G/CREO Tolosa e-keñver kelenn yez ha sevenadur Oksitania... Setu n'heller ket meiza penaoz e-neus gallet sevel e reolennou nevez evid al Liseou heb gweled e taole d'an traoñ eun darn vraz euz ar pezh e-noa lavaret bloaz hanter 'zo e rafe hag a zo bet kroget-mad da

---

<sup>24</sup> C.R.E.O. : Kreizenn Rannvro ar Studiou Oksitaneg. Eur greizenn seurt-se a gaver en oll Akademieziou Bro-Oksitania (seiz anezo). Strollet int en eur Gengevredigez, ar FELCO ("Fédération de l'Enseignement de la Langue et de la Culture d'Oc").

zeveni...

G.S. : Degas a ran da zoñj e oa bet anvet L. Jospin da zepute evid Bro-Dolosa e 1988. Ahend-all, bez' ez eo-eñ Kuzulier-kanton Cintigabelle (departamant ar Garonne-Uhella).

\*\*\*

**Skolaj Diwan** : d'an 10 a viz Genver eo bet lidet ez-ofisiel Skolaj Diwan, er Releg-Kerhuon. 64 skoliad ha skoliadez a vez er bloaz-mañ oh heuill ar henteliou a ya ar bloaz-mañ beteg klas an Trived.

\*\*\*

**Emziviz Morgad  
diwar-benn  
Yezou ha Sevenaduriou Minoreleziou Bro-Hall.**

Disadorn 11 a viz Genver 'z eus bet emvodet eun daou hant den bennag e Morgad, kouviet gand Park an Arvorig da gemer perz en eun devez-studi diwar-benn pezh a vez greet (pe ne vez ket greet) e-keñver ar yezou minorezel e Bro-Hall.

Ar mintinvez a zo bet gouestlet d'ar pezh a vez greet ... pe a jom d'ober war an dachenn-ze e Broiou Euskadi-Hanternoz, Oksitania hag Alzas, an traou o veza displeget gand tud e karg hag ar senatour Goetschy. Diouz an endervez ez eus bet komzet dreist-oll euz kudennoù ar helenn brezoneg. En em glevet eo bet dileuridi Emgleo Breiz, Ar Falz, Skol an Emsav, Skolig al Louarn, an U.G.B., da houlen digand Dilennidi Breiz poueza war Vinistr an Deskadurez evid ma vefe reizet gantañ ar reolennoù nevez e-keñver urziadur ar studioù e-barz al liseoù hag ar skoloù e-sell renta o flas d'ar brezoneg ha da yezou all ar Rannvroioù evel "danveziou-dre-zibab".

Hirroh kaoz a vo ar miz a zeu diwar-benn Emziviz Morgad.

**Strivadenn E.L.Y.**  
**ar**  
**Mennadou Kuzuliou-Komun**

**1. E Breiz-Uhel.** Ne oa beteg nevez 'zo nemed eun toulladig bihan a Guzuliou Tiez-Kêr euz departamant an Il-ha-Gwilen hag o-doa moueziet Mennadou o houlenn eul Lezenn-aziavez evid yez ha sevenadur ar vro : **Châteaugiron, La Mezière, Montauban-de-Bretagne, Saint-Armel, Le Verger**, hag o-doa roet o asant d'ar mennad kinniget gand an U.S.B.I.F., e 1987 ; - hag a-hend-all : **Sant-Malo** (bet goulennet mennad E.L.Y., ha neuze bet degemeret or skrid gand e Guzul, e miz Meurz warlene), **Montauban**, bet votet mennad E.L.Y., e 1990 (an eil gwech o vond a-du gand ar "Statut").

A-nevez 'zo, setu m'eo deut ar helou m'eo bet moueziet ivez skrid E.L.Y. gand eur reñkennad Kuzuliou, da heul kinnig or heneil Guy Castel, euz La Mezière :

**Hede, La Mezière** (an eil gwech, evel Montauban), **Quebriac, Langouet, Vignoc, Geveze, Guipel, Dinge.**

Ar skrid bet moueziet, - eur skrid hag emeur o kas d'eur rummad Mêred euz Breiz-Uhel, - ez eo spiseet ennañ ez eus daou stumm da herez sevenadurel or bro : **ar stumm keltieg** hag **ar stumm galloeg**. O-daou da veza gwarezet ha lakeet eta da dalvoud.

**2.-** Ema strivadenn E.L.Y. o vond da dizoud, heb dale kalz emichañs, he **c'hweh kant (600)** mennad a Guzuliou Tiez-Kêr, - gand konta ar mennadou U.S.B.I.F. bet moueziet e 1987 hag a oa dezo ar memez pal hag hini E.L.Y. (Sellit ouz an notenn ).

E Breiz-Izel e chom c'hoaz eun toullad Kuzuliou ha n'o-deus ket roet kelou a-zivoud ar skrid kinniget dezo.

Da venegi, an divizou a-du gand ar Statut bet degemeret e miz Genver gand or heneilez Kervarreg :

**- Seglian - Keranna (Santez-Anna-Wened) - Er Boneù - Bredewi - Ploure - Melran - Meukon - Porh-Loeiz - Sant Karadeg.**

Kelou he-deus bet J. Kervarreg e oa mennad E.L.Y. lakeet war roll-labour eun 12 pe 15 bennag a Guzuliou, hag e oa komuniou all hag o-doa votet ar skrid nemed ne oa ket erru evid c'hoaz o divizadennoù. Mennadou nevez all a vo da gonta c'hoaz e Bro-Wened eta !

**Bodad Breizeg E.L.Y.**

**Notenn :** Anaoudegez on-eus bet diwar-benn 51 Mennad meneget gand Unvaniez Strollad Breizeg Bro-Bariz (U.S.B.I.F.). Gand Kuzuliou zo 'z eus bet bet votet diou wech a-du, - mennad an U.S.B.I.F. hag hini E.L.Y., - n'int kontet nemed eur wech war ar roll evel-just.

## Goude Emziviz Morgad

Da heul an Emziviz bet dalhet d'an 11-1 e V.V.F. Morgad, ez eus bet kaset gand Renner Park an Arvorig eur renta-kont da Gannaded ha Kuzulierien Rannvro Breiz. Displeget eo e-barz ar pennad-se e vezer prederiet braz gand ar reolennoù nevez emañ an Deskadurez o vond da lakaad talvoud e-barz al liseoù hag ar skolachou, evel m'eo bet skrivet ganin e B.N. abaoe miz Here.

Eur giladenn euz ar wasa e vo evid er helenn brezoneg hag hini an oll yezou-rannvro all ma ne vez ket reizet reolenn an "danvez-dre-zibab" nemeti da veza implijet e daou glas diweza al liseoù ha ma ne vez mui aotreet studi eun eil Yez Veo adal ar Pevare klas, er Skolachou.. Ne hello mui ar skolachidi hag al liseidi dibab studi yez o bro.

Menegi a ra ar Mennad bet degemeret e Morgad e vo diskaret gand ar reolennoù nevez ar pez a zo bet kemennet e 1982-83 gand SAVARY hag e heller lavared e vo, ouspenn-ze, gwallet diou lezenn : hini HABY diwar-benn an Deskadurez (1975) hag hini JOSPIN e-unan diwar-benn "Emdroadur an Deskadurez" (1989).

Tamall a ra Mennad Morgad d'ar reolennoù nevez mond a-eneb "erbedadennoù" Europa e-keñver ar yezou minorezel pe a rannvro. Ouspenn-ze eo disklêriet penaoz Ministr an Deskadurez a zo bet prometet gantañ, e Tolosa, bloaz hanter n'eus ken, harpa da vad kelenn an oksitaneg (kement a dalvezfe evid ar "yezou-rannvro" all). Penaoz kompren e yafe bremañ a-eneb krenn d'e bromesaou ?

Kaset eo bet Mennad Morgad gand Renner Park an Arvorig d'an Dilennidi, o houlen diganto poueza kement ha ma hellont war Jospin evid ma vefe dilezet gantañ ar reolenn war-giz embannet dindan e giriegezh hag evid ma hellfe beza dibabet ar Yez-rannvro evel danvez-studi penn-da-benn en oll gevrennoù al liseoù hag evel eil yez e-barz ar skolachou.

### An Dilennidi Vrezonegerien e ti ar Rektor

Eet eo bureviad an Dilennidi Vrezonegerien da weled Rektor Akademiezh Roazon, an Ao. Herbert Maisi, o rei dezañ da houd pegen chalet int gand ar reolennoù nevez diwar-benn ar studioù en Eil Derezh, gand kudennou stummidigezh ar vistri d'ar helenn brezoneg ha sevenadur Breiz ha gand ar hrouidigezh postou nevez war an danvez-studi-mañ.

Digresk niver an "danveziou dibabet" en daou glas diweza al liseoù, dreist-oll, a lakay kelennadurezh ar brezoneg da vond war-gil. An "atailleroù" hag ez eus ano da groui evid eun toullad danveziou-studi ne vo ket digollet ganto an droug-braz a vo greet gand lemel an eil "opsion" er Hlas kenta hag en hini Peurechui. Ne viro ket ouz studi ar brezoneg da veza dilezet... ha ne vo ket hepken en daou glas uhella hogen penn-da-benn an Eil Derezh... ha beteg en Derezh kenta.

Moarvad e vo roet prederioù an Dilennidi da anaoud e Pariz. Daoust avad hag e vo taolet evez outo e Ministrerezh an Deskadurezh, ma ne ya ket di, - da gomz gand Jospin e-unan ha n'eo ket gand e guzulierien, - eun toullad kannaded ? Evel m'eo bet greet evid kudennou "Diwan", da skwer, gand komz - kaled stard en ano Breiz a-bez !

### Respontchoù goulo Jospin

Digand meur a gannad, - depute, senatour, kuzulier-rannvro, - eo erru deom ar respont o-deus bet digand Ministr an Deskadurezh da heul o lizer diwar-benn ar reolennoù nevez

da veza lakeet da dalvoud e studiou al liseou hag ar skolachou.

Da bep hini euz ar gannaded o-deus bet eul lizer, ne lavar Jospin tra ken nemed ne vanko ket da gas dezañ an "elfennou a respont" ema o hortoz ("*Je ne manquerai pas de vous communiquer les éléments de réponse qu'elle appelle*"...)

Ha tra all ebed... Gortozit 'ta, Aotrou kannad ! Ha bep tro, da heul, ar memez sinatur mekanikeet...

Daoust hag e hello kannaded Breiz gortoz pell amzer c'hoaz eur respont gwirion... heb mond, eun toullad anezo, beteg Ru Grenelle ?

### **Dalhmad diwar-benn reolennou nevez ar studiou e-barz al Liseou !**

Ema niverenn an 23-1-92 euz Kelaouenn B.O.E.N. Ofisiel an Deskadurez hag a vez kavet enni al lezennou, dekregjou hag all o tenna d'ar Helenn, o paouez embann darn euz ar reolennou nevez evid al Liseou... Darn, eun darn hepken.

Kavoud a reer eno :

- urziou-dre-vraz ar **Hlasou Kenta ha Peurechui**, enno Kevrennou pe Skourrou-studi disheñvel,

- danvezioù hag eurvezioù-studi an **Eilved Klas** o talvezoud ez-voutin evid an oll Liseaned.

Evid ar **Hlasou Kenta ha Peurechui** ("Première" ha "Terminale") n'eus embannet netra, evid bremañ, diwar-benn an danvezioù-studi hag an eurvezioù da implij evid pep hini. N'eus roet nemed anioù an deg bennag a "skourrou" disheñvel a vo adal 1993 ha 1994. An urziadur hag an eurvezioù a vo roet *diwezatoù*, pa vo ezomm<sup>25</sup>. Gand se n'eus netra merket evid c'hoaz, beteg bremañ, a-zivoud ar yezou-rannvro !... Nemed gouzoud a reer ne dlefe beza nemed *eun danvez-dre-zibab* e peb Kevrenn-studi, - e diavêz d'ar Skourr "Liziri" ma vo posubl kaoud daou... Evel-se eo ragwelet an traou, beteg-henn da nebeuta... Ha rag-se, *e chom eur chañs bennag c'hoaz* da lakaad cheñch an traou, - da lavared eo ar "yezou-rannvro" aotreet evid unan anezo !... Nemed da stourm a vo a-benn tizoud ar palze...

Evid an **Eilved Klas**, eun dra a zo da verka hag a heller selled outañ, moarvad, evel eun elfennig a fiziañs evid ar stourm da zond... Rei a ra Kelaouenn an Deskadurez taolenn an danvezioù red d'an oll Liseidi o studia ha roll an danvezioù-dre-zibab ma *rankont* kemer daou anezo. Hag evid ar re-mañ e kaver, o talvoud evid ar "Yez Veo-2" hag ar "Yez-Veo-3", an notennig-mañ "*Langue vivante étrangère ou régionale*".

An "*ou régionale*"-ze ne oa roud ebed anezañ nebleh e-barz an taolennou embannet, e miz Gwengolo warlene<sup>26</sup>... Tra ma kaved ar meneg-se, *e 1986*, diou wech e traoñ taolennou an "**enseignements obligatoires**" (evid ar Hevrennou A ha C) ha pemp gwech e taolennou an "**enseignements optionnels complémentaires**" (an danvezioù dre-zibab)<sup>27</sup>.

Ne oa notennig ebed euz ar seurt-se war an daolenn embannet er gelaouenn ofisiel o tisklêria, e miz Gouere 1991, ar reolennou divizet gand ar Ministr.

Eun tamm cheñchamant a zo eta e-keñver ar Yezou-beo aotreet evel "danvez dibabet" !... Troet on da gredi e heller gweled eno frouez ar rummad klemmou kaset da Jospin gand divennourien ar "yezou-rannvro", - er penn kenta anezo an Oksitaned, - ha gand ar Gannaded ha Kuzulierien kaset ganto e-leiz a liziri d'ar Ministr...

<sup>25</sup>Da lavared eo, ma komprenner mad, a-raog 1993 evid ar Henta klas, a-raog 1994 evid ar Hlas Peurechui.

<sup>26</sup>"**La rénovation pédagogique du Lycée**", Ministère de l'Education Nationale, p1 : "**Les mesures arrêtées par Lionel Jospin**". - P. 2 ha 3 : an danvezioù-studi, taolennet dre Gevrennou-studi ("Series").

<sup>27</sup>**Les Lycées demain**, leor 256 p., embannet gand an Deskadurez (CNDP., 1986).

Furroh o-deus kavet pennoù-braz an Deskadurez (ar re a vez aozet an traou ganto) implij, e-barz an "arrêté" embannet gand ar B.O., ar gerioù "yez estren pe rannvroel" e-keñver "yez-veo-2" ha "yez-veo-3"...

Ne dalvez an tamm kemmenadenn-ze, avad, nemed evid an Eilved Klas !

Red eo dond a-benn ma vefe kemmet an traou ivez evid an daou glas diweza, Eilved ha Peurechui, gand tizoud e vefe aotreet enno an daou zanvez-dre-zibab, gelloud implij anezo evid ar Vachelouriez.

Diod-mad eo aotrei an daou zanvez-dibabet, - ar yez-rannvro en o zouez, ha paouez trumm da houde gand studi unan anezo... ar yez-rannvro ha n'ema ket war roll taolenn "La Rénovation Pédagogique du Lycée"..

Anad eo n'e em ouestlo ket liseidi an "Eilved" da studia brezoneg, oskitaneg, katalaneg, euskareg pe korseg ma ouzont ne hellint ket derhel d'hen ober en daou glas uheloh... ha lakaad o studi da dalvoud er Vachelouriez<sup>28</sup>..

Hag efedou an harz-se lakeet ouz studi ar yez-rannvro a vo ken gwaz all **e-barz ar Skolachou** ! Perag mond da implij amzer war eun danvez-studi ha ne zalho ket da dalvoud e bloaveziou diweza al lise hag en arnodenn a vez d'o feurgloza ?

Hag efedou ken drastuz e vo beteg e-barz an **Derez Kenta** ! Mar bez harzet ouz kelenn ar brezoneg hag ar yezou minorezel all e bloaveziadou diweza al lise, e vo taolet d'an traoñ kement a zo bet gonezet evid or yezou abaoe 1982-83 !

Ar pezh a zo da ober : derhel da boueza muioh-mui beteg ma vo aotreet adarre ar "yez rannvroel" evel danvez-dre-zibab penn-da-benn en tri glas al Liseou, - koulz er Henta hini hag en hini Peurechui, evel m'eo diwar-vremañ en Eilved. Hag evid an dra-ze, e ranker kaoud an **Eil Danvez-dre-zibab** a-hed studiou al Liseou ha n'eo ket hepken en "Eilved" ! Ne zalhfe ket penn ar yez-rannvro ouz kevezerezh eur yez estren evel Yez Veo nemeti.

RED EO DISTREI D'AN DAOU ZANVEZ-DIBABET PENN-DA-BENN DA DRI BLOAVEZIAD-STUDI AL LISE !

G.S. : Gwall rouestlet e hañvalo beza, marteze, va displegadurioù diwar-benn ar helenn e-barz al liseou gand ar Hevrennoù-studi hag an Danveziou-dre-zibab !... Ma n'eo ket sklêr a-walh ar pezh a laran, ra vin digarezet. Euz va gwella em-eus klasket disklêria an traou. - Kas a rin fotokopioù euz taolennou ha disklêriadennou an Deskadurez da neb a skrivo din (kas al liziri da v-"Vrud Nevez)... Bez' e hellin ivez rei skwerioù euz al liziri da veza kaset d'ar Gannaded, - ha d'ar Gandidated a zo war ar reñk evid ar votadegoù a vo dindan miz. Ar mare mad eo evid goulenn diganto beza a-du gand ar Helenn brezoneg.

\*

\*\*

. **1.2.92** : Kemeret perzh ganin evid "Emgleo Breiz" en Emvod bloaz ar Huzul Sevenadurel, tro em-eus bet da zisplega eno pebez braz a riskl a zo, gand reolennoù nevez al liseou hag ar skolachou, e kouezfe da netra kement a zo bet gonezet abaoe an deg bloaveziad diweza-mañ.

Eur pennad klemm stard a vo kaset gand "**Kuzul Sevenadurel Breizh**" d'an Dilennidi o houlen diganto poueza kement ha m'hellont war Vinistr an Deskadurez evid ma talho ar brezoneg hag ar yezou-rannvro all da dalvezoud da zanvez-dre-zibab en oll Gevrennoù al Liseou.

---

<sup>28</sup>Pe tra ken nemed evid an amproennig-dre-gomz krouet gand Lezenn 1950, - a hell rei eur poent bennag, tra ken, pa hellfe unan euz an amproennou-dre-skrid pe dre-gomz evel Yez-Veo-2 pe Yez-Veo-3 degas gonid kalz fetisoh dezo ("Coefficient"3).





## Derhel a ra E.L.Y. da vond war-raog gand e strivadenn

E **Breiz-Izel** : n'hell ket kreski a galz ken niver ar homuniou bet moueziet ganto mennadou « Evid Lezenn ar Yezou »... Ne jom mui nemed eun niver bihan a Guzuliou-Tiez-Kêr ha n'o-deus ket roet o skoazell d'or skrid o houlenn eur reolenn a-berz-Stad evid ar brezoneg ha yezou all Bro-Hall.

Er zizunvezioù diweza 'z eus bet kaset deom gand or Zekretourien, Jilberta Kervarreg (Henbont) ha Remon Ar Vod (Treleven), divizadennoù Kuzuliou...

- **En Drinded - Berne - Branderion - Kraha - Plumergad - Kleger**, komuniou a Vro-Wened (departamant at Morbihan).

- **Sant-Egantou - Plua - Lanrodeg - Trabriant**, komuniou a Gerne-Uhel hag a Vro-Dreger.

*D'ar 1<sup>a</sup> a viz Meurzh, war eun tri-hant komun bennag a Vreiz-Izel a gontom en daou zepartamant meneget ganeom, e chome c'hoaz eun deg-ha-tri-ugent bennag ha n'eo ket bet moueziet ganto ar skrid kinniget dezo. E ranker lavared koulskoude, e tlefe beza degemeret or Mennad, er zizuniou-mañ gand tro-dro eun dousenn pe eun dousenn hanter a Guzuliou.*

*Dond a raio ar poent, er mizvezioù da zond, da gloza ar strivadenn e-touez Kuzuliou-Kêr Breiz-Izel...*

Ha ma konter an 281 komun euz Penn-ar-Bed bet moueziet ganto skrid E.L.Y., ne jomo mui, neuze, heb beza eet a-du gand al Lezenn-a-ziazez goulennet, nemed eun *deg dre gand bennag* euz ar homuniou e kornog eul linenn o vond euez Plouha da Gêr-Wened ha Teiz.

E **Breiz-Uhel** : a-hend-all, emañ krog da houlenn o ali digand eur rummad kenta a Guzuliou. Tostaad a reer, evid ar mare, euz ar hantad kenta a aliou Kuzuliou a Vro-Hallo a-du gand ar « statut » o talvezoud kerkoulz evid ar galloeg hag evid ar brezoneg.

Gourhemennou d'ar geneiled emroüz a ra war-dro al labour kas skridou E.L.Y. ha kaoud darempred gand ar rummad kenta euz Mêred Breiz-Uhel a houlennom outo kinnig or skrid ouz o huzulierien. Eur skrid damheñvel ouz an hini bet degemeret a-unvouez gand Kuzuliou-Meur daou zepartamant al Liger-Atlantel hag an Il-ha-Gwilen, e miz Here ha miz Du diweza.

1.3.92

## Lizer digor Ar Falz da Benn-Rener ar Republik

En eul « lizer digor » savet a-zoare ha kaset da Brezidant ar Republik, e tegas da zoñj « Ar Falz » 'z eus bet kensinet gantañ meur a zanvez-lezenn o houlenn e vefe kelennet ar yezou-rannvro. Hag ez eus bet krouet, war e houlenn, eun aotreegez ar brezoneg, da houde, eur h-CAPES evid kelenn or yez, eo bet digoret ar henta klasou diouyezeg e-barz ar skoliou-Stad hag implijet ar yez-rannvro evel « danvez dibabet » en Eil Derezh...

Ha setu m'ema lakeet an oll draou-ze en arvar gand « adstummadur pedagogel al Liseou » dindan renerez ar Ministr Lionel Jospin. Reolenn an danvez-dibabet nemetañ en daou glas diweza e vo diskaret ganti talvoudegez studi or yez.

Rag-se, e houlenn « Ar Falz » ouz ar Prezidant ober ar pezh 'zo red evid ma ne vefe ket

kaset da get kement a zo bet greet abaoe ar pezh a oa bet prometet gantañ e 1981.

Gourhemennou a zo dleet da Zekretour-Meur Ar Falz evid al lizer savet ken reiz ha ken eeun gantañ ha kaset da Renner ar Stad.

Daoust avad ha mond a ray eur skrid seurt-se beteg dindan daoulagad Fañch Mitterrand, - n'on ket sur tamm ebed !... Anaoudegez em-eus bet euz lizerou all diwar-benn ar yezou-rannvro, sinet gand tud vrudet, lod 'zo gand meur a gant den, - liziri ha n'o-deus bet respont ebed !

### **Manifestadegoù evid ar Helenn brezoneg**

Dindan renerez U.G.B., manifestadegoù a zo bet, e miz C'hwevrer, e Kemper hag e Roazon, manifestadegoù kelennerien ha kerent o houlen dreist-oll ma vefe urziet da vad eur raktres evid stummadur ar vistri hag evid ma vefe dalhet d'ar helenn brezoneg e-barz skolachou ha liseou ar Stad.

E Lannuon eo bet degemeret gand an Iz-Prefed dileuridi an U.G.B. hag an APEEB (kerent a-du gand ar skoliou diouyezeg). E Kemper, diviz a zo bet etre dileuridi ar vanifestadeg hag ar Prefed. Hag e Roazon ez eus bet embannet eun toulladig chifrou gand Rektor an Akademiezh. Hervez « Ouest-France », disklêriet eo bet gantañ ez eus 10.000 skoliad hag a vez studiet ganto ar brezoneg, ha 2.000 ar galloeg (ne lavarer ket ped eurvez ar zizun...). Hag e konter eun tri-ugent kelenner o rei kenteliou brezoneg en or yez e-barz ar skolachou ha liseou. N'eo ket bet sklêr avad ar pezh a zo bet lavaret diwar-benn an danveziou-dre-zibab...

Souezet on bet o kleved Erwan Evenou, Enseller nevez evid ar Helenn brezoneg, o tisklêria e Roazon, dirag ar vanifesterien... ha dirag kamera ha mikro FR3, penaoz e hello al liseidi studia ar brezoneg e-diabarz « atellerou »... Meneg a zo euz ar stumm nevez-se a labour-skol hag a vefe implijet evid danveziou-studi lakeet e-diavêz pe ouspenn an danveziou « klasel » all... Setu aze, d'or zoñj, eun dro-gamm nevez,- eun taol-sigoterez a vefe ar ger mad o tereoud, - evid ober van n'ema ket lamet kuit ar brezoneg hag ar yezou minerolezet all a-douez an danveziou kelennerien... Bez' ez eo eun doare-kamm evel « danvez-dre zibab » e-barz ar hlasou Kenta ha Peurechui... ha goude ma vint aotreet koulskoude en Eilved klas...

Stard a-walh e tle beza bet evid eun den evel Erwan Evenou, - unan euz diazezerien « Galv », er bloaveziou 70, - divenn eur seurt trell-lagad !...

### **Skrid-feur Maastricht**

D'ar 7 a viz C'hwevrer ez eus bet sinet, e Kêr-Masstricht (Izelvroioù), gand penn-renerien ar Stadou oh ober Unvaniezh Europa, eun emgleo pe skrid-feur a oa war ar stern abaoe mizveziou, o tisklêria ha resisaad a-nevez stumm ha doareou-labourad « Kununded an Daouzeg » evel m'ema bete-vremañ. Bez' e tle skrid-feur Maastricht beza gwirieket gand Parlamantou an daouzeg bro kenstrollet.

Talvezoud a ra ar boan evidom-ni Bretoned teurel eur zell dre vraz ouz eur poent bennag euz ar skrid-se, na pa ve ken dre m'ema meneget ennañ ar sevenadurioù a rannvro...

Mad eo menegi da genta e vo renet ar Gumunded doare nevez, evel m'ema bremañ gand ar Huzul-Meur hag ar « Gomision », dezo avad eun tamm mad muioh a halloud eged n'o-deus bremañ, ha gand ar Parlamant (anvet ar Gannaded anezañ war listennou

dre Stad).

Hiviziken, e vo, ouspenn-ze, eul « **Lez ar Hontou** », eur « **Bodad (strollad) ar Rannvroioù** », eur « **Bank Europead Postadur** », eur « **Bodad Ekonomikel ha Sosial** »

A-bouez-braz e tlefe beza Bodad ar Rannvroioù, - a roio aliou d'ar Huzul-Ren, d'ar Parlamant ha d'ar Gomision, - ha dezañ izili anvet gand ar Humunderioù rannvroel ha lehel.

Deom da houd a tleo Komision Kumunded Europa sevel eur skrid evid ar Huzul-Ren a-benn an 31.XII.93, - ha da houde kemend-all beb tri bloaz, - o terezhella penaoz eo bet lakeet en implij reolennou ar skrid-feur a-ziabez.

Disklêria a ra ar skrid a-ziabez ar poentou dre-vraz m'eo en em glevet ar Stadou sinerien douja outo. Ha ne vo ket hepken evid pezh a zell ar Henwerz, an Ijinerez, ar Hudennou sosial, ar Yehed hag all... Bez' e vo ivez da deurel evez ouz reolennou o tenna d'an Deskadurez, d'ar Stummidigez vicherel, d'ar Yaouankiz ha d'ar Sevenadur.

Ha war ar poent-mañ e tleo ar Gumunded teurel evez e labourfe ar Stadou-izili da zougen bri da liez-doare o stummou broadel ha rannvroel gand lakaad war-wel o herez sevenadurel.

Strivou ar Gumunded a vo dezo da bal harpa ar henlabour gand ar Stadou, oh harpa anezo e kement a reont evid mired ha gwarezi talvoudegez o hulturioù, an Deskadurez o terhel kont euz o liez-doare war an dachenn sevenadurel ha yezoniel.

Kaoud a ra din ez eus eno eun digor euz ar henta war ar pezh a vez anvet e Bro-Hall ar « yezou hag ar sevenadurioù-rannvro » ha ne varhater ket, er broioù all, da implij evito ar ger « minorezel ».

### **Kenan Kongar**

D'an 10 a viz C'hwevrer eo marvaet, en e di, e Berlewanez, Frañsez Kervella, - Kenan Kongar diouz e ano-pluenn (evid e oberou a lennegezh).

Ganet e 1913, e Dirinon, e oe kaset, goude e vloaveziou a skol genta, da lise Kêr-Vrest. Anaoudegez a reas eno gand Roparz Hemon - Louis Nemo - kelenner war ar zaozneg, ha krogi a reas, hag eñ yaouank c'hoaz, da labourad war ar brezoneg, yez e gavell. Hag eñ troet war studi traou an natur, e yeas, goude bet gantañ e vachelouriez, da heulia kentelioù Skol-Veur ar Skiantou e Roazon.

Dond a reas abred da veza eur henlabourer a dalvoudegez da Walarn, a embannas e oberennou kenta, anezo kontadennou ha barzonegou a dalvoudegez.

Savet e oe gantañ, e-doug ar bloaveziou brezel, e oberenn veur, e « Yezhadur bras ar Brezhoneg », eur pikol leor ha n'hellas beza embannet nemed e 1947 gand « Skridou Breiz » er Baol (Adembannet eo bet, e 1976, gand « Al Liamm »).

Meur a oberenn all a zo bet skrivet gand F. Kervella : studiadennoù a beb seurt, dreist-oll diwar-benn geriadur ha yezadur ar brezoneg, barzonegou, hag all... An oberenn diweza diwar e zorn a zo : « An ti e traoñ ar c'hoad »

### **Etienne Manac'h**

Eun dlead eo ober meneg e « Brud Nevez » euz marvidigez an Aotrou Etienne Manac'h, bet e-pad eun toullad bloaveziou Kannad Bro-Hall e Republik Bro-Sina.

Stag e oa E. Manac'h ouz e vro hinidig hag ouz he yez. Roet e-noa e asant adal 1986, evid beza ezel euz Strollad a Enor ar Halvadenn evid Lezenn-a-ziabez ar brezoneg ha yezou all Bro-Hall. Ouspenn eur wech on-eus bet darempred dre lizer gantañ diwar-benn harpa strivadenn E.L.Y. evid lakaad or Huzulioù-Tiez-Kêr da vouezia or skridou-mennadoù.

Delher a raim outañ eñvor eur henvroad brudet, anezañ eun divenner euz personelez

Breiz ha talvoudegez yez e vro.

**A. Keravel**

## PETRA RAY JACK LANG ?

Petra ray Jack LANG, - Ministr nevez an Deskadurez hag ar Zevenadurez, - e-keñver Kelenn ar Brezoneg hag ar Yezou-rannvro all ?...

Eur Helenn lakeet er brasa arvar abaoe warlene gand reolennou iskiz Lionel Jospin !

Bez' e oa hemañ o klask skarza ar yezou-rannvro er-mêz euz ar peb muia a « Rummadou-studi » al Liseou... pe ouz o bounta e « labouradegou » (atalierou) damguz !

Ha nevez zo, embannet e oa bet gantañ e rankfe oll bugale **ar Skoliou-Kenta** kregi da zeski eur yez estren... Pez a lakfe anezo da zilezel yez o bro, ha kement-se adal miz Gwengolo a zeu !...

N'eo ket posubl e hellfe Jack LANG, penn-sturier nevez an Deskadurez derhel da lakaad implij ar seurt reolennou !

Ne hello ket Divenner-Meur ar Sevenadur gouzañv e vefe lakeet en implij an urziou kasauz ijinet gand e ziaraoger !

Ar Ministr bet gourhemennet gantañ al leor-dezrevell : « **Demokratelez Sevenadurel ha Gwir an Disheñvelder** » e hortozet euz e berz ma lakay dond en-dro d'eur Helenn divennet a-grenn gantañ abaoe bloaveziou.

Eur Helenn bet urziet e 82-83 gand e genvreur, ar Breizad Alan SAVARY, goulennet gand kemend-all a zanveziou-lezenn hag, amañ, e Breiz, gand on oll Guzuliou-Meur ha gand 600 a Guzuliou-Tiez-Kêr !

### Ar pez a zo e-barz reolennou Jospin

#### 1.- Eur zell war-dreñv

Red eo dond en-dro war ar pez a zoñje Lionel JOSPIN... a-raog 1991....

Da geñver ar henta votadeg evid Parlamant-Europa, e tisklêrie, - hag eñ e penn listenn ar P.S., - e rank beza roet d'ar Yezou-Rannvro ar plas dleet outo, hervez m'eo bet sinet gand gouarnamant Bro-Hall o tegemer eun toullad mad a Emglevadegou etrebroadel, - hag evel ma'z eus bet goulennet aliez gwech gand danveziou-lezenn disklêriet gand ar Sosialisted hag ar strolladou politikel all...

E **1984**, e houlennas Jospin beza lakeet da *eil siner* an Danvez-Lezenn Destrade (evel m'e-noa greet e 1980 F. MITTERAND gand beza eil-siner danvez-lezenn L. AR PENSEG).

E **1991**, Ministr an Deskadurez abaoe 1986, a responte dre lizer ouz goulennou Kannaded Breiz a zo hag a houlennatae anezañ a-zivoud ar pez a vez greet evid kelenn ar yezou ha sevenaduriou-rannvro. Talvezoud a ra ar boan selled ouz ar pez a skrive,- e miziou *C'hwevrer* ha *Meurz 91* eta,- da zeputeed a Vreiz euz an tu dehou koulz hag euz an tu kleiz. War deir bajennad-lizer e tisplege kement a vez greet gand an Deskadurez evid ar Helenn-ze... Degas a ree da zoñj Lezenn Deixonne (1951), kelhliziri Alan SAVARY (1982

ha 83) hag ivez Lezenn Emdroerez ar Gelennadurez, - bet kinniget gantañ e 1989, ha m'eo meneget enni e tleer derhel kont euz Kelenn ar yezou ha sevenaduriou-rannvro e kement Derez a zo euz an Deskadurez...

Ha laouen ar Ministr o tibuna d'e genskriverien e oa 5.543 a vugale euz ar skoliou-Stad Kenta Derez, - e 154 skol, - oh heuill kenteliou brezoneg, kelennet gand 242 a vistri... Hag e oa Skoliou diouyezeg en Akademiezh Roazon, enno 330 a skolidi. Menegi a ree, ouspenn-ze e oa bet krouet eur post skolaer ouspenn, « e bourh BREH, e bro an Alre, evid digeri eur skol diouyezeg ouspenn »... Hag e oa war ar studi stummadur ar vistri war ar brezoneg en I.U.F.M.... Hag eñ o tisplega c'hoaz e hell ar Skolacherien hag al Liseidi heulia kenteliou yez ha Sevenadur Breiz, e-pad teir eurvez, beb sizun,- ha tremen eun arnodenn evid an danvez-studi-ze, *kerkoulz evid ar BEP (Breved) hag evid ar Vachelouriez*.... Rei a ree d'ar Gannaded munudou war ar reoliadur implijet, - munudou ha ne lakaan ket amañ, evid chom heb hirraad...

Lorh eta gand ar Ministr o rei d'anaoud d'e genskriverien kement a vez greet e skoliou an Derez Kenta koulz hag en Eil Derez evid or Yez hag or Zevenadur.

**2.- D'an 22 a viz Ebrel 1991**, avad, - tra ken nemed *eur miz goude beza sinet unan euz al liziri meneget amañ a-zioh*,- setu ar memez den o tisplega dirag eur rummad kelaouennerien ema o prienti « *reolennou nevez* » e-sell eun « Adstumma pedagogel al Liseou »... Hag eñ o tisklêria e rank beza lamet kuit ar re a « garg-labour » a zo sammet gand kalz a liseidi... en abeg d'an « *danveziou-dre-zibab* » kemeret ganto !... danveziou-dre-zibab m'ema en o zouez ar Yezou-Rannvro, - ar brezoneg, ar galloeg, hag oll yezou minorezel ar Vro-Hwehkorn...

Ano ebed euz ar seurt danveziou-studi er « hinnigadennou » diskuillet gand ar Ministr en e brezegenn an 22 a viz Ebrel 1991 dirag tud ar helaouennou... Nemed, miz goude, e *miz Mae*, e teu er-mêz eun tamm kelaouennig peder bajenn « La Rénovation pédagogique du Lycée » (kaset dreist-oll d'ar Renerien-Lise) hag a ro da anaoud « *Ar reolennou kinniget gand Lionel Jospin* ».... Kavoud a reer eno taolenn an 8 Rummad-studi (« Séries ») hag a vo degemeret enno al liseidi, hiviziken. Hag ivez roll an « danveziou-dre-zibab » (2 « *dre red* » en « Eilved, - unan hepken, ha *dired*, er Henta klas hag en hini « Peurechui »). An danveziou-dre-zibab ez eus anezo ar *Yezou-beo 2 ha 3*, ar *yezou koz* (latineg, gregaj), ar jedoniezh, al liziri, ar skiantou a beb seurt, an arzou, hag all... *Meneg ebed avad euz ar Yezou-Rannvro*,- hag a oa douget o ano kentoh war roll an danveziou-studi a helled dibab e kement Rummad a oa ha war oll daolennou ar Vachelouriez (levrig « Le Lycée, demain » Deskadurez, 1986)....

*E miz Gouere*, e teu er-mêz eun niverenn all euz « La Rénovation pédagogique du Lycée » o tisplega, an taol-mañ ar pezh a zo « *Ar reolennou divizet gand Lionel Jospin* » (« Les mesures arrêtées par L.J. »). Eno e kaver adarre roll an « *danveziou klokaad* » (« matières complémentaires ») hag hini an « *danveziou-dibabet* » gand ar skoliad ». Kemm ebed gand taolenn miz Mae, nemed e hello beza 2 zanvez-dibabet (e-leh unan nemetken) evid ar Rummad « L » (lennegel)... Ha n'eus kaoz nebleh euz ar « *Yezou ha Sevenaduriou-Rannvro* » a oa bet roet digor ledan dezo gand A. Savary, e 1982-83...

Kemennet zo e talvezo ar reolennou nevez *adal ar bloavezh-skol 1992-93* evid an « Eilved klas », *adal 1994* evid ar Hlas Kenta, *adal 94-95* evid ar Hlas Peurechui,- hag evid ar Vachelouriez.

3.- Ne zeblant ket e vefe bet dedennet evez divennourien ar brezoneg, nag adal Ebrél-Mae, na zoken adal miz Gouere, gand reolennoù nevez Jospin... Ni on-unan, e « Emgleo Breiz » n'on-doa klevet ano anezo nemed en eun doare dispiz.- Hag ar henta kelou sklêr a deuas beteg ennom a oe ar Mennad a oe kaset deom gand an « *Universitad d'Estiu* » oksitaneg (miz Eost), o seni ar hloh-galv, hag o rei da gleved preder stourmerien Bro-Oksitania. Gwall enkrezet or heneiled, hag int o sevel klemm da Bariz, hag o rei da houd d'ar helaouennoù ha d'o dilennidi. Dioustu e kroge ar F.E.L.C.O., gand difreou diouz tu ar Sindikajou, ar Gannaded, an Emzavioù-Rannvro ha sevenadurel en o 7 Rannvro, euz Bourdel da Aix hag euz Montpelhier da Glarmont. Ha gand rei da houd deom-ni e Breiz, hag ivez da rener « Kuzul Sevenadurel Breizh », bet e Montpelhier da geñver eur vodadeg etre Kuzulioù Sevenadurel ar Rannvroioù emvodet er gêr-ze.

Diouz on tu, - amzer deom degemer skridou ha disklêriadurioù or heneiled Bro-Oksitania, spisaad an oll geleier,- e stagem da lakaad an traou da veza anavezet, amañ, e Breiz... Heb tamm berz ebed, avad, e-pad tost da zaou vizad-amzer... Koll amzer a oe evidom kas kelou, e miz Here, d'ar helaouennoù... Ha diouz tu emzavioù Breiz e rejom kazeg ivez !... Netra a-zivoud ar riskl braz da weled mouget ar helenn brezoneg en Eil Derezh !...

On eil pennad-skrid kaset d'ar helaouennoù ha d'an Emzavioù,- d'an 13 a viz Du ha lakeet da ditl dezañ : « Vers la suppression de l'option et de l'épreuve de breton au Bac » (eun titl stard-tre a-ratoz-kaer) a oe, lakom, damveneget gand notenni e tiskoueze E.B. beza « nehet »... Ha seurt ebed, koulz lavarerd, an taol-mañ c'hoaz, a-berz ar Strolladoù breizeg, diouz ma ouzom, da nebeuta...

Anad a-walh e oe diskouezet, d'ar 16 a viz Kerzu, ne zeblante ket an Emzavioù beza trechalet gand ar riskl a oa war-wel evid ar helenn brezoneg. Kement-se, da geñver eun emvod bet meneget dija e B.N., ha dalhet e Kêr-Vrest. Ne dalvezas ket da galz tra beza bet displeget eno ganin e oa lakeet en arvar kelenn or yez gand ar reolennoù embannet evid al liseou... Ma oe greet meneg euz ar riskl braz-se, e « Bremañ », ha ma oe embannet or skrid war « Ar Falz », ne oe roet kelou all ebed, na savet klemm na manifestadeg ebed a-eneb da zizentezioù hag a vo mouget ganto ar peb muia euz ar rummadoù kentelioù brezoneg e-barz al liseou... Ha da heul, kaset da fall, ma n'eo ket da goll, kement tra bet gellet ober, beteg-henn, e « Derezioù » all an Deskadurez-Stad (ha Prevez), evid Yez Vreiz...

4.- Er heit-se, avad, o-doa kroget a-zevri-kaer or heneiled a Vro-Oc en o stourm ouz reolennoù ministr an Deskadurez. Roet o-doa brud d'ar riskloù braz strewet war hent kelennadurez o yez... ar hontrol beo euz ar pezh a oa bet gouestlet dezo gand Jospin e-unan, ha dres e Tolosa, e 1990, pa deuas da zisklêria e « blañ » evid kreski, astenn, ledannaad war bep tu, e peb live-skolioù, ar helenn oksitaneg... Eur plan ijinet war-wel d'ar votadegoù da zond ar bloaz-mañ, e-sell êsaad dezañ dond da veza Penn-Rener ar Rannvro « Kreisteiz-Pireneoù »...

Ha mond a ra da Bariz dileuridi ar F.E.L.C.O. (eur strollad Kelennerien oh en em astenn war seiz Akademiez). Degemeret e vezont gand Kuzulierien Jospin (hag a zo moarvad e-touez ar re o-deus ijinet ar « reolennoù nevez »...). Anzav a rank kenlabourerien ar Ministr ez eus, en urzioù embannet, traou da veza reizet, da skwer e-keñver an « danvezioù-dreizibab ». Ha gouestla a reont, en ano ar Ministr, e vo embannet eur « reizadenn » « un correctif ») evid ar Yezou-Rannvro. Eur reizadenn ha ne lavaront ket ar pezh a vo enni hag a vo embannet a-benn...« hanter miz Kerzu »...



Ar « reizadenn » ne vezo anavezet, avad, nemed e miz Genver... dindan stumm eun notennig berrig-berrig, e-barz niverenn an 23 a viz Genver euz kelaouenn ofisiel an Deskadurez. Eun notennig pemp ger, e « riblenn » eur skrid-embann<sup>29</sup>, o venegi e hello ar Yez-Rannvro talvoud koulz hag eur Yez-estren, evel eil pe drede Yez-Veo... N'eus kemennet netra, avad, evid *niver* ha roll an danveziou-dre-zibab a hell beza aotreet da Liseidi ar Hlasou Kenta ha Peurechui<sup>30</sup>...

Divizet e vez gand ar F.E.L.C.O. derhel da stourm dre boueza war ar Ministr... ken braz c'hoant gand hemañ gonid votadeg miz Meurz... A-hend-all, eur Hendalh a zo gand kelennerien ar Hatalaneg, o sevel klemm, int ivez, na petra 'ta, diwar-benn ar strisaad degaset war gelenn o yez gand reolennoù Jospin. Poueza 'ra an Emzaviou war o hannaded evid harpa o goulennou ha klemmou, - evel ma reom-ni, amañ, e Breiz, abaoe miz Here ha miz Du war zilennidi or bro, kannaded ha kuzulierien-Rannvro. A-hend-all, sekretourmeur « Ar Falz » a gas eul lizer ampart-mad da Brezidant ar Republik, ha Strollad An dilennidi-Brezonegerien a ya da Roazon da houlen sklerijenn digand ar Rener Akademie diwar-benn kemennadennoù Ministr an Deskadurez : eur respont dispiz kenañ a zo roet dezo... Eun nebeud deveziou goude, da heul eur vanifestadeg dirag ar Rektordi, kelennerien an U.G.B. a zav klemm d'o zro ouz an urziou nevez da dalvoud adaleg 92-93... Klevet e vez ganto Enseller nevez ar Helenn brezoneg o tisplega (dirag mikro FR3) e ranko hiviziken or yez beza studiet e-barz « atalieroù », - da eurveziou divizet e peb lise (e diavêz da eurveziou-boaz ar skolioù ?)<sup>31</sup>...

Bremañ, avad, emaoñ dija eiz miz abaoe m'eo bet embannet skridou kenta ar reolennoù divizet gand Jospin... hag eur c'hweh miz bennag m'on-eus klasket gand Emgleo Breiz ha « Brud Nevez » dedenna evez an Emzao breizeg war ar riskl meur a zo gand ar reolennoù-ze evid ar helenn brezoneg, en Eil Derez !

Ha setu ma kouez warnom, e penn kenta miz Meurz, eur helou fall ouspenn, eur helou euz ar gwasa !... Hag an taol-mañ eo diouz tu *ar skolioù Kenta-Derez* e kouez an taol... N'eo ket anavezet dioustu ar pezh a zo bet displeget gand Jospin, d'an 19 a viz C'hwevrer e-sell êsaad hag astenn kelenn ar yezou estren... beteg e-barz ar Skolioù-kenta... Ar helou a gavom e-barz ar follennig-kelaoui « La lettre TGV » a vez kaset bep sizun d'ar Renerien-Skol-Eil-Derez... N'on-eus bet anaoudegez euz hini ar 24 a viz C'hwevrer nemed e miz Meurz, gand eun tamm brao a zale eta... ha dibosubl eo bet deom eta rei ar helou e nivrenn 153 B.N....

An taol-mañ, en on niverenn miz Ebrel B.N., e hellom rei da anaoud en o hed ar heleier kemennet gand al « Lizer TGV » : gwelet e vo pelloh an « daolenn » a gaver war eil pajenn an tamm skrid-se... ha lakeet ganeom e brezoneg Gweled e reer dioustu ez eo kelou fall-pud an « urziou » roet gand Jospin... a-raog dezañ beza dilezet gantañ e garg a Vinistr an Deskadurez. Ar pezh e-neus ranket ober goude votadegoù miz Meurz !...

... Bremañ n'eo ket war e du eo e tleom en em drei, diouz tu Jack LANG an hini eo !

Ha petra vo greet gand Jack LANG e-keñver ar yezou ha sevenadurioù rannvroioù Bro-

---

<sup>29</sup> An daolenn-mañ a zo savet diwar skwer ar follennig kelaoui sizuniege embannet gand Renerez an Deskadurez, dindan an ano souezuz-mañ « **La lettre TGV** », - niverenn ae 24-2-1992.

Ar bajenn genta a zo warni, dindan an titl « **LANGUES PLUS** », eun toullad berrig-mad a ziskleriadurioù o tisplega an « Daolennad »-studi nevez evid « ar Skolioù, Skolachou, Liseou », bet displeget dirag Kuzul ar Vinistr an 19 a viz C'hwevrer. 2« Arrêté » 17-1-92, diwar-benn urziadur hag eurveziou an Eilved Klas.

<sup>30</sup>Eun digarez brao d'an Deskadurez chom peoh war ar poent-se. N'eo ket deut er-mêz an « arrêté » evid ar hlasou-ze... Rag-se, ra jomo al liseidi gand o « danvez-dre-zibab » nemetañ... hag eñ dired !...

<sup>31</sup>Bez' e tleer menegi amañ ivez ar hlemm kaset gand ar Huzul Sevenadurel bet emvodet e Roazon d'ar henta a viz C'hwevrer.

Hall ? A-dra-zur, anavezet eo Jack Lang evid ar pezh e-neus lavaret meur a wech diwar-benn gwirioù ar sevenadurioù hag ar yezoù « bihan ». Amañ, e Breiz, e-neus bet komzet a-du gant divennourien ar brezoneg,- er Broioù-Oc ivez, ha meur a wech...

Adal m'eo deuet da veza Ministr ar Sevenadur, e 1981,- ar pezh eo chomet abaoe (nemed e-pad daou vloaveziad ar « hen-annezadur » gant an tu dehou, etre 86 ha 88...) - e-neus bet J. Lang diskouezet e chome a-du krenn gant harpa ar yezoù-rannvro... Da skwer, karget e oa gantañ or heneil mad, Henri Giordan, an Oksitanad ha ne ehan ket da oberia evid ar yezoù minorezel, karget e oa gant J. Lang eta da zevl eun dezrevelladenn diwar-benn or yezoù... Hag embannet e oa ar « rapport » goulennet e 1982, gant skoazell ar Ministr, na petra 'ta<sup>32</sup> !

Emichañs, bremañ m'ema war eun dro e penn Ministrerezh an Deskadurezh hag hini ar Sevenadur, ez eus abegoù mad da gredi e vo sellet a-nevez ouz ar reolennoù ken difur ha ... dihortoz embannet gant Jospin (ha bet aozet gant e goskor a « Guzulieren » !

Pegeid, avad, e vo ranket gortoz ma vo lakeet a-nevez politikerezh an Deskadurezh e Bro-Hall war an hent bet digoret, deg vloaz a zo, gant Alan SAVARY<sup>33</sup> ?

Mil boent e vefe da Strollad an Emzao, amañ e Breiz, sevel o mouez ha poania evid ma teufed en-dro d'ar reolennoù savet gant or henvroad « **da gas war-raog kelennadurezh ar yezoù ha sevenadurioù-rannvro e servij boutin an Deskadurezh.** »

10 a viz Ebrel,

*Amañ, pelloh, taolenn reolennoù Jospin, e-keñver kelenn ar Yezoù, en Derez Kenta hag en Eil Derez.*

\*

\*\*

**E.L.Y. : Kelou berr-ha berr**

Mennadoù degemeret digand Kuzulioù-Tiez-Kêr : **Melesse** (Il-ha-Gwilen) - **Sant-Jili-ar-Hoad** (Bro-Ouelo) - **Persken** - **Melran** - **Bredeù** (Brandevi) - **Noaleù** (ar 4 gomun-mañ e Bro-Wened) - **Sant-Yann-Kerdaniel** - **Lezardreñ** - **Kerien-Boulvriag** (an 3 gomun-mañ e Bro-Dreger).

Ema E.L.Y. o staga gant goulenn digand eun toullad mad a gomunioù a Vreiz-Uhel mouezia d'o zro a-du gant eul Lezenn-stur evid ar Yezoù ha Sevenadurioù-Rannvro. Meneg a zo e-barz ar Mennad kinniget euz daou stumm kultur Breiz : ar **stumm keltieg** (brezoneg) hag ar **stumm galloeg** (gallo).

Rei a reer da houzoud da Vêred 400 pe 450 komun bennag euz Breiz-Uhel ez eus bet dastumet dija 600 Mennad, hag en o zouez 85 bet moueziet gant Kuzulioù euz lodenn hallo Aochou-Arvor hag ar Morbihan, hiniennou ivez euz an Il-ha-Gwilen hag al Loar-Atlantel.

Eun titl e galloeg a ya bremañ da heul an hini e brezoneg (**Evid Lezenn ar Yezoù**). : **Pôrr la lei sus lez laungg.**

<sup>32</sup>« **Democratie culturelle et Droit à la Différence** », gant H. Giordan - rapport commandé par Jack Lang, ministre de la Culture ; - edit. La Documentation Française, 1982.

<sup>33</sup> Alain Savary, den a orin breizeg, hervez ma lavaras din pa oan eet d'e weled, en ano Mêr Kêr-Vrest, evid ma vefe aotreet, gant Skol-Veur Breiz-Izel al Liziri, al lisañs-studi a vrezoneg.

## REOLENNOU Lionel JOSPIN

### AR YEZOU-BEO ESTREN, kelennet dre-red, pe evel « Danveziou-dre-zibab »

**SKOL-GENTA,** Klasou-krenn 1 ha 2 (CM-1 - CM-2)  
YEZ-VEO (dre « zantidigez »), da veza kelennet **dre-red en oll CM2 adaleg 92-93.**

**SKOLAJ .** C'hwehved ha Pemped klas : YEZ-VEO-I  
Pevare ha Trived klas : YEZ-VEO-I ha YEZ-VEO-II

**LISE** (evid ar Rummadou-studi dre-vraz ha Teknikel) :

**Eilved klas.-** Dre red: YEZ-VEO-I

Dre zibab: YEZ-VEO-II, er Rummad « LENNEGEZ » e heller kemer YEZ-VEO-II, pe YEZ-KOZ (latineg pe gregaj, pe YEZ-RANN-VRO. Dre zibab, e heller kemer ivez: YEZ-VEO-III.

Er rummad « ES » (« Ekonomiezh ha Skiantou »), e heller kemer YEZ-VEO-II, pe '« YEZ-RANNVRO ».

**Klas-Peurechui,** er Rummadou « S » (Skiantou), e « heller kemer ar YEZ-VEO-II ouspenn ar YEZ-VEO-I; meneg ebed, war an daolenn, evid ar Rummad-se, euz ar YEZ-RANNVRO.

Evid an **Eilved hag ar Hlas-Peurechui - BEP,** n'eus meneg nemed euz ar YEZ-VEO-I

Evid **Kenta Klas ha Klas-Peurechui** ar Rummadou « **Micherel** », ar YEZ-VEO-I a zo dre-red, ar YEZ-VEO-II a zo « dre-zibab », - hogen n'eus meneg ebed, amañ c'hoaz. euz ar YEZ-RANNVRO.

(1) An daolenn-mañ a zo savet diwar skwer ar folennig kelaoui sizunieg ermbannet gand Renerez an Deskadurezh dindan an ano souezuz-mañ « **La lettre TGV** », - niverenn ar 24-2-1992.

Ar bajenn genta zo warni, dindan an titl « **LANGUES PLUS** », eun toullad berrig-mad a zisklêriaduriou o tisplega an « Daolennad studi nevez evid « ar Skoliou, Liseou », bet displeget dirag Kuzul ar Vinistred an 19 a viz C'hwevrer.

(2) Red eo kaoud soñj ne heller kemer, en Eilved Klas hag er Hlas-Peurechui, nemed « **eun danvez dre zibab** ». Evelato, er rummad « L » (Rummad Lennegezh), e heller kemer daou zavez-dre-zibab, - unan anezo o veza ... al Lennegezh.

E-keñver an « Danveziou-dre-zibab », n'eo ket bet gwelleet an traou evid ar peb brasa euz ar Rummadou-Studi, evid kement a zell ar Yezou-Rannvro !

Ma heller dibab ar Yez-Rannvro evel YEZ-VEO-II er Rummadou-studi « L » (Lennegezh hag « ES » (Ekonomiezh ha Skiantou), e chom ar Yezou-Rannvro heb beza aotreet evid ar Rummadou all : « S » (Skiantou, « STI » (Skiantou ha Teknologiezhioù), « STL » (Skiantou ha Teknologiezhioù a Labouratoueroù), « STT » (Skiantou ha Teknologiezhioù Trede-urz, - ar Hoñvers), nag evid ar Gelennadurezh Vicherel (2 Rummad anezo : Ijinerzh hza Koñvers).

En doare-ze, ar « reizadenn » (« correctif »), bet gouestlet gand Kuzulierien Jospin (hag

en e ano) d'or Heneiled Oksitaneg, ar « Yez-Rannvro » o veza aotreet tra ken evid Liseidi ar Rummadou « L » ha « LS », - **n'eo ket bet sevenet** : ar bromesa, n'eus ket bet dalhet dezi !...

**EVID LEZENN AR YEZOU  
BODAD BREIZEG LEZENN-STUR  
AR YEZOU HA SEVENADURIOU-RANNVRO**

**ASAMBLEOU DILENNET BREIZ  
O STOURM EVID AR BREZONEG HA SEVENADUR AR VRO**

A-benn Hanter-Houere, c'hweh-kant-ha-pevarzeg a Vennadou Kuzulioù Tiez-Kêr a oa en em gavet gand ELY o houlenn ma vo embannet eul Lezenn-stur (pe "statut") evid ar brezoneg ha sevenadur Breiz ha, kerkoulz, evid ar yezou ha sevenadurioù-rannvro all.

War ar 614 skrid-se bet moueziet gand Asambleou-Komunioù, pemp-kant triweh (518) a deu euz Tiez-Kêr a Vreiz-Izel. Da lavared eo euz damdost da 90 dre gand (89,31%, pa gonter pizig) euz ar 580 a gomunioù a gaver e-barz ar rannad-se euz Bro-Vreiz...

Red eo lavared, ouspenn-ze, ema harpet stard goulennou or homunioù gand on oll Guzulioù-Meur: or PEMP Kuzul-Departamant, ar C.E.S. (Kuzul Ekonomikel ha Kevredigezel) hag ar Huzul-Rannvro, - Kuzul-Breiz, - hag hemañ o rei da houzoud e talho da harpa stard eur goulenn hag a zo hini ar peb muia, - hag a-bell,- euz ar Vretoned.

Ha setu m'ema bremañ ELY o houlenn digand komunioù Breiz-Uhel (pe o vond d'hen ober goude an hañv) rei o skoazell d'ar goulenn kaset ken brao war-raog gand komunioù Breiz-Izel. Sevenadur ar Vro-Hallo a zo eun darn euz herez Breiz ha, rag-se, e tle beza gwarezet evel al lodenn geltieg ha kaset war-raog eta. A-benn bremañ, ez eus dija, war rollou ELY, anoioù 96 Mennad bet degemeret gand komunioù a Vreiz-Uhel, bet moueziet gand o Huzulioù er memez koulz-amzer ha Kuzulioù Kornog Breiz. Or-bezet soñj ivez ez eo skoaziet ar goulenn Lezenn-stur gand Kuzulioù an Il-ha-Gwilen hag al LigerAtlantel...

An oll Vennadou-ze a bouez stard diouz kostez ar Gouarnamant evid ma vo roet tu a-benn ar fin d'ar Parlamant studia ha mouezia an danveziou-lezenn bet disklêriet ar bloaveziou diweza-mañ, koulz e Kambr ar Gannaded hag er Senad<sup>34</sup>, diwar-benn ar Yezou ha Sevenadurioù-Rannvro.

*Miz Gouere 1992*

E.L Y.18-4-1993

**Jack LANG exit....  
Setu bremañ  
François BAYROU....**

Adaleg Brud Nevez Mezeven-Gouere, warlene, e tiskouezen beza prederiet, - ar mizioù o tremen, - pa ne deue netra resiz er-mêz euz ar reolennoù nevez bet gouestlet gand Jack Lang... E miz Genver e lakeen eur pik-goulennata da heul an nevezintioù disklêriet gantañ en e lizer ar 24 a viz Du d'ar Rektourien, o rei dezo an urz da brienti eur raktres diorren evid kelennadurez ar yezou ha sevenadurioù-rannvro. Tost-braz e oam ouz moueziadeg miz Meurz : mil boent e oa embann ar reolennoù nevez a oa bet kaoz gand ar ministr o embann... Ha pa na vefe kaoud eur chañs bennag e chomfe eun dra bennag war o lerh, - pa deufe eur ministr all e penn an Deskadurez... Brasoh c'hoaz ar riskl da heul

<sup>34</sup>Pemp danvez-lezenn a zo bet disklêriet abaoe 1988 : 2 er Senad (re ARZEL ha GOETSCHY), 3 e Kambr ar Gannaded (re HERMIER, BRIANE ha DOLLO). Sinet int gand ouspenn eun 200 a Gannaded ha Senatourien, anezo izili euz strolladoù politikel disheñvel .

kemennadenn an Deskadurez ar 7 a viz Genver, goude an emgleo sinet gand Kuzul-Meur ar Roen-Uhella diwar-benn ar helenn diouyezeg, stummidigez ar vistri, ar bromesa adstumma taolenn ar studiou en Derez kenta... Hag e roe Lang da houd e vefe embannet ar reolennou nevez a-benn miz C'hwevrer d'an diwezata...

Gwall verr e chome an amzer da Jack Lang evid rei an urziou a vefe greet ganto ar « hammedou a dalvoudegez » war dachenn ar gelennadurez diouyezeg evel a oa bet laret gantañ, - bremañ 'z eus eiz miz, en e lizer d'ar strolladou sevenadurel a Vreiz hag ar Rannvroioù all... Promesa an « importantes mesures complémentaires »-ze evid miz C'hwevrer a zo chomet avad, heb beza sevenet, ... Netra diwar-benn stummidigez ar vistri ha kreski niver ar postou evid lakaad en hent eur gelennadurez diouyezeg wirion. Netra e-keñver eun nevezadur euz taolennou-labour ar skol genta o terhel kont euz ar red m'eo mestronia kerkoulz ar « yez lehel » hag ar galleg... Kement-se oll ne vint bet nemed promesaou a netra, - ha ne vo ket nehet ar ministr nevez gand kavoud da herez a-berz e ziaraoger ar reolennou nevez a vefe bet anezo an « avancées significatives » ma komze Jack Lang anezo, e miz Mezeven, warlene...

Ha setu m'eo bet fiziet karg an Deskadurez d'eur helenner a B/Pau, François Bayrou, hag a oa beteg neuze sekretour-meur strollad ar Hreiz (U.D.C.), kannad ar Pireneou-Atlantel, hag a-hend-all Penn-Rener Kuzul e zepartamant, - eur Bearnad laouen da ziskouez dre an T.V. ne ra ket fae war an Oksitaneg, e yez kenta. Ouspenn-ze n'eo ket didalvez menegi ez eo bet, war a lavarer deom, trigementet yalhadou e Guzul-Meur evid an oksitaneg koulz hag evid an euskareg, an diou yez-rannvro beo-mad en e vro. Daoust hag e talvezfe an dra-ze kement ha lavared e heller fizioud e vo harpet kelennadurez ar yezou rannvroel gand F. Bayrou deut da veza Penn-Rener ar Skolioù ?...

Hañval a ra n'ema ket a-du gand lezel evel m'ema « renevezadur al liseou » evel m'eo bet ijinet en amzer Jospin... ha dalhet dezañ, war-bouez nebeud a dra, gand Lang. Diviz a zo en Deskadurez war ar poent-se hag ahann da zibenn ar miz, e raio ar Ministr e zibab... Daoust hag e kredio cheñch treuz-reolennou Jospin evid an « danveziou-dre-zibab » ha rei da amprouennou ar yez-rannvro er Vachelouriez eun « dalvoudegez-gwellaad<sup>35</sup> » .

Petra da zoñjal neuze ?... Nag ar gostezenn gleiz, nag ar gostezenn a-zehou n'eo ket eet gwall-bell o strivou eur wech disklêriet o danveziou-lezenn evid ar yezou-rannvro (20 skrid a-berz an tu-kleiz ; 17 a-berz an tu-dehou ; 4 all a-berz an oll gostezennou hag a-gevred)... Ministred a zo hag o-deus bet kroget da jeñch an traou : Haby (e gelhlizer, e 1956), Savary (dre gelhlizer ivez, e 1982-83)... Kement-ha-kement eta evid an diou gostezenn, etre 1959 ha 1991...

**A. Keravel**

### **Kemennadenn Jack Lang**

Eun disklêriadenn a zo bet embannet d'ar 7 a viz Genver gand Ministr an Deskadurez, da heul ar zinatur roet gand Jack Lang ha Penn-Rener Kuzul-Meur ar Roen-Izella (Alzas) diwar-benn an diouyezegez e skolioù-bugalogou an departamant-mañ.

Disklêriet eo bet gand Ministr an Deskadurez ema a-du da vad evid lakaad en hent an

---

<sup>35</sup> « talvoudegez-gwellaad » (valeur bonifiante) eun dalvoudegez ma ne vez dalhet kont (er Vachelouriez) nemed euz poentou en tu all da zeg.

diouyezegez er Gelennadurez e-barz ar Rannvroioù dezo o yez o-unan, - diskouezet m'eo bet e oa dizohou mad gand ar stumm-keleñn-ze.

Ne heller nemed beza laouen da heul disklêriadenn J. Lang hag e hortozer bremañ an dekregioù a lakay en implij urzioù ar gemennadurez nevez.

Goulenn a ra Emgleo Breiz ma ne vo ket an urzioù-ze lakeet da dalvezoud tra ken nemed evid an Derez kenta : bez' e tleont beza implijet ivez er Skolachou ha Liseou. Gortoz a reer eta ma vezo heb dale urzioù nevez war an tu-ze, da rei tro lakaad da vad war-raog « yezou ha sevenadurioù Bro-Hall » (evid implij an derminologiez ma ra ganti ar Ministr), heb ar skoillou lakeet war o hent.

A-hend-all, e ro J. Lang da houd ema a-du evid rei plas er Gelennadurez-Stad d'ar hlasou diouyezeg digoret gand strolladoù prevez.

Disklêriet eo ivez gand Ministr an Deskadurez hag ar Sevenadur ema-eñ a-du gand sina Chart Europa ar Yezou-Rannvro pe Minorezel, na pa jomfe eur poent bennag heb na vefed a-du ganto.

**Eur helou all :** kouviet eo an Emzavioù Sevenadurel a Vreiz d'eur vodadeg e Rektouriez Akademie Roazon da groui eur Huzul Akademiell a roio e ali d'ar Rektor diwar-benn Keleñn ar Yezou ha Sevenadurioù Rannvro. Kouviet eo bet « Emgleo Breiz » ha « Skolig al Louarn » d'ar vodadeg-se. Kelou a vo roet e Brud Nevez miz C'hwevrer a-zivoud ar pezh a vo bet divizet er heñver-ze.

## Ar Helenn brezoneg e 1992-93 Reizadennou

Digand Erwan Evenou, karget euz ar Yez hag ar Zevenadur-Rannvro en Akademiezh Roazon, on-eus degemeret diou eveziadenn<sup>36</sup> a-zivoud ar chifrou roet e Brud Nevez miz Meurz hag o tenna ouz ar sifrou embannet gand ar Rektouriez en e skrid d'ar Huzul-Alia bet bodet e Roazon, an 20-1-93.

**Eveziadenn genta** : evid klasou diouyezeg an Derez Kenta, red eo konta 546 bugel en oll rag dizoñjet e oa bet gand ar Rektouriez konta bugaligou ar « skoliou-mamm », 273 anezo. Ar pezh a ra eur hresk a 50% e 1992-93 e-keñver ar bloaz kentoh. Eur fazienn ha n'om ket kirieg anezi.

**Eil eveziadenn** : re wir eo ez eus bet digresk war niver al liseidi oh heulia ar henteliou brezoneg : 192 er bloavezh 91, - 850 e 92 (sifrou ar Rektouriez). N'ema ket ali E. Evenou teurel ar beh war ar reolenn nevez (hini Jospin e-keñver an danveziou-dre-zibab, lakeet en implij e 1992 ha dalhet d'he implij gand Lang). Diouz ma skriv deom Evenou an « deskadurezh dired » (= an danvez-dre-zibab) eo a vefe kirieg « 'M-eus aon, a skriv or henvroad, o-deus desket lod, diwar o houst, ne oa ket ken didorr-ze an amprouenn vrezoneg dired, ha ne vez ket roet eun notenn vad evid ar boan lakaad e ano »

Eun ali disheñvel a glevan digand kelennerien a zo : ar skoill a zo ar reolenn ijinet dindan Jospin : daou zanvez-dre-zibab nemetken a heller dibab en Eilved klas, - eur reolenn re striz hervez m'e-noa lavaret Lang hogen n'eo ket bet tennet kuit... Hag a zo bet digaloneket en abeg dezi liseidi ar Henta klas koulz ha re ar Hlas Diweza... Ar memez ali on-eus klevet digand kelennerien ar Rannvroioù all, e Bro-Oksitania, da skwer... Ha dalhet e vo ganeom da houlenn ma ve aotreet dibab ar brezoneg evel trede pe bevarved « danvez-dre-zibab » adal an Eilved Klas. O veza evel-se a-unan gand Oksitaniz, Euskariz, Katalaniz.

---

<sup>36</sup> Kavet e vo lizer Evenou e-barz « A beb seurt »





PELEH EMAER ERRU  
**gand Strivadenn Mennadou**  
 « Evid Lezenn ar Yezou »  
 ar Huzuliou Tiez-kêr ?

**Departamant Penn-ar-Bed** (283 gomun) :

An oll gomuniou nemed diou o-deus moueziet ar Mennad kinniget gand E.L.Y., en e stumm berr pe en e stumm hir (ar stumm bet moueziet da genta gand ar Huzul-departamant ha, da houde, gand ar C.E.S. ha Kuzul-Meur Breiz). Eun toulladig a zo hag o-deus degemeret war eun dro eur mennad e brezoneg.

N'eus bet nemed *daou* Guzul Ti-kêr hag o-deus nahet rei degemer vad da vennad Kuzul Penn-ar-Bed hag hini Kuzul-Breiz, pe d'ar skrid kinniget gand E.L.Y. : an daou Guzul-ze a zo hini **Tregourez** hag hini **Sant-Turian**.

\*

\*\*

**Departamant Aocheier Arvor :**

1) Oll gomuniou aroñdisamant pe pastellad-bro **LANNUON** (60 komun) o-deus roet eun degemer vad d'ar Mennad kinniget gand E.L.Y. pe da skrid ar Mennad moueziet gand Kuzul Aocheier Arvor pe da hini Kuzul-Meur Breiz, damheñvel ar skridou anezo. - Setu amañ roll an 60 a gomuniou-ze (reñket diwar urz o lizerenn genta) :

Berhed	Louanneg	Pouldouron
Ar C'hwerhed (Koz-Varhad)	Mantalod	Prad
Hengoat	Perroz	Priel
Kamlez	Perwenan	Ar Roh
Kaouenneg	Peurid-ar-Roh	Rospez
Kawan	Pleuvian	Sant-Ke-Perroz
Kemperven	Pleuveur-Bodou	Tonkedeg
Kerborz	Pleuveur-Gaoter	Trebeurden
Kervaria-Julard	Plistin	Tredarzeg
Koadaskorn	Plouared	Tredrez
Koatreven	Plouber	Treduder
Landreger	Plougraz	Tregastell
Langoat	Plouillo	Tregrom
Lannuon	Plouleh	Treleven
Lanveleg	Plonewe-Moedeg	Tremel
Lanvilin	Plougouskan	Trezeni
Lanvodez	Plounerin	Trevou-Tregigneg
Lezardrev	Plouzelam	Trogeri
Logivi-Plougraz	Plouzeniel	Ar Vinihi.
Lokmikêl	Plufur	
	Pluzuned	

b) En aroñdisamant pe pastellad-bro **GWENGAMP** (85 komun euz Breiz-Izel ennañ), o-deus bet moueziet a-du gand al Lezenn-diazez evid ar brezoneg hag ar yezou-rannvro ar homuniou-mañ da heul (reñket o anoioù hervez o lizerenn genta) :

Ar Chapel-Newe	Boulvriag	Goudelin
Bear	Bringolo	Groñvel
Benah	Bulad-Pistin	Gurunhuel

Gwengamp	Meilloneg	Runan
Kalanel	Mêl-Karhaez	Skiñvieg
Kallag	Pabu	Sant-Eganton
Kanihuel	Pederneg	Sant-Fieg
Kemper-Gwezenneg	Pered	Sant-Ijo
Kerien	Pleuzal	Sant-Jelven
Kervoroh	Pont-Melvez	Sant-Jili-ar-Hoad
Koadoud	Plouagad	Sant-Kleve
Korel	Plouagor	Sant-Lorañs
Laniskad	Plougerne	Sant-Nikolaz-ar- Pelem
Lanrodeg	Plougoñver	Sant-Servez
Laruen	Plouisi	Sant-Yann- Kerdaniel
Lokenvel	Plonewe-Kintin	Trabrian
Lohueg	Plourah	Tregonnev
Louargad	Rostren	Tremargad.

(54 Guzul beteg bremañ eta).

Hag e chom an 29 gomun-mañ da heul (- hag int euz Breiz-Izel,-) heb ma vefe bet moueziet ganto, beteg-henn, ar Mennad kinniget gand E.L.Y. :

Brelidi	Mêl-Pistin	Sant-Drian
Duod	Magor	Sant-Jili-Plijo
Gras	Mousteru	Sant-Konan
Gwareg	Paoul	Sant-Nigouden
Karnod	Plelann	Sant-Pever
Kergrist-Mouelou	Plevin	Señven
Kerber	Plijidi	Treglañviz
Landebaeron	Pluskelleg	Treogan
Leskoed (-Gwareg)	Pontrev	Ar Vouster.
Lokarn	Purid-Kintin	

3) En aroñdisamant pe pastellad-bro **SANT-BRIEG** e konter 22 a gomuniou euz Breiz-Izel (hag int e kantoniou Lañloñ, Pempoull ha Plouha). Moueziet eo bet gand kuzulioù Tiez-kêr ar 15 komun-mañ da heul a-du gand eul lezenn evid ar Yezou-Rannvro :

Iviaz (pe Eviaz)	Pempoull	Plouha
Kervond	Plehedel	Pludual
Lañloñ	Pleraneg	Tregidel
Lañlou	Plian	Tremeven
Panvrid-ar-Beskont	Ploueg-ar-Mor	Tresigne

Hag e chom 7 komun all a Vreiz-Izel heb m'o-defe o Huzulioù degemeret beteg bremañ ar Mennad kinniget :

Ar Faved	Lañleñv	Plourio
Gwanah	Lannebeur	Trevereg.
Lañleñv	Ar Merzer	

En oll, evid lodenn Vreiz-Izel departamant Aocheier Arvor, konta reer, beteg-henn, ez eus 130 gomun ha m'o-deus o Huzulioù degemeret ar Mennad. Hag ez eus 35 a gomuniou ha n'o-deus ket, evid an ampoent, moueziet ar skrid kinniget : bez' e heller gortoz, avad, e

vo diskouezet gand unan bennag anezo c'hoaz emaint a-du, ind-i ivez, evid kas war-raog mennoz "statut" ar brezoneg hag ar yezou-rannvro all.

### **Skoazell Kuzulioù Tiez-kêr lodenn Breiz-Uhel departamant Aocheier-Arvor :**

Eun toullad mad a guzulioù euz Breiz-Uhel (Pe a oa euz Breiz-Izel eun deg vloavez bennag 'zo, hogen bet dilezet enno implij ar brezoneg gand ar peuz-oll euz tud ar gomun) o-deus moueziet a-du gand goulenn eul Lezenn evid ar Yezou-Rannvro, - lod anezo o poueza evid ma talvezo al lezenn-ze evid ar Sevenadur breizeg dindan e zaou stumm : ar stumm keltieg pe vrezoneg hag ar stumm galloeg. Setu amañ da heul roll ar huzulioù-ze, 43 anezo beteg-henn (reñket hervez o lizerenn genta, evel evid ar rollou all) :

Binic	Pleneuf-Val-Andre	Saint Gildas
Boqueho (Bosko)	Plerin	Saint-Glen
Caulnes	Pleudihen-sur-Rance	Saint-Goueno
Châtelaudren	Pleslin-Trigavou	Saint-Mayeux
La Chèze	Ploufragan	Saint-Michel-de-Plelan
Dinan	Plouvara	Saint-Quay- Portrieux
Le Haut-Corlay	Pordic	Saint-Samson-sur- Rance
Lamballe	Quevent	Trebry
Matignon	Quintin	Tregueux
La Meaugon	Sevignac	Treguidel
Merdrignac	Saint-Barnabe	Treveneuc
Mûr-de-Bretagne	Saint-Bihy	Trevron
Planguenoual	Saint-Brandan	Le Vieux Bourg.
Pledeliac	Saint-Brieuc	
Plenee-Jugon	Saint-Connec	

### **Departamant ar MORBIHAN**

1) En aroñdisamant pe pastellad-bro **AN ORIENT**, ar peb muia euz ar Huzulioù Tiez-kêr o-deus en em zisklêriet a-du gand Mennad E.L.Y.. Setu amañ da heul roll an 51 gomun-ze bet degemeret ganto o ali a-du gand goulenn eul lezenn-diazez oh embann gwirioù ar Yezou-Rannvro (anoioù an hêrioù reñket hervez o lizerenn genta) :

En Alre	Kaodan	Planwour
En Arvor	Keranna	Plarnel
Belz	(Santez Anna Alre)	Pleheneg
Berlewene	Kervignag	Pleñwer
Er Boneu	Kewen	Pleskop
Branderion	Kiberen	Ploue
Brandivi	Kistinig	Plougoulen
Breh	Kleger	Pluergad
Bubri	Klegereg	Pluigner
En Drinded	Krah	Porz-Loeiz
Gavr	Landevan	Pouskorv
Groe (Enez)	Lanester	Reanteg
Gwidel	Langidig	Rualleg
En Hen-Bont	Lokmariaker	Santez-Elan
En Ignol	Lokmilkelig	Sant-Per-Kiberen
En Intel	Losteng	Yestel
Kamorh	En Oriant	Er Zent

## Zinzag

Hag e chom an 8 komun-mañ da heul euz Breiz-Izel ha chomet beteg bremañ heb mouezia ar mennad kinniget dezo :

En Ardewen	Landaol	Plunered
Karnag (1)	Lovedan	Sant-Filiber
Kelan	Lokoual	

(Peder Enezenn a zo kontet e pastellad-bro an Oriant : **Enez-Groe** (hag he-deus he Huzul moueziet a-du gand Mennad E.L.Y.), **Enez ar Gêr-Veur** (divrezonekeet, hogen Kuzuliu Ar Palez ha Bangor o-deus moueziet ar Mennad ; kuzuliu Lokmaria ha Saozon n'o-deus ket), hag a-hend-all **Inizi Houad** hag **En-Heidig** ha n'o-deus ket respontet d'or goulennou).

2) En aroñdisamant **POÑDI** : an oll gomuniou diazezet er pastellad-bro-ze euz Breiz-Izel, da lavared eo e leh ma vez dalhet gand eun niver mad a dud da ober gand ar brehoneg (Marteze e faziom evid komun pe gomun. D'ol lennerien da rei deom da houzoud). Setu roll ar homuniou-ze :

Baod	Gourin	Lanouelann
Begnen	Gwennin	Lokmalou
Berne	Gwern	Loguneh
Bertelame	Er Hroesti	Malgeneg
Biuehi-en-deur	En Ignol	Melan
Ar Faoued	Karnasen	Melrann
Geltaz	Langoned	
Er Gemene	Lanijen	

1- Ne fell ket da guzul Karnag degemer mennad pe vennad ha ne zellfe ket war-eeun ouz kudennou ar gomun. Ar Mêr, avad, e-neus bet disklêriet ez eo a-du gand eul lezenn evid ar yezou-rannvro, p'eo bet degemeret ar Mennad dirag Kuzul-Meur ar Morbihan

Mourieg	Prijag	Santez-Berhed
Neulieg	Remengol	Sant-Karadeg-
Noal-Poñdi	Rualleg	Tregomel
Persken	Ar Zent	Sant-Teliav
Pleurdud	Seglian	Sant-Tudual
Ploure	Silieg	Er Vouster-Remengol
Pluniav	Ar Sorn	
Poñdi (Poñdivi)	Sant-Inan	

- (43 gomun eta)

Ar peurrest euz komuniou pastellad-bro Poñdi a zo komuniou euz lodenn halloeg pe zivrezonekeet nevez 'zo pe abaoe enklask Sebillot, - lod a zo anezo o veza moueziet evid Mennad E.L.Y.- evel **Brehan-Loudieg**, **Kerforn**, **Gwehenno** pe **Sant-Aleustr**, da skwer.

3) En aroñdisamant pe pastellad-bro **GWENED**, e konter eun niver komuniou a Vreiz-Izel kalz bihannoh eged en daou bastellad-bro all euz an departamant. En o zouez, e konter, beteg bremañ, ar 17 a gomuniou-mañ m'o-deus o Huzul Ti-kêr roet degemer vad da Vennad E.L.Y. :

En Arvor-Baden	Gregamp	Lokmaria-Gregam
Baden	Gwened (Kêr-Wened)	Meukon
Brandivi	Inizenah (Enez-er- Veneh)	Sterwenn (Mousterwenn)

Noyaleu	Sant-Teve	Surhur
Pleskop	Sarhao	Teiz
Senolf	Sine	Treflean

Hag e chom kuzulioù ar 7 komun-mañ da heul, - hag ind-i komuniou euz Breiz-Izel, - ha n'o-deus ket bet moueziet, evid an ampoent, a-du gand ar mennad evid Lezenn ar Yezou-Rannvro :

Aradon	Kolpeu	Sant-Armel
En Arh (Enez-Arh)	Lokeltaz	
En Hezeu	Pleren	

Ar peurrest euz komuniou pastellad-bro Gwened a zo anezo euz Breiz-Uhel (lod bet dilezet ganto implij ar brezoneg abaoe Enklask Sebillot (1866) ha zoken, evid hiniennou, abaoe nebeutoh a vloaveziou, eun darn anezo o veza degemeret mennad E.L.Y. (meneget eo o anoioù amañ izelloh gand ar re a Vreiz-Uhel).

**Skoazell Kuzulioù Tiez-kêr a zo euz lodenn Breiz-Uhel departamant ar Morbihan :** evel e lodenn Breiz-Uhel departamant Aocheier-Arvor, eun toullad a gomuniou a Vro-Hallo o-deus moueziet ar skrid o houlen eul Lezenn a-ziazez evid ar Yezou-Rannvro, - darn outo oh ober meneg euz an daou stumm a zo da zevenadur Breiz : ar stumm keltieg hag ar stumm galloeg. Setu ar roll anezo :

Bangor (Enez-Veur)  
 Brehan-Loudeac  
 Camoël  
 Carentoir  
 Damgan  
 Ferel  
 Guehenno  
 Hellean  
 Kerforn  
 Ar Palez-(Enez-Veur)  
 Peillac  
 Penestin-sur-Mer  
 Ploermel  
 Priziac  
 Radenac  
 Ruffiac  
 Serent  
 Saint-Allouestre(Sant-  
 Eleustr)  
 Saint-Jean-la-Poterie  
 Saint-Lery  
 Saint-Thelo  
 Saint-Vincent-sur-Oust  
 Sulniac  
 Thehillac  
 Le Tour-du-Parc  
 Tredion  
 La Trinite-Surzur.

\*

\*\*

## AN OLLADOU

Da heul an oll resisaduriou roet amañ a-zioh, e ranker kemma eun tamm bennag chifrou dizohou Strivadenn E.L.Y. roet evid dibenn miz Gwengolo 1993. Setu 'ta ar chifrou nevez a heller rei beteg bremañ (derou miz Genver 1994), - hag evid Breiz-Izel nemetken :

Penn-ar-Bed.....	281 Mennad evid 283 gomun = 99,29% anezo
Aocheier Arvor.....	129 Mennad evid 165 komun = 78,18% anezo
Morbihan.....	112 Mennad evid 127 gomun = 88,18% anezo
En oll, evid Breiz-Izel...	522 Mennad evid 575 komun = 90,78% anezo

N'on-eus ket greet ar gont da vad evid ar Mennadou moueziet gand komuniou a Vreiz-Uhel.

\*

\*\*

Roet e vo diwezatah roll ar homuniou euz departamañchou an **Il-ha-Gwilun** hag al **Leger-Atlantel** o-deus moueziet a-du gand ar Mennadou kinniget gand E.L.Y. - Degas a reer da zoñj ez eo bet degemeret gand Kuzuliou-Meur an daou zepartamant-se, e 1991, ar skrid kinniget ganeom hag a-du gand eul "Lezenn-statut" diwar-benn Sevenadurez Breiz dindan he daou stumm, - brezoneg ha galloeg.

Rollou bet savet gand **A. Keravel**, Kensekretour E.L.Y. - Mennadou bet dastumet gand **Remond ar Vod** (marvet e miz Eost 92, hag emeur dleour dezañ p'eo bet degemeret skrid E.L.Y. gand oll gomuniou Bro-Lannuon ha kalzig re all ouspenn), gand **Silveñ Loguillard**, Prezidant ar Gevredigez ha **Mikel Oiry** pa oa o chom en Aocheier Arvor. Evid departamant ar Morbihan eo bet prisiuz-dreist labour dibaouez **Jilberta Kervarreg** (Hen-Bont), - bet kaset ganti meur a gant lizer hag a daoliou-pellgomz.

Miz Genver 1994,  
EMGLEO EVID LEZENN AR YEZOU (E.L.Y.)

13-10-1994

## **Berz kaer Goulennadeg E.L.Y. ar Huzuliu-kêr**

Ar houlennadeg vraz urziet gand E.L.Y. ha bet kaset da Vêred Komuniou Breiz e sell kaoud eul « Lezenn-a-ziabez » diwar-benn ar Yezou ha Sevenaduriou-Rannvro a zo bet moueziet beteg bremañ gand **632** a Guzuliu Tiez-kêr, en o zouez **529 Ti-kêr a Vreiz-Izel**. Harpet eo a-hend-all gand or **pemp Kuzul-departamant** ha gand **Kuzul-Meur Breiz**.

Ar hantadou-ze a vennadou a zo roet d'anaoud da Vinistr an Deskadurez, o houlenn ma vo embannet gantañ hebdale an urziou gouestlet, bremañ zo bloaz, e Kêr-Pau, da lakaad da vad en hent kelennadurez ar yezou-rannvro. Hag an dra-ze a-raog digor ar bloavez-skol 94-95 evid ar Henta hag an Eil-Derez. Poent braz e vefe rei urziou resiz war-ze pe e vo daleet c'hoaz...

Hervez ali an Ensellerien-Veur Akademiezh Muller ha Salles-Loustau hag hini an Ensellerien Akademiezh, prest ema ar reolennou nevez. Arabad e vefe eta dalea c'hoaz eur bloavez all evid o embann hag o lakaad da veza implijet da vad. Rag-se e hortozer bremañ an urziou nevez pe e vo bet touellet ar hant milierou a zivennourien ar yezou ha sevenaduriou-rannvro m'o-deus or Huzuliu Tiez-Kêr komzet evito. Mil boent e vefe eta e teufe er-mêz hebdale ken, ar reolenn nevez gouestlet, bloaz a zo, gand an Aotrou Bayrou, e Pau, diou wech diouz reñk.

**E.L.Y.**  
**(Evid Lezenn ar Yezou)**

## **Berz kaer Goulennadeg E.L.Y. ar Huzuliu-kêr**

Ar houlennadeg vraz urziet gand E.L.Y. ha bet kaset da Vêred Komuniou Breiz e sell kaoud eul « Lezenn-a-ziabez » diwar-benn ar Yezou ha Sevenaduriou-Rannvro a zo bet moueziet beteg bremañ gand **632** a Guzuliu Tiez-kêr, en o zouez **529 Ti-kêr a Vreiz-Izel**. Harpet eo a-hend-all gand or **pemp Kuzul-departamant** ha gand **Kuzul-Meur Breiz**.

Ar hantadou-ze a vennadou a zo roet d'anaoud da Vinistr an Deskadurez, o houlenn ma vo embannet gantañ hebdale an urziou gouestlet, bremañ zo bloaz, e Kêr-Pau, da lakaad da vad en hent kelennadurez ar yezou-rannvro. Hag an dra-ze a-raog digor ar bloavez-skol 94-95 evid ar Henta hag an Eil-Derez. Poent braz e vefe rei urziou resiz war-ze pe e vo daleet c'hoaz...

Hervez ali an Ensellerien-Veur Akademiezh Muller ha Salles-Loustau hag hini an Ensellerien Akademiezh, prest ema ar reolennou nevez. Arabad e vefe eta dalea c'hoaz eur bloavez all evid o embann hag o lakaad da veza implijet da vad. Rag-se e hortozer bremañ an urziou nevez pe e vo bet touellet ar hant milierou a zivennourien ar yezou ha sevenaduriou-rannvro m'o-deus or Huzuliu Tiez-Kêr komzet evito. Mil boent e vefe eta e teufe er-mêz hebdale ken, ar reolenn nevez gouestlet, bloaz a zo, gand an Aotrou Bayrou, e Pau, diou wech diouz renk.

**E.L.Y.**  
**(Evid Lezenn ar Yezou)**  
40bis, ru ar Republik, 29200 Brest



